

**BIZITO**  
DA  
**ZANT JOSEPH**

GANT  
HISTOARIO A CANTICO

---

Proprieté de l'Éditeur

---



LANNHUON  
ENN TI INTANVEZ AR GOFFIC, MOULER-LEVRER  
1868



**BIZITO**

DA

**ZANT JOSEPH**

GANT

HISTOARIO A CANTICO

Deuxième Édition



LANNUON

ENN TY AR GOFFIC, MOULER-LEVRER

1868

BLIXITB

# SAINT JOSEPH

HISTOIRE & CANTIQUE

DE SAINT JOSEPH



LAZZONI

EN LA RUE BOBBI, MOULIN-LEZ-TOURNAI

1848

---

---

Avec permission de l'autorité  
Ecclésiastique.

---

---

---

---

KELENNADUREZ.

Z. Alphons a Liguory en deus kompozet eul levr hanvet : *Bizito d'ar Sacramant santel a d'ar Oerc'hes Vari*. Eun niver bras a ineo devot a neum servij gant kals a froez spirituel deus al levr-ze en pehini en deus ar zant bras-ze evel laket dre skrit an ol zantimancho a garante a da en e galon en andret on Zalver Jesus-Krist ag e Vam biniget. Mes an devosion evit ar patriarch evurus Z. Joseph o vean deut da greski en Ilis kristen aboue eur pennat amzer, dre eun inspirasion particulier deus a vadelez infinit an Autro Doue, pehini a ro graso dreist ordinal dar re a so devot en e andret, kals a ineo mad o deus kemeret ar c'his da ober ie dan divenner bras-ze deus an Ilis eur vizit pemdeiek, oc'h adressi dean bemde pedenno fervant. Kement-ze a neus douget an auteur deus al levrik - man da dastum deus al levrio kompozet en honor da Z. Joseph eur ser-

ten nombr a bedenno, a da distribui ane dre an ol deio deus ar mis; ag e c'heller lavaret ane epad ar bla; ag ispisial e mis Meurs, pehini a so hanvet mis Z. Joseph. En tuont dar pedenno-ze a so bet laket an offis bian a Z. Joseph ganit oresono, hymo a kantiko evit e henori, ag erfin ar pedenno deus an Ilis evit an dud prest da vervel, pa c'he Z. Joseph ar patron deus ar maro mad. Ar memes desir da henori a da ober henori ar zant venerabl-ze a neus inspiret din ar volonte da dreñ al levr-ze e brezonek evit utilite ar Vretonet pere, o vean ken devot evel ma hint en andret ar Oerc'hes sacr, na hellont ket mankout da gaet eun devotion vras evit an ini a neus bet an honor da vean unisset ganti dre ar chaden zantel deus ar briadelez.

---

OFFRANS DEUS AL LEVRIK-MAN  
DA Z. JOSEPH.

Permetet dimp, ni o suppli, o Z. Joseph, on tad ker, offr dec'h al levrik-man. Plijet ganec'h goulen digant Jesus-Khrist, o mab, e venedikision oar eul labour antreprenet hepken evit prokuri e c'hloar, ini ar Oerc'hes glorius Vari ag o c'hini. Rag, en gout a ret, o zant bras, on dousan plijadur a vije goelet meuli e pevar c'horn ar bed o c'hano gant re Jesus a Mari. Beet ar vadelez da rei dal levr-man ar peza vank dean evit gallout alumni en ol galono eur garante ardant evit o c'hano, a da lakat enne eur gonfians vras en o proteksion. O pedi a reomp dreist pep tra da c'houlen digant Doue ma vo on c'halono ol anflamet ganit ar garante divin, a mon devo ar c'hras da gerzet fidelamant dre an hent a so bet pleustret arog dimp gant o famill biniget, hep trei james dioar anean, evit ma hel-

fomp, goude bean pratiket oar an douar ar  
vertuio a bere o c'heus roet dimp exemplo  
ken admirabl, kavet erfin ar bonheur da  
gontempli Jesus, Mari a Joseph en tro pad  
an eternite. Evelse beet groet.

J M J

---

**QUENTAN BIZIT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli,  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

O zant Joseph, zant bras meurbet, dign  
etouez an ol zent deus eur respet, eur ga-  
rante ag eur gonfians spicial, ken abala-  
mour dan exselans deus o vertuio, ken  
abalamour dar gloar a behini a jouisset en  
env a dar gallout dimeus o c'hintersession;  
hirie, en prezans Jesus-Krist pehini en  
deus o choaset evit tad, ag ar Oerc'hes  
Vari pehini e deus o resevet evid pried, o  
kemer a ran evit bean ma avokat dirag  
Jesus a Mari. Beet ma frotektor a ma zad.  
Resevet ar bromesse a ran dec'h da gaet  
sonj ac'hanoc'h a do c'henori en ol deio  
deus ma bue. Plijet ganec'h, me o ped, ma  
lakat dindan o proteksion spisial, a ma di-  
gemer en nombr deus o fidelan servijerien.  
Ma azistet ebars em ol œuyro, groet ma vin  
agreabl da Jesus a da Vari, a deut dam zi-  
kour oar ma maro. Evelse beet groet.

**EIL BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli,  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

O Z. Joseph glorijs, priet donezonet deus a eur burete hep e far, ma brassan desir eo bean zikouret ganec'h pa vin em tremenvan. O! me o ped, accordet din ar c'hras presius-ze a c'houlennan diganec'h abalamour dar garante dre behini e c'he bet unanet o kalon gant kalono Jesus a Mari epad mo c'heus bevet oar an douar. O! peet truez ous eur paour kez pec'her, pehini, siouaz dean, en deus lezet e galon da vean mastaret gant mil bec'het. Obtenet din ar c'hras da vean purifiet, a distaget deus a ol vado a plijadurezo ar bed, a ma vo ma c'halon evel o c'hini unanet da viken gant kalono Jesus a Mari. Renons a ran diour vremen da bep karante disordren evit an treo krouet, a da gement a ve kontrel da zantelez gristen; a prometi a ran repari dre ar glac'har ag ar binijen an ol bec'hejo dre

bere e meus mastaret ma ine. O Z. Joseph biniget! na bermetet ket e teufe ar pe-c'hejo milliget-ze dam zroubli en heur ar maro; a ma rentet dign da resev neuse an azistans konsolant-ze a akordet ordinal dar re a so pur a chast a speret ag a galon. Evelse beet groet.

**TAERVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli.  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

Eur c'hoant bras a meus, o Z. Joseph glorijs, da rentan dec'h pep sort gloar a pep sort honor. Mez petra a ouffe bean muoc'h honorabl evidoc'h a muoc'h agreabl do kalon evit ar pezo a lennomp en Aviel, pa deuas an ebestel da lavaret ar c'homzoman : *Kavet on deus Jesus a Nazaret, mab da Joseph.* (Joan. I, 45.) Mez bean so eun testeni c'hoas muoc'h presius. Mari e c'human, o vean kavet Jesus ebars en templ a Jerusalem o tisput ous an doktoret, a lavaras dean ar c'homzoman : *O tad a*

*me e oamp ous o klask gant nec'hamant.* Gal-  
lout a rer eta, o zant bras, gleout a rer me-  
mes o c'henvel tad Jesus. An Tad eternel en  
deus o choaset c'houi o c'hunan etouez an ol  
dud deus ar bed, evit derc'hel e blas, a bean  
tad de Vab unik oar an douar, ag evit kavet  
gant lod er galite-ze a dad eun Doue, pe-  
hini a zeblante aparchant ontan hepken.  
Eur joa vras a meus, o zant Joseph, ma  
zad leun a vadelez, pa en deus Doue deur-  
veet akordi dec'h eun honor ken souezus;  
a brassoc'h joa a meus c'hoas dre ma en  
deus roet dec'h eur zantelez dign deus  
eur garg ken huel. O ! pebes santiman-  
cho a deneridigez en deus Doue inspiret  
do kalon evit e Vab unik pehini a deue  
da vean o mab o c'hunan ! Ia serten, o  
karante evitan a so bet dreist an ini o deus  
bet evit o bugale an tado ar muan tener,  
deus a bere ar garante ne de bet biskoas  
nemert evel eur fulen dister e kichen o  
c'hini. Ah ! dre ar garante-ze pehini e deus  
anflamet o kalon evit Jesus, groet, me o  
ped, ren em c'halon ar garante divin. Pa  
oc'h tad, plijet 'ganec'h exerci em andret  
eur vadelez a dad; rag adalek ar momet-

man e fel din o sellet ag o c'heneri evel ma  
gouir dad. Evelse beet groet.

---

**PEDERVET BIZIT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli,  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

O patriarch evurus Z. Joseph ! o pedi a  
ran gant ar brassan humilite, dre ar garan-  
te ardant o c'heus bet evit ar baourte,  
a dre ar zoumission ag ar joa a galon gant  
pehini o c'heus supportet al labour skoui-  
zus deus ar vicher izel o c'heus groet, na  
permetet ket e ven dallet gant an lugern  
faus deus ar binvidigez; mes ma zikouret  
da heuil an exemplo roet din gant Je-  
sus a Mari, a ganec'h o c'hunan, a ma  
zellin ar baourte evel eun dra muoc'h  
dign a istim evit an oll vado deus an  
douar. O gouir dad ar bevien, na lezet  
ket ma c'halon da goean en dromple-  
res-ze deus ar bed; mes groet din lakat  
ma ol fians er brovidans a Zoue, evit na  
deui ket ma ine dan eun drubuillan gant



ar zoursi deus an affero tampoerel, mes da lakat e vrassan zoursi da akuisitan an tensorio deus an env. Er vro selestiel-ze e c'hesperan, mar ben assistet ganec'h oar ma maro, cavet eun digemer favorabl, evit resev ar rekompans prometet d'ar re a so paour a speret ag a galon. Evelse beet groet.

---

**PENBET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli,  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

O Joseph, zant evurus, choaset gant an Dreindet adorabl, evit bean priet da Vam Doue, an æle ag an dud a gle bean a unan evit o c'heneri ag o tisklerian evurus, abalamour dan dignite dispar a behini e jouisset, o c'hunan hepken, etouez an ol habitantet deus an env a deus an douar. Nen don me nemert an disteran deus an ol grouadurien, a koulskoude e kemeran an hardiegez da offr dec'h ar zantimancho a garante a so em c'halon, a da lavaret dec'h gant an æle a gant ar zent : Henor dan ini

a so bet kavet dign da vean priet da Vari! Gloar dar fourdelizen a burete unisset dre ar briadelez gant an ini a so bet hanvet ar roz mysterius, ar roz preservet a gorrupsion ! Henor a gloar dan ini a so bet evel an æl gardien, karget da evessat an ini e deus servijet a demeureans dar Verb inkarnet ! O priet chast ag evurus, obtenet evidon, me o suppli, ar c'hras da garet evel doc'h ar burete; a ma zikouret da drec'hi an ol dentasiono a bere ezoc'h bet preservet pe dre eur privilej partikulier, pe dre an exselans deus o vertuio. Evelse beet groet.

---

**C'HOECVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, mo suppli,  
Deut dam zikour en heur dimeus ma angoni.*

O Z. Joseph, ar brassan deus ar batriarchet, o choas a ran hirie evit ma zad, a stouet ous o treid, e c'hoffran dec'h gant respet ma ol veulodio. Ar patriarch ansien Joseph a oelas an eol ag al loar o rentan henor dean. Kement-se na oa ne-

mert eun skeud ag eur profesi deus ar pez a so bet c'hoarveet ganec'h : rag ar gouir eol a justis, pehini eo on Zalver Jesus-Krist, ag al loar mysterius, da lavaret eo ar Oerc'hes Vari, a zo en eum zoumetet doc'h autorite e kalite a benn tiegez. Pa arias ar patriarch Jakob en Ejyp, e rentas pep honor da Joseph e vap evel dan eil roue deus ar vro, ag e exempl a inspiras de vugale al eur respet ag eun oboissans vras evit o breur. Pegement eta na gle get exempl Jesus-Krist, pehini en deus o c'henoret evel e dad, ma alian do c'henori a do serviji ! O ! na vepriset ket, me o ped, an ini en deus eur c'hoant ken bras do klorifian. Beet sonj penos ar patriarch ansien-ze, a behini e touget an hano, na veprisas ket e vreudeur, daoust pegen didrue e oaint bet en e andret. Rei a reas de memes merko bras a garante, o digemer a reas gant dousder, o froteji, o maga a reas, ag o delivra a reas deus an naon a deus ar maro. Na vankfet ket ie dam proteji, o zant bras, pa ret zantout an effejo deus o madelez a deus o kallout bete dan dud ar muan fal ag ar muan ingrat. Ma resevet en nombr deus o

pugale ar muan karet. Beet adaleg hirie ma zad, ma avokat a ma zouten ; rag o choas a ran breman evit ma zad a ma frotektor ; ag en eum lakat a ran, evel eur mab, dindan o patronach bete fin ma bue. Evelse beet groet.

---

**SEIZVET BIZIT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O ma frotektor zantel, pegen kaer e c'heo bet o c'heur divoean ! Pegen desirable eo kavet eur maro hanval ous o c'hini ! Meritet o c'heus eur maro ken zantel dre ar zantelez deus o pue. Evidon me, dre ma bue fal a kriminel, na meus meritet nemert eur maro maleurus. Mez nag ewitse, mar deuet dam diven, na vin ket kollet. Na noc'h ket bet hepken eur mignon bras dam barner ; mez bet oc'h en tuont e c'hardien ag e dad mager, a ma o pe ar vadelez dama rekommandi dean, na hallo ket ma c'hondaoni. O patriarch zantel, o kemer a ran evit bean goude Mari ma avokat a ma

fatron. Prometi a ran renta dec'h bemde, bete fin ma bue, eun henor partikulier benag evit en eum lakat dindan o proteksion. Dre garante Jesus a Mari, akordet din ar bonheur na veritan ket, da vean zellet evel unan deus o servijerien. O pedi a ran, dre an dousder a neus darempred Jesus a Mari prokuret do calon epad o pue, deut dam sikour hepret, evit na deui biken ar pe-c'het marvel dam pellat deus ma Doue. Plijet ganec'h, abalamour dar soign a gemeras ac'hanoc'h Jesus a Mari en o c'heur divoean, ma asistan oar ma maro, evit mam bo ar chans da vervel e kompagnunez Jesus a Mari ag en o c'hini; a da vont goudeze do trugarekat er barados, a da veuli Doue assembles ganec'h epad an eternite. Evelse beet groet.

---

**EISVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dalc, etc.*

O ma zad ker Z. Joseph, nen de ket hep reson e zoc'h hanvet, etouez an ol zent, pa-

tron an dud a so en o fasion, a protekteur partikulier ar re o deus eun desir guirion da gaet eur maro mad. O maro c'houi a so bet ken dous, ken kaër, ken presius, ma karje an ol dud vad kavet eun evelep maro. Eki-chen o koële a vije dalc'h mad Jesus a Mari, zoursius an eil ag egile da rentan dec'h an ol servijo o poa rentet de epad o pue, a do soulaji e pep feson, evel ma hel-lent ober gant o faourante. Jesus a greske o kouraj dre ar c'homso a vue eternal a lavare dec'h. Pegen alies en deus an harpet gant e zorn o pen dinerset? Pegen alies e deus Mari torchet ar c'hoëzen dioar o pisaj dislivet gant ar c'hlenvet? O ma zad ker, a possubl a oa dec'h mankout da vervel en eun transport a garante, pa neum oelec'h asistet gant eun Doue a gant mam eun Doue? An den santel Simeon a disklerias e varvje en peuc'h a leun a joa, abalamour mo devoa e zaoulagat guelet eur momet amzer ar mabik Jesus. A c'houi, o Joseph evurus, pa o c'heus bet ar bonheur epad meur a vla da vevan gantan evel eun tad gant e vugel, den guelet o zenti ouzoc'h betek ar fin deus o pue; pa o c'heus bevet en espe-

rans da resev, er momet deus o c'huanad divoean, ar pok divoean digant Jesus, a da gaet Mari evit zerri o taoulagat goude o maro, pebes sujet no c'heus-u ket bet da ganan evel an den santel-ze : *Hirie eta, o Jesus, ma mab a ma Doue, e kesset e peuc'h o servijer dar bed al.* (Luc, II, 29.) Pa c'he bet eta o maro ken dous a ken precius dirag Doue, goulen a ran ie humblamant oc'h azistans evit ma maro ma unan. Obtenet din, me o ped, er momet-ze ken terrubl evit ar pec'her, ar c'hras da gaet eur glac'har ag eun horreur bras deus an ol bec'hejo demeus ma bue, ag eun esperans ferm er viserikord infinit deus ma Zalver, pehini en deus kommanset an œuvr deus ma silvidigez en eur en c'hraou loenet, ag achuet anean oar eur groas. Groet din erfin lakat ma c'honfians e Mari ag ennoc'h, a mervel en eur bronons a c'heno ag a galon oc'h anoio dous a konsolant. Evelse beet groet.

**NAOVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O Z. Joseph biniget, c'houi a so bet ar servijer fidel a leun a brudans karget gant Doue deus a zoursi e famill. C'houi a so bet karget da broteji ar mabik Jesus, da gonsoli a da zikour e vam santel ; c'houi a so bet choaset da vean eun instrument fidel a behini e c'heo a neum zervijet Doue evit redamsion ar bed ; bet o c'heus ar bonheur da vevan gant Jesus a Mari a da vervel entre o divrec'h. Priet chast da vam Doue, skoër a patron an ineo pur, humbl, pasiant a devot, zellet gant daoulagat a drugare ar gonfians a meus ennoc'h, a resevet gant madelez an testeni deus ma devosion en oc'h andret. Meuli a ran Doue abalamour d'ar faveurio disparen deus accordet dec'h, ag en pedi a ran ma plijo gantan rei din dre o c'hinter-sesion ar c'hras da imitan o vertuio. Pedet evidon, o tad mad, a dre ar garante o c'heus bet evit Jesus a Mari, ag o deus bet Jesus a

Mari evidoc'h, obtenet din ar bonheur da vevan a da vervel e karante Jesus a Mari. Evelse beet groet.

---

**DEKVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O patriarch glorius Z. Joseph, gant pebes kouraj, gant pebes peuc'h a galon oc'h eus suportet an trubuillo bras gant pere ec'he plijet da Zoue aprou o vertu admirabl! Obtenet evidon, dre ar soumission barfet-ze oc'h eus bet, ar memes kouraj ag ar memes pasiantet da anduri an ol boagno deus ar vue ankeniet-man. O protekteur bras deus an dud afflijet a trubuillet, groet mam bo sonj penos an ol boagno a ari genin a deu abeurs Doue, a dre e volante zantel. A pa vin arry e fin ma bue, roet din oc'h azistans ag o patronach, evit mam bo kalon da drec'hi adversourien ma ine er gombat divoan a terrubl-ze a mo da zouten en heur ar maro, a ma hillin, gant o zikour ag ini Jesus a Mari, ariout d'ar vro a evurusdet e

pehini an daero ag an dristidigez a vo chanjet e kantiko a c'hloar ag a levez pere no fin ebet. Evelse beet groet.

---

**UNEKVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O ma zad mad Z. Joseph, ret vije din kavet furnez ar cherubinet ag ardeur ar seraphinet evit gallout selebri evel ma che gleet ar galite glorius a dad mager da Jesus dre behini oc'h eus ar pouar da gommandi dan Ini ous treid pehini an æle memes a neum strink en eur grenan. Leun a admiration ag a reverans evit eun dignite ken huel, eur joa vras a zantan o oelet Mab Doue aketus da zenti ous an disteran merk deus o polante. Pa oelan eun Doue inkarnet oc'h ober entre o taouarn ar sakrifis deus e volante, en eum zantout a ran prest da ober ie dec'h ar sakrifis deus ma ini. Dispozet eta ac'hanon evel ma plijo genec'h. O zellet ous an humilite gant pehini ec'he bet Jesus

en eum zoumetet dec'h, ag en deus rentet dec'h pep sort servijo epad eun niver ken bras a vlavejo, pe e kalite a vab en o ti a Nazareth, pe evel artizan o labourat en o stal, obtenet ma vo ma bolante bepret sujet da volante Doue, en eur zenti ous ar re pere a dalc'h em c'hever e blas oar an douar. Groet din ie en eum skoërian oarnoc'h, evit gouarn hep orgouil ar re a so dindannon, a ma zellin enne personaj Jesus-Krist evit ma e zretin bepret gant dousder a gant karan- te. Evelse beet groet.

### DAOUZEK VET BIZIT.

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O priet chast dar buran a dar zantelan deus an ol oerc'hezet, pebes eur vad evi- doc'h da vean bet choaset gant an Tad eter- nel, dre eur faveur akordet dec'h hepken, evit fiout ennoc'h an objet deus e ol gom- plezans; gant Doue ar Mab evit tremen en o kompagnunez ar blavejo kentan deus e vhe mortel, gant ar Speret-Santel evit o

kargan deus a zoursi Mari e briet, ag o la- kat en e c'hichen evel eun æl gardien evit evessat ar freus a vue deus ec'h intraillo zakr. O Z. Joseph biniget, evurus ar re a laka ennoc'h o c'honfians! evurus ar re a deurveet kemer dindan o proteksion! Priet fidel da vam Doue, diskoet ez oc'h tad d'ar re o deus zoursi doc'h enori, a zikouret ane da brofitan evit o zilvidigez deuz an afflikciono evel deus ar prosperiteo demeus ar vue-man. Mirer Jesus, dign da vean karet gant ar bed ol, sikouret o servijerien ag o servijereset e kreis an danjeurio ag an tru- buillo deus o exil; a groet de zantout pe- gen galloudek eo o pedenno dirag Doue. Groet ma o devo eun devoision tener evit Mari, eur garante ag eur fidelite barfet evit Jesus, eur zujidigez vras dan ol urjo deus ar brovidans divin oarne, ag erfin ar c'hras da vervel evel ma varo ar zent. Evelse beet groet.

**TRIZEKNET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Z. Joseph glorius, ma zad ker, o pedi a ran humblamant, dre an deneridigez gant pehini e deus o priet dous a grasius protejet ar paour kes pec'her, a dre ar garante hep e far en deus bet o Mab biniget evit ar pec'herien, obtenet din digant an daou avokat galloudus-ze ar c'hras da woelan oar ma dizurzo tremenet, do detesti a da gaet evite bete fin ma bue eur gouir gassoni. Gileoet ma feden, o divenner bras ar be-c'herien, groet mam bo eur gontrision barfet deus ma ol bec'hejo, a deut dam zicour er momet divoean deus ma bue, en heur ferrubl-ze en pehini e teui adversour ma ine da implian e ol nersevit ma c'hol. Obtenet din ar c'hras da c'honit ar viktoar ebars er gombat gruel-ze am bo neuze da zouten, evit ma hillin jouissan genec'h deus an evurusdet eternal. Evelse beet groet.

**PEVARZEKNET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Meuli a ran Doue, o ma frotektor glorius, deus ar bonheur oc'h eus bet da veritout, dre o vertuio exselant, a ispisial dre an istim vras o poa evit ar virjinite, bean choaset evit priet d'ar Oerc'hes dispar-ze pehini a oa destinet da vean mam dan Doue a c'hras, a inosans ag a zantelez. Kemez a ran lod en o joa, o konsideri ennoc'h kement a c'hloar ag a evurusdet. C'houi eo ar cherubin fidel, karget da evessat an arc'h-ze deus an testamant neve; c'houi eo ar seraphin anflamet a garante, karget da diven a danjeur ar Oerc'hes zakr e pehini e man ar Roue deus an env o reposi evel en e dron. O c'houi pehini a so bet huelet beteg an dignite a briet mam Doue, plijet genec'h teul eur zel a vadelez oar o servijer paour. O peet sonj, o priet chast da Vari, penos e c'hon en eum oestlet dec'h, a groet disken oar ma ine paour eun daken

benag deus ar c'honsolasiono selestiel a bere e c'he bet karget a rejouisset o kalon epad o pue. Ma ini a so bet, sivoas, mastaret gant kals a bec'hejo. Na distroet ket abalamour da ze o taoulagat dioarnon, mes obtenet din digant Doue ar c'hras da skuil daero aoualc'h evit o effasi. Obtenet evidon an donezon deus eur burete barfet, evit ma hillin plijout do taoulagat, a da re o priet admirabl, ma mam a ma maerones, a meritout ma vo digemeret ma ine er banket deus an eureujo eternal. Evelse beet groet.

---

**PENZEK VET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep date, etc.*

Ma patriarch zantel, eur joa vras a zantan em ine, abalamour dan eur vad a dan dignite a so bet akordet dec'h, pa oc'h bet choaset evit kommandi e kalite a dad d'an Ini ous pehini a zent an env ag an douar. Ma fatrom ker, pa en deus eun Doue deurveet o serviji, e fel din ie en eum lakat en

o servij. Divoar vremen e vin evidoc'h eur servijer fidel, evit o c'henori ag'o karet evel ma mistr. Ma digemeret dindan o c'hauforte, a ordrenet din ar pezh a blijo dec'h. Gout a ran penos kement a ordrenfet din a vo evit ma brassan mad ag evit gloar on Zalver. O Z. Joseph, pedet Jesus evidon; rag, a dra sur, na refuso netra dec'h, e pehini, oar an douar, a neus zentet ouzoc'h. Leret dean kavet ar vadelez da bardoni an ol offanso dre bere a meus bet ar malheur da displijout dean. Leret dean distagan ma c'halon deus an ol dreo kronet, a deus ac'hanon ma unan, ag anffami anei gant an tan deus e garante, evit ma hillin meritout ar barados. Mar pedet evidon, o ma zad ker, assur on da vean gileoet mad gant Doue. Evelse beet groet.

---

**C'HOEZEK VET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep date, etc.*

O ma patriarch glorius! dreist an ol zent



pere a so en eum zantifiet er c'houencho, en desercho ag en hermitajo, o c'heus kunduet eur vue ol selestiel, eur vue a silans, a gontemplasion, a garante ag a union gant Doue. Ini ebet ane nen deus bet eur fe ken krenv, eur garante ken ardant, eun anoudegez ken skler deus a visterio on redamtion. An ebestel Z. Yan a Z. Paul o deus bet an donezon deus eur gontemplasion admirabl; rag an ini kentan en deus reposit e ben oar galon Jesus ebars er goan paskal, a tanveet er momet-ze eur ravissamant don a dous meurbet, ag egile a so bet savet betek an drivet env, ag en deus klevet enon segrejo pere na ellont ket bean diskleriet dre langaj an den. Hogen c'houi, o Z. Joseph glorijs, piou a lavaro pet goech ezoc'h bet ravisset en extas, pegement a sekrejo a so bet revelet dec'h, pebes sklerijen dreist natur o c'heus resevet epad an ol vlavejo mo c'heus bet dirag o taoulagat, mo c'heus possedet Jesus ar guir varados, a mo c'heus bet ken alies ar bonheur da lakat o pen da reposit oar e galon sakr, a da ober dean reposit oar o c'hini, ispisial en amzer ma oa c'hoas bugel? O pegen dous

oa ar c'houisk a re ar mabik Jesus oar o petrin! pegen dous oa an reposit a gemerec'h oar e hini, pa oa muoc'h avanset en oad! Genec'h, serten, e cle ar zantelan ineo diski nijal entreseg an env dre ar gontemplasion deus an eol a justis. C'houi a gle ie kelen an ol dud zantel oar ar praktik deus an œuvro a garante. Offr a ret de, hep mar, eur skoër barfet, dre ar basiantet gant pehini o c'heus supportet al labourio poagnus deus o micher, dre ar zoursi o c'heus kemeret deus o famill, dre o peajo ken skuisus, dre an instruksiono, ar c'honsolasiono, ar sikourio a roec'h gant kement a sel dan nessan ag en Ejyp ag en Nazareth. O c'houi, ar parfetan deus ar zent, obtenet din ar c'hras da imitan o pue interieur, evit mambo eur speret muoc'h attantif ag eur galon muoc'h fervant em pedenno. Bean ezoc'h, evel me deus lavaret santes Theresan, eur mestr mad da diski dan dud ober orezon. Plijet genec'h ma resev en rouantelez an env etouez o tiskibien, a diski din skiant ar zent, evit ma ouin oar an douar en eum antreteni gant Doue, a ma vin evelse prepet den meuli eternellamant bars an

env, genec'h a gant an ol zent evurus.  
Evelse beet groet.

**SEITEKVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O saludi a ran, priet didarch da Vari, ar buran demeus an ol oerc'heset! O saludi a ran, mirer fidel deus e virjinite barfet! O safudi a ran, penn evurus deus ar famill zantel! Choaset oc'h bet evit pourvei da Vab Doue groet den ar vagadurez a behini en devoa eomp ar c'horf-ze en devoa kemeret evit silvidigez ar bed, ag evit e bre-servi deus a fulor ar roue digonsians Herodes. Bet oc'h evitan eur c'hurador, eur c'honduer ag eun tad e Bethleem, en Ejyp ag en Nazaret. O pidi a ran, dre ar zoursi o c'heus kemeret anean, da c'houlenn evidon ar c'hras de serviji ervad epad ma bue. Obtenet evidon ar speret a orezon; ag abalamour d'ar gonsolasion incomprenabl o c'heus bet da vervel entre divrec'h Jesus

a Mari, deut dam zikour er momet ma vo ma ine prest da gouitat ma c'horf a da antren en eternite, ag obtenet din ar c'hras da vervel eveldoc'h entre divrec'h Jesus a Mari. O Jesus, o Mari, o Joseph! ag epad ma bue, ag en eur ar maro e lakaa ma ine entre o taouarn. Evelse beet groet.

**TRIVOEC'HVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O priet chast a pur, priet Mari, Z. Joseph gloriüs! o pedi a ran, dre ar voeu solemnel a virjinite barfet o c'heus groet da Zoue, a pehini en deus o rentet ken agreabl de zaoulagat ma en deus o choaset evit bean tad mager de Vap unik ar muan karet, a priet d'ar Vam zantel a Jesus, groet mam bo em c'halon eun euz bras evit ar pec'het infam deus al lubrisite. Groet, o protektor bras deus an inco goerc'h, ma reno ar burete ebars em c'halon; a poc'heus meritet dre ar vertu-ze, dre behini e zoc'h bet an-val ous an aele, bean zavet beteg an huelan

dignite da behini e c'hel eum den ariout, a mo c'heus resevet ebars en env eun degre a c'hloar da pehini na hel den ariout ; goulennet evidon, me o ped, ar c'hras da veritout, dre ar vertu gaër-ze a chastete, plijout da zaoulagat Jesus a Mari, a goude bean e fratiket bete fin ma bue, da vervel entre o tivrec'h, evit ma vin kavet dign da azean e kichen Jesus a Mari, ag en o kichen o c'hunan en rouantelez ar zent, en kompagnonez ar goerc'heset pere a gan assambles ar c'hantik deus an Oan ol bur. Evelse beet groet.

---

**NAONTEK VET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O Z. Joseph, den fidel a just meurbet, gant rajon e c'heller attribui dec'h an hanon a den just, pa c'he bet roet dec'h gant ar Speret-Santel e unan, pehini na hel na tromplan na bean tromplet. Ia, bean ezoc'h en guirione just, pa o c'heus resevet, memes araug bean ganet, an donezon deus ar

c'hras a deus ar zantelez. Ennoc'h a so eur justis eskis meurbet, pa en deus Doue roet dec'h eur zantelez ag e deus o rentet dign da dere'hel plas an Tad eternel en kever e Vab inkarnet, a plas ar Speret-Santel evit bean priet d'ar Oerc'hes zakr. Mes noc'h ket en eum gontantet deus ar zantelez-ze a behini e oa ornet oc'h ine adaleg ma oac'h bet ganet. Labouret o c'heus de c'hreski mu ous mu, a da neum rentan dignoc'h ous dignoc'h deus ar garg ken honorabl-ze a dad da Jesus ag a briet da Vari dre ar praktik deus an ol vertuio. Bean o poa atao dirag o taoulagat an diou skoer deus ar zantelez ar barfetan, Jesus a Mari. A gallout a rec'h-u mankout do c'honsideri gant ewez bras, a dan eum skoerian oarne en o c'hol obero? Meuli ag henori a ran ar zantelez-ze pehini a so dreist ar zantelez deus an ol zent. Mez evit ma hallo ar zantimancho-ze deus ma c'halon prokuri o kloar ag avantaj ma ine, groet, o ma frotektor zantel, o ma zad karantezus, ma plijo gant Doue rei din an donezon presius deus ar zantelez, anez pehini na hallan plijout na dean na dec'h. Evelse beet groet.

**UGENVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O Z. Joseph, c'houi a so bet ar gouarnier leun a brudans deus an Ini a c'houvern an env ag an douar; c'houi a so bet ar zalver deus an Ini a neus savetet ar bed ol; c'houi a zo bet ar priet leun a verit deus a Vam Doue. Kementse a ra din en eum lakat hirie, ag evit ma ol vue, ag ispisial evit an heur deus ma maro, oar o kalon leun a vadelez, oar ar galon-ze oar behini en deus reposit an Ini a so ar zoursen deus a bep mad. Impliet em c'hever ar garante ardantse gant pehini oc'h bet en eum garget, dre urs an Tad eternel, deus a zoursi ar famill santel-ze pehini a oa an objet deus e ol gimplezans; ag o pedi a ran, dre ar fervor-ze gant pehini ezoc'h en eum akouitet deus ar garg honorabl-ze, da c'houlen evidon ar graso a bere a meus eomp evit resev ma Doue ebars er gommunion gant an dispositiono rekis. Impliet em faveur ar pe-

denno galloudus-ze pere a ia bete e galon adorabl, evit ma plijo gantan, ken alies goech a mam bo ar bonheur da gommunion, anflamimi ma c'halon, a rei din ar gouraj da heuil o roujou oar an douar, a ma billin ebars en env kavet lod en o kloar ag en o c'hevurusdet. Evelse beet groet.

**KENTAN BIZIT OARNUGENT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O Z. Joseph, zant bras meurbet da behini en deus an Tad eternel fiet an tensor deus e Vab biniget, pa o c'heus adoptet Zalver ar bed evit o mab, o c'heus adoptet assambles e ol vreudeur evit o pugale. Bean e c'hon ive eta unan deus o pugale. Pa c'homp deut, dre ar myster deus an Inkarnasion, da vean breudeur da Jesus-Krist, ezoc'h prest da rentan dimp ar memes servijo o c'heus rentet dean. A gallout a rinme biken o trugarekat en eur feson dign deus o merito a deus o madobero? Lavaret

a rin penos o c'heus sikouret prokuri dan æle a dar zent ar gloar a behini e jouissent, penos an ol gristenez a so skoaiet oarnoc'h; penos o c'heus trec'het an ivern, penos ezoc'h bet eun instrumant bras ebars an œuvr deus on zilvidigez. Lavaret a rin en tuont ezoc'h avokat ar bec'herien, refuj an dud afflijet, skoër ar vue spirituel ag an ol vertuio, zikour a konsolasion an dud a so en angoni; erfin, dre eur gir pehini a digompren an ol veulodio, o c'henvel a rin tad Jesus, priet Mari. O tad evurus da Jesus, beet ie tad an Ilis zantel, tad an ol veleien, tad an ol relijiuzet a leanezet, tad an ol familio katholik. Divennet ho; pugale diouallet ane ous fulor enebourien an outro Doue, pere a glask morgan en o c'halono ar gouir fe a karante Jesus; evit ma hallo, goude an exil deus ar vue-man, an Ilis pehini a so c'hoas o kombati oar an douar, ag an Ilis pehini leun a driomph a so en env, selebri ar vertuio admirabl-ze dre bere o c'heus meritet bean priet da Rouanez ar goerc'heset a tad ker meurbet da Jesus-Krist on Zalver. Evelse beet groet.

---

**EIL BIZIT OARNUGENT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Patriarch glorius, stouet a ran gant ar brassant respet dirag an tron huel oar behini ezoc'h azeet en env evit biken. Adaleg breman, ag e-pad ma bue en eun unissan a ran gant ar Oerc'hes zantel a gant an ol zent evit rentan dec'h, evel ma reont o unan, pep sort henorio. O meuli a fel d'in deuz ma ol gallout ag en eum oëstlan ma unan do servich. Divoar vremen a bete ma huanad divoean e fel din kavet an intansion zantel d'oc'h henori, evit ma plijo genec'h ma zikour e peb amzer, ag ispisial en heur ar maro, a ma hillin dre oc'h azistans en eum rentan dign da vont d'oc'h henori a do meuli er rouantelez selestiel etropad an eternite evurus. Evelse beet groet.

---

**TREDE BIZIT OARNUGENT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Z. Joseph, zant dign a bep meulodi, c'houi a so bet eun æl oar an douar, a na non ket souezet o deve an æle otreet dec'h kement a faveurio, pa oac'h ken anval onte dre ar burete a æl deus o kalon. Na non ket souezet o deve bet eur press ken birvidik do sefviji, pa neo gouir e oa o renk e meur a feson dreist ô ini. O! ma vije bet possubl e c'hantreje ar jalouzi en o c'halon, o dije a drazur anviet ar bonheur o poa da vevan kement a dost gant an Doue bugel, zoursen a ol garante, a ol joa ag a ol dousder. Mil benos, o zant eyurus, do keno pehini en deus ken alies a oech poket dean, do tivrec'h pere o deus an briatet, do kalon oar behini en deus kemeret eur repos ken dous ag evitan ag evidoc'h. O tremen o pue nos a de gant ar mabik Jesus, ezoc'h en eur feson benag en eum vianet o c'hunan, ag en eum rentet bugel bian eveltan, ag o c'heus

heuillet an exemplo a inosans, a frankis, a burete ag a vertuio al a oelec'h ennan. Anaveout a rec'h adaleg neuze an desir en devoa a teuje an ol gristenien da neum rentar anval ous bugale, evit gallout tremen dre an nor stris dre behini e c'hantreer e rouantelez an env. A me ie c'hoant a meus da vean anval ous ar mabik Jesus. Obtenet din eta, o ma zad ker, ar vertuio e pere a gonsist ar bugaleach kristen. Groet na vo em c'halon zantimant ebet a valis; groet ma vo ma ol sonjesono pur, ma intansiono eün, ma c'homzo divlam, ma ol gomportamant humbl a direbech. Groet din anfin retorn dre ar binijen dar stad evurus-ze a vugaleach kristen en pehini e oan bet laket dre ar vadeiant, a deus a behini a meus bet ar malheur da bellat dre an niver bras deus ma fec'hejo. Evelse beet groet.

---

**PEDERVET BIZIT  
OARNUGENT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Stouet a ran dan daoulin en o prezans, o Z. Joseph, ma zad leun a drue. Adressi a ran dec'h ma feden deus a greis ma c'halon, evit ma po ar vadelez dam digemer en nombr deus o fidelan servijerien. Na ankoët ket, o ma zad tener, o pugel paour pehini a c'houl oc'h azistans, dre ma oar ezoc'h prest da zikour kement ini a deu d'o pedi en e ezomo. Dont a ran eta da rekommandi dec'h ma ine, a de lakat entre o taouarn. Groet ma pratikin an ol vertuio dre bere o c'heus meritet an honor dispar da vean priet da Vari a tad mager da Jesus. C'houi a so bet humbl, chast, dous a pasiant. Obtenet evidon an donezon deus ar vertuio kaër-ze. Mes dreist pep tra goulennet ma vo em ine ar fe, an esperans ag ar garante ardant-ze pere o deus renet en o c'hini, evit mam bo ar bonheur, o vean gouisket deus an habit euret a

behini e koms on Zalver, da laret eo, deus ar stad a c'hras, da azean ous an dol delisius preparet din gant Doue en e rouantelez. Dindan o proteksion, o patriarch puissant, e lakan ma ol vue. Rekommandi a ran dec'h ie an heur deus ma maro. Plijet gant Doue ma mo eun de ar bonheur da rentan eveldoc'h ma huanad divoean entre divrec'h Jesus a Mari. Evelse beet groet.

---

**PEMBET BIZIT OARNUGENT.**

---

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Z. Joseph evurus, dec'h a dec'h hepken e lavar an Ilis zantel en unan deus e hymo : *Tu vivens, superis par, fruieris Deo, mirâ sorte beatior* ; da laret eo : Par dan habitantet deus an env, memes er vue-man, oc'h eus jouisset a Zoue, ag e zoc'h bet laket er stad an evurussan. Nan, den ebet oar an douar nen deus eveldoc'h jouisset a Zoue, pa oa nos a de dirac o taoulagat, pe entre o tivrec'h, a pa roe ar mabik Jesus dec'h

kement a verko a garante, kement a sklerijen ag a gonsolasiono. O bonheur na hel den ebet kompren! eur joa vras a meus deus an evurusdet-ze otreet dec'h arog ar maro, a pehini serten a oa gleet dec'h, pa o c'heus goëlet Jesus o pratikan epad meur a vla, a pratiket o c'hunan eveltan an ol vertuio da bere en deus prometet an evurusdet. Obtenet din ar c'hras da zerri don em c'halon an doktrin selestiel-ze, a de lakat en pratik. Nallan ket bean evurus, en gout a ran, anez bean paour a speret, dous, didarch, anez karet ar peuc'h, bean truezus ous an nissan, kavet naon a sec'het deus ar justis, ag anez bean prest da souffr persekusion evit ar justis ag ar ouirione. Mez pa c'hon ken douget da glask ma c'hontantamant, da heuil-ma fanchancho naturel, penos e c'hillin-me trec'hi an inklinationo deus ma c'halon? Penos e c'hallow ma c'halon en eum stagan ous plijadurezo spirituel ag ol selestiel? Eomp a meus evit-se da gavet eur fe beo kreny aoualc'h evit ma distagan deus a ol vado ar bed. C'houi, o zant bras, objet deus ma c'harante, a hel obteni evidon ar fe presius-ze pehini e deus

ar pouar da rentan ma ol obero beo a zantel, a da ober din kavet er pratik deus an ol vertuio eum arrès deus an evurusdet pehini a rekompanso an ineo zantel ebars er barados. Evelse beet groet.

**C'HOEC'HVET BIZIT  
OARNUGENT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Patriarch glorius, Z. Joseph, pebes•eur vad eo bet oc'h ini da vean bet epad o pue e kompagnunez Jesus a Mari, hep dispartian kamet dioute. An ol veajo a rec'h, oc'h ol gamejo, oc'h ol labourio a oa evite. Dre ar bonheur dispar-ze oc'h eus bet, o pedi a ran da obteni evidon ar c'hras ma vo ordinal Jesus a Mari em c'hichen, ag ordinal ie em c'halon, pelec'h benag ma tigoeo din bean. Groet na glaskin biken nemert o c'hontanti ag o glorifian dre ma ol demarcho a ma ol aksiono. Ar c'hras-ze a c'houlennan dre oc'h intersession, o Z. Joseph, ma guir roue. Mar be roet din ar mennat-



ze, e vin delivret deus a dristidigez ag a danjeurio ar vue-man, a gallout a rin, gant o c'hasistans ag ini Jesus a Mari, achui ar veach a meus da ober oar an douar, ag ispisial kavet an esperans da vean kunduet genec'h entrezeg ar Jerusalem selestiel, pehini a gle bean an dermen deus ma felerinach er bed-man. Evelse beet groet.

---

#### SEISVET BIZIT OARNUGENT.

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Z. Joseph evurus, bet oc'h eus ar chans da heritan dan ol benediksono roet gant Doue d'ar batriarchet ansien, a do gullet akomplisset er oerc'hes Vari pehini, pa e deus o resevet evit priet, e deus o c'huelet beteg an dignite a dad ar Messi. Rag an Ini a so deut da vean o mab c'houi, pa c'he bet ganet gant Mari o priet, eo Mab Doue memes dre behini ec'h e bet biniget an ol nationo deus ar bed. Ra zeui eta an ol batriarchet zantel-ze da lakat oar o pen eur

gurunen a c'hloar a do saludi evel o roue. Ra zeui ive an ol zent deus al lezen ansien do c'hanaveout evit o mestr, pa o c'heus pratiket en eur feson parfetoc'h evite an ol vertuio o deus bet. Ra zeui erfin an ol zent deus al lezen neve, an ebestel, ar verzerien, ar gonsessoret, ar goerc'hezec'h, pepini gant al loreen en deus meritet, do curuni evel ar penn deus ar famill divin oar an douar, evel ar c'hentan diskib da Jesus-Krist, evel an ini en deus heullet ar c'hentan ar roujou divin, anaveet ar c'hentan ar sekrejo zakr ranfermet e calono Jesus a Mari, ag a so bet ar c'hentan zant deus al lezen a c'hras. Beet mil a mil goech biniget, batriarch evurus, gant an ol zent. E kreis an evurusdet a behini e jouisset, na ankoet ket o paour kez servijer. Groet ma ario beteg ennan lod deus ar benediksono bras a bere ezoc'h karget ebars an env. Groet surtout, o ma zad ker, ma tiskenno oarnon ar freus deus ar voeen a vue, da laret eo, deus ar groas viniget oar behini en deus Jesus-Krist peurachuet an œuvr deus ar redampcion. Mar gallan resev oar an douar ar benediksono presius-ze, e meus an esperans da danva

eun de ar freus a c'hloar destinet da gontanti  
naon ar zent er barados. Evelse beet groet.

---

**EISVET BIZIT OARNUGENT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

Skoër a ol zanteles, ma fatriarch zantel  
Joseph, skuillet o c'heus daëro en de ma  
oa Jesus en eum dispartiet ac'hanoc'h e  
Jerusalem, mes e garet a rée'h bepret; ag  
e deus e goste a gare anoc'h; ag e garan-  
te evidoc'h a voa ken bras ma en devoa o  
choaset evit tad, evit gardien, evit souten  
ag evit kunduer. Ne ket c'houi eta a gle  
goelan, mes me, pec'her ingrat, pehini, dre  
an niver ken bras deus ma c'hrimo, a meus  
abandonnet a kollet ma Doue, a mepriset e  
c'hras divin. O pedi a ran, o ma zad zantel  
Joseph, dre an affiksion a vantras o calon  
en de ma poa kollet Jesus, obtenet din an  
donezon a daëro evit goelan hep sess oar  
an outrajo groet dam Mestr divin. Pedet  
Mari, o priet, hanvet refuj ar bec'herien,  
da deul oarnon eur zel a drüe, evit prokuri

din ar c'hras deus eur gouir gontrision, ag  
ar resolution da gol mil goech ma bue ken-  
toe'h evit koll adare ar stad a c'hras. Dre  
oc'h intersession, o ma frotektor ker, ec'h  
esperan kement ze deus a vadelez Doue; a  
konfians e meus e teurvetef jileo ma feden.  
Evelse beet groet.

---

**NAO VET BIZIT OARNUGENT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O Z. Joseph, zant bras meurbet, eur joa  
vras e meus, ag o menli a ran abalamour  
dar fervor gant pehini oc'h eus kerset en  
hent deus an huelan perfekcion. Bet oc'h  
eun den e guirione just, da gentan en kever  
Doue, pa oc'h en eum impliet a speret, a  
galon a deus oc'h ol c'hallout da heuil e  
pep tra e volante zantel; dan eil en kever  
an nessan, o karet an ol dud abalamour da  
Zoue, ag o karet Doue en e ol grouadurien;  
dan drede en o kever oc'h unan, pa n'oc'h eus  
desiret netra nemert ar pezh a helle o rentan  
muoc'h parfet, a noc'h eus klasket nemert

imitan an humilite, an obeissans, ar vepris deus a vado ar bed, ar vortifikasion, ar garante ag ar vertuio al a bratike Jesus a Mari. O Z. Joseph taer goech just! disket din pratikan ar justis en e ol boencho. O pedi a ran dre an ekselans deus o vertuio, dre ar gallout bras oc'h eus resevet digant Doue, obtenet din ar c'hras da gommans adaleg breman bean eur c'hristen parfet, da gerzet dre roujou eun Doue paour, humbl apasiant. Bete vremen, sioas din, na meus ket pratiket ar vertuio-ze, mes eur propos ferm a meüs, evit an amzer da zont, do fratikan fidel gant o zikour a gant zikour o priet zantel. Evelse beet groet.

---

### **TREGONTVET BIZIT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

O priet zantel da Vari, tad ker da Jesus! o supplian a reomp, dre ar brudans ral ag an deneridigez admirabl gant pehini oc'h eus gouarnet o famill divin, obtenet evi an ol dado a mam, ag an ol benno tiegez,

ar c'hras da implian o autorite gant ar memes speret a furnez ag a garante; evit ma reno dre oll ar memes urs, ar memes union vad pehini a neus rentet ken evurus o tiegez zantel. Groet, o patriarch evurus, mo devo ar re a gle zenti ar memes speret a obeissans o deus bet Jesus a Mari. Mes groet dreist pep tra, pa on deus ar bonheur da vean bugale da Zoue, ma on bo anoudegez vad evit an ol vadobero deus on Tad selestiel, ma virfomp fidelamant e ol c'hourc'hemenno, ma heuilfomp a galon vad e ol inspirasiono, evit, pa deufomp en heur ar maro da reketi oc'h azistans, ma plijo gantan rei dimp, dre oc'h intersession, ar c'hras deus eur maro zantel, ag ar gloar hep fin deus ar barados selestiel. Evelse beet groet.

---

### **KENTAN BIZIT A TREGONT.**

*Jesus, Mari, Joseph, hep dale, etc.*

En eum brosterni a ran ous o treid, o Z. Joseph gloriüs, gant kals a reverans, a meuli a ran an Dreindet adorabl, pehini,

goude bean o tonezonet deus ar gurunen a oerc'hdet, en deus groet dec'h azean e kichen Rouanez ar goerc'heset. Pegement e lugern breman ennoc'h ar galite ol divin a dad da Jesus o poa goechal oar an douar. An ol habitantet deus ar pales selestiel a veul an outro Doue da vean roet dec'h eur gloar ken bras. Zablantout a ra din klevet an æle o kanan hep ses en oc'h hënor ar c'homzo-man deus an Aviel : Gloar d'ar servijer fidel a prudant laket gant Doue en penn e famill. *Fidelis servus et prudens quem constituit Dominus super familiam suam.* O! gant pebes larjente e teu an Tad eternal da bean ar servijo oc'h eus rentet de Vab oar an douar. Pegen kaër eo an donezono skuillet oar noc'h gant ar Speret-Zantel evit ar zoursi oc'heus bet da veillat oar e briet chast. Pebes enorio en deus Mab Doue dastumet oar an ini en deus oc'hanvet e dad oar an douar. Gallout a reomp kredi penos, en de deus e resurrektion, e resussitas ie o korf zantel, ar c'horf-ze pehini en devoa labouret evit e servij gant kement a fatig, evit rei dean adalek neuze lod er gloar deus oc'h ine. En eum rejouissan a ran deus ar gloar

doubl-ze pehini, herve ar greden deus o servijerien devot, a so bet otreet dec'h gant Doue; ag o pedi a ran da c'houlen evidon eun desir ardant deus ar barados, elec'h ma meus an esperans da oelet o triumph, a da drugarekat Jesus o mab deus ar gurunen lugernus en deus roet dec'h en e rouantelez. Evelse beet groet.

#### PEDENNO DA Z. JOSEPH.

##### KONSEKRASION DAR GALON BUR A Z. JOSEPH.

Kalon sakr a Z. Joseph, priet chast da Vam Doue, tad mager de Vab adorabl, karg et da evessa an eil ag egile, do diven, do c'hondui, do imitan, do zikour en œuvr deus ar Redamsion; ar buissans en deus Doue otreet dec'h en env a oar an douar am doug da oestlan dec'h ma c'halon, a do choas evit bean, goude ar c'halono zakr a Jesus ag a Vari, an objet deus ma brassan respet a deus ma ardantan devosion. O pebes bonheur mar galfen offr dec'h kalono an ol dud, ag o lakat do karet! Mes ne meus

em pouar nemert ma hini. Ec'h offr a ran dec'h, ag e zoumeti a ran do lezen. Goude ar garante ag an henor a glean da Jesus a da Vari, o kloar ag o karanté a vo an objet deus ma ol sonjezono, ma ol desirio, ma ol gomzo, ma ol obero. O kalon, o Z. Joseph, a so bet, dreist an ol galono, anflammet gant an dezir da voelet o ren e pep lec'h karante Jesus a Mari. Allumet ie em ini an tan-ze deus ar garante evit e fossedi, e devi ag e c'honsumi. Chetu ar pez a desiran ag a c'houlennan digenec'h. Ebars en transport deus ar garante-ze a meus c'hoant da rentan ma huanad divoecan; a reketi a ran ma vo an hanoio dous a Jesus a Vari ag a Joseph ar c'homzo divoecan a brononso ma zeot en heur deus ma maro. Evelse beet groet.

PROTESTASION A GARANTE DA Z. JOSEPH.

Chetu me aman en o prezans, o ma zad ker a mad. O c'heneri a ran evel ar priet chast deus a Vam Doue, an tad mager da Jesus, en pehini e deus an Dreindet zantel fiet e c'hol denzorio, ar protektor particu-

lier ag ar patron deus an ineo pur, humbl, pasiant a devot. Dont a ran da ober dec'h ma c'hompliment a joa, abalamour dar bonheur o c'heus bet da dougen Jesus entre o tivrec'h, da skuil oarnean o taëro, da vean bet cherisset gantan, a resevet e boko zantel pa oa c'hoas bianic. Leun a respet ag a garante o sonjal er faveurio presius-ze, ec'h offran dec'h ma c'halon evit bean instruet a renet genec'h; ag o pedi a ran dam zellet evel o pugel, rac o karet a ran evel ma zad mad. Obtenet din ar c'hras deus eur gouir gonversion, ag an ol c'hraso a bere a meus comp evit ober e pep tra bolante Doue. Obtenet din ar speret-ze a devosion, ar vue interieur-ze, ar fidelite-ze da heuil an inspirationo divin, an union barfet-ze gant Doue, an humilite-ze a galon, ar zoumission antier-ze ebars er c'hroajo ag an humiliasiono, ar c'hras-ze da neum blijout er silans a pel deus trous ar bed, ar speret-ze a beden ag a fervor, en eur gir, an ol vertuio-ze o c'heus pratiket en eur feson ken parfet. Obtenet din ispisial, ma mo evit Jesus a Mari ar garante-ze pehini a so bet evel o vertu a choas ag a breferans. Kemeret, o zant bras,

dindan o proteksion ar vue zantel deus an ineo devot, a dre ar c'hras o c'heus bet da gaet eur maro ol evurus, obtenet dimp eur maro anval ous o c'hini, evit mon devo ar bonheur da rentan on huanad divoean entre divrec'h Jesus a Mari. Evelse beet groet.

MEMORARE Z. JOSEPH. (1)

O peet sonj, o Z. Joseph, on tad leun a vadelez, a garante, a dousder ag a drue, penos ar zantes vras Theresa a assur ne deus biskoas reketet oc'hazistans hep bean resevet e vennad. Pa lakan evelti ma ol fians ennoc'h, o Z. Joseph, objet deus ma c'harante, e teuan da vedoc'h, e redan entrezeg ennoc'h, a leun a c'hlac'har dindan ar bec'h pouner deus ma fec'hejo innombrabl, en eum deul a ran do treid, o tad truezus. Na vepriset ket ma feden, daoust pegen imparfet eo, mes jileoet anei gant madelez ag akordet din ma goulen. Evelse beet groet.

(1) On Tad zantel a Pab Pii IX en deus akordet eun induljans a 300 de da nep a lavaro ar beden-ze gant devosion a glac'har deus e bec'hejo.

LITANIO Z. JOSEPH.

Autro Doue, o peet true ouzimp.

Jesus-Krist, o peet true ouzimp.

Autro Doue, o peet true ouzimp.

Jesus-Krist, on jileoet.

Jesus-Krist, reit dimp on mennat.

Tad selestiel, gouir Doue, o peet true ouzimp.

Mab, Redampteur ar bed, gouir Doue, o peet true ouzimp.

Speret-Zantel, gouir Doue, o peet true ouzimp.

Dreindet zantel en eun Doue hepken, o peet true ouzimp.

Zantes Mari, priet Z. Joseph, pedet evidomp.

Z. Joseph, priet da Vari, mam Doue, pedet evidomp.

Z. Joseph, priet guerc'h da eur vam goer-c'hes, pedet evidomp.

Z. Joseph, test deus a oerc'hdet Mari, pedet evidomp.

Z. Joseph, tad da Vap Doue, pedet evidomp.

Z. Joseph, mager ar mabik Jesus, pedet evidomp.

Z. Joseph, karget da barlant evit Jesus c'hoas bianik, pedet evidomp.

Z. Joseph, zalver don Zalver, pedet evidomp.

Z. Joseph, rener Jesus o tec'hel dan Ejyp, pedet evidomp.

Z. Joseph, karget da lojan Jesus en e veajo, pedet evidomp.

Z. Joseph, divenner Jesus, ar furnes inkarnet, pedet evidomp.

Z. Joseph, ministr deus ar c'honseil bras, pedet evidomp.

Z. Joseph, karget deus an tensor selestiel fiet ennoc'h, pedet evidomp.

Z. Joseph, artisan paour savet dreist ar rouane, pedet evidomp.

Z. Joseph, donezonet deus ar justis ol di-  
vlam, pedet evidomp.

Z. Joseph, skoer deus an oboïssans bar-  
fet, pedet evidomp.

Z. Joseph, fourdelizen a burete didarch,  
pedet evidomp.

Z. Joseph, devet gant ar zel deus a zilvi-  
digez an ineo, pedet evidomp.

Z. Joseph, protektor an tiegezo devot,  
pedet evidomp.

Z. Joseph, zikour ar gristenien en o fa-  
sion, pedet evidomp.

Z. Joseph, patron ar re a varo e gras  
Doue, pedet evidomp.

Oan Doue, pehini a effas pec'hejo ar bed,  
pardonnet dimp, Autro.

Oan Doue, pehini a effas pec'hejo ar bed,  
jileoet on peden, Autro.

Oan Doue, pehini a effas pec'hejo ar bed,  
o peet true ouzimp, Autro.

ÿ Jesus-Krist, on jileoet. R̄ Jesus-Krist,  
reit dimp on mennad.

ÿ Z. Joseph, pedet evidomp. R̄ Evit ma  
veomp dign deus a bromesseo on Zalver  
Jesus-Krist.

*Pedomp.*

O supplian a reomp, Autro Doue, dre ve-  
rito Z. Joseph, priet o Mam zantel, don zi-  
kour a da rei dimp, dre e intersession, ar  
c'hras da vervel evel ma varo ar zent, gras  
pehini ne nomp ket dign da obteni dre on  
pedenno on unan. Plijet genec'h rei dimp  
ar c'hras-ze, o c'houi on Doue pehini a veo  
ag a ren eternellamant. Evelse beet groet.

AVE Z. JOSEPH.

Me o zalud, Z. Joseph, leun a c'hraso ; Jesus on Autro ag e Vam zantel a so genec'h ; biniget oc'h dreist an ol oerset, a biniget eo ar freus dimeus o priet. Z. Joseph, priet goerc'h da eur Vam goerc'hes, pedet evidomp-ni o servijerien ag o pugale ; on azistet breman ag en heur ar maro, c'houi pehini o c'heus bet an heur da vervel entre divrec'h Jesus a Mari. Evelse beet groet.

CHAPELET Z. JOSEPH.

*Ar chapelet-ze a ve lavaret oar ar chapelet ordinal deus ar Oerc'hes. Ar Bater a ve lavaret oar ar groas, ag an Ave Maria oar ar greun bras, a oar ar greun bian a ve lavaret ar beden-man : Jesus, Mari, Joseph, on zikouret breman ag en heur ar maro. Amen.*

PEDEN DA Z. JOSEPH AROG AR GOMMUNION.

O ma zad mad, Z. Joseph, objet deus ma c'harante, obtenet din, me o ped, lod

ebars er garante ardant-ze o c'heus bet evit ar mabik Jesus. Obtenet evidon, dre oc'h intercession ag o merito, ar burete a galon, a gorf ag a ine, ag an ol vertuio a bere a meus eomp evit resev ervad ma Zalver divin, a pa o c'heus dre al labour deus o tivrec'h ag ar c'hoëz deus o pisach maget an Ini a so on magadurez ag on bue, groet ma en resevin gant ar brassan zantimancho a reverans, a respet ag a garante. Dre an devosion o c'heus bet ous en dougen da Jerusalem, evit en kinigan en Templ de Dad eternal, groet din kinigan dean ma c'halon, ma c'horf a ma ine, hep miret netra, evit ma kemero da viken possession deus ane. O pedi a ran, o zant bras, dre ar zantelez deus o korf chast meurbet, da obteni evidon ar burete a galon-ze pehini e deus o rentet ken agreabl da Jesus. Dre o taouarn zantel pere o deus labouret gant kement a fatig evit souten bue on Zalver, groet ma labourin gant ar brassan zoursi da sovetat ma ine, a da gaet an ol vertuio rekis evit tostat ous an dol zantel ous pehini e fel din resev evit magadurez ma ine an Oan divin-ze o c'heus c'houi maget gant kement a garan-



te, a gant pehini o c'heus bevet en eur feson ken familier. Dre o treid sakr pere o deus groet beajo ken hir evit preservi o mabik ker Jesus deus a fulor Herodes, en kuzet breman ebars em c'halon. Na lezin adversour ebet d'en tennan ac'hane; ag e a roio din an nerz da drec'hi an ol efforjo deus an ærouant. Dre o tivrec'h pere o o deus ken aliez douget ar mabik Jesus; dre o kalon garantezus oar behini en deus reposit ken alies e ben adorabl, groet ma kavo ie eur repos dous ebars em c'halon, groet ma hillin en karet ag en briatan gant ar memes teneridigez evel doc'h. Dre o taoulagat pere o deus skuillet kement a daero a devosion, pa vije an Oan divin ous o cherissan, obtenet din ar c'hras da oelan oar ma fec'hejo, evit ma vo ma ine purifiet dre an daëro deus ar binijen, a preparet evelse da resev ma Zalver. Dre o teot bini- get, pehini en deus prononset ken alies an ano a Jesus, groet ma c'halvin dam zikour an ano ol galloudek-ze em ol ezomo ag em ol dentasiono. Dre o keno chast a pur pehini a so bet ken alies zantifiet dre ar poko a garante ag a adorasion o c'heus roet d'ar

Bugel divin pehini a oa evel ar vue deus o pue, groet ma vo ie evidon eur zoursen a vue; a groet ma hillin dre e c'hras kondui eur vue neve. Dre o kalon zantel ol anflammet gant an tan deus ar garante divin, ol impliet da servij o mabik ker Jesus, offret dean ma ini, ma plijo gantan e c'hargan ag e devi memes gant ar memes tan a garante. Evelse beet groet.

PEDEN VER A BIRVIDIK DA GALON Z. JOSEPH.

O kalon zantel a Joseph, ar zantelan deus an ol batriarchet, ar priet chast deus a vam Jesus, an tad mager evurus d'on Zalver, obtenet din ma vo ma c'halon anval ous oc'hini dre ar praktik deus ar silans, deus an dousder, deus an humilite, deus ar garante, deus an oboissans, deus ar chastete. O kalon Joseph, plijet genec'h kavet zoursi ac'hanon a ma zikour epad an ol deio deus ma bue, a groet ma mo evel doc'h ar c'hras da vervel entre Jesus a Mari. Evelse beet groet.

PEDEN DA Z. JOSEPH EVIT AN ANAON.

O Z. Joseph, zant hep e bar, c'houi na refuset james netra deus a gement a c'houlenner digenech'h. Plijet genech'h eta jileo ar beden a ran dec'h evit an ineo zantel deus ar purgator; a pa o c'heus goejal preservet Jesus a Mari deus a grueldet Herodes, delivret ie deus o zourmancho an ineo-ze prenet gant goad Jesus-Krist, a karet gant Mari. Jileoet an anaon kez-ze pere a c'houl digenech'h ar faveur da oelet Jesus an objet hepken deus o c'harante. Jileoet o huanado, a hastet obteni misericord evite, evit ma jouissoint souden deus a c'hloar ar barados, a mo devo ar bonheur den eum unissan genech'h evit meuli, karet a serviji Doue epad an eternite. Evelse beet groet.

PEDEN BIRVIDIK.

O Jesus, o Mari, o Joseph! ma azistet oar ma maro, a digemeret ma ine; deut dam zouten er momet terrubl-ze, evit ma vo ma huanad divoean eun huanad a zoumission,

a gonfians ag a garante. A c'houi, Z. Joseph, o ma zad ker, tad mager da Jesus, priet goerc'h da Rouanes ar goerc'hezet, beet ma divenner epad ma bue, a ma c'honsolator a ma avokat em heur divoean. Obtenet evidon eur maro dous, zantel a presius dirag daoulagat Doue; groet ma vo Jesus evidon eur barnet truezus, a pedet Mari den eun gargan ec'hunan dam prezanti de Mab divin. Evelse beet groet.

GOURC'HEMENO Z. JOSEPH, SKOER AR VUE

COACHET EN J.-C.

1. Dan Autro Doue gloar a renti,  
A da galon dean a oestli.
2. Clasq a ri hepken e volante,  
O lakat enni da garante.
3. Pedi a ri ar Speret-Glan  
Da zonet das santifian.
4. Dioal ri rag an diegi  
A gant ardeur e labouri.
5. Offr a ri ta ol labourio  
Da Zoue, ma o binigo.
6. Karet a ri ar ouirione,

- O rei da Jesus ta ine.
7. Bean e vi aboïssant,  
Ous neum zoumeti humblamant.
  8. Klask a ri bean disprijet,  
Gant Doue hepken anaveet.
  9. Bemde, bemnos e vi fidel  
Da henori ta æl santel.
  10. Dam assistans rekour a spo,  
Spisial en heur deus ta varo.

---

### HISTOAR

PEHINI A DISK DIMP PENOS E C'HE BET SAVET  
DA GENTAN AN EXERSIS DEUS A SEIZ GLAHAR  
AG A SEIZ JOAUSDET Z. JOSEPH.

Daou relijius Z. Frances o vean o navigan tost da aut ar Flandres, e zavas eun tourmant ken horrupl ma heas ar vatimant dar fons gant tri c'hant passajer pere a oa oarni. An daou dad a gavas ar voyen da gregi en eur pezh coat deus ar vatimant a da chom evelse oar var an dour. Mez piou a laro gant pebes anken en eun oelent kaset a digasset gant ar bernio mor, a oar ra

poent da vervel a da vean zebeliet e goeled ar mor? Kaer o devoa en eun stagan goelan ma hellent ous ar planken, zantout a rent o ners o timinui, a prest a oant da leuskel anean a da berissan. An daou relijius-ze, pere a oa servijerien fidel da Z. Joseph, en eum rekommandas dean gant kals a fervor. An triet devez ar zant a apparissas de en e sav voar ar memes planken, dindan form eun den yaouank leun a c'hras ag a vajeste. Saludi a reas ane gant eun ær grasius meurbet, ar pezh a oe suffis evit kargan o c'halon deus an doussan konsolation, ag evit rei do izili eun ners mirakulus. Neuse ar zant, o c'hober ofis eur pilot, a gonduas ane a dreus ar bernio mor beteg an aut sec'h. An daou dad, delivret deus eun danjeur ken bras, en eum dolas oar o daoulin evit rentan graso da Zoue. Neuse e kommansjont trugarekat an den yaouank pehini na anaveent ket, ag e pedjont anean da lavaret de e hano. « Me eo Joseph, » emean. Neuse e kontinuas den eum antreteni gante, a da goms onte deus ar seiz glac'har ag ar seiz joausdet a oa c'hoarveet gantan epad e vue mortel, a disklerian a eure

de penos an nep a deuje da veditan oarne a vije agreabl dean, ag a resevje digantan ar brassan faveurio. Goude-ze e tisparissas, o lesel en kalon an daou relijius an dous-san joa o devoa biskoas tanvet.

#### EXERSIS

EN HENOR DA SEIZ GLAHAR A DA SEIZ JOAUSDET  
Z. JOSEPH.

1. Priet dign meurbet dar Oerc'hes Vari, Z. Joseph glorius, pebes kalonat nec'hant mant evidoc'h, pa oac'h en doutans gruel, hep gout petra o poa da ober, pe dispar-tian deus o priet chast a zantel, pe miret anei ! Mes ie pebes joa pa deuas eun æl do kelen oar ar myster adorabl deus an Inkar-nasion, a da lavaret dec'h penos ar Oerc'hes zantel a oa deut, dre operasion ar Speret-Zantel, da vean gouir Vam Doue a goer-c'hes assambles ! O pedi a ran dre ar glac'-c'har ag ar joaüsdet-ze da c'houlén evidon em heur divoean eur gonsians bur ag ar

gonsolasion da vervel eveldoc'h entre Jesus a Mari.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

2. Patriarch evurus, Z. Joseph, karget da dere'hel en andret ar Verb groet den ar plas a dad, ar glac'har a zantjoc'h o oelet Mab Doue ganet en eur stad ken paour a ken miserabl a oe chanjet ragdal en eur joa selestiel, pa gleojoc'h an æle o selebri en o c'hantiko ar gloar deus ar bugel-ze neve ganet. Dre ar glac'har ag ar joaüsdet-ze, obtenet din, me o suppli, ar c'hras da zantifian an ol labourio deus ma bue ag ar souffranso deus ma maro, evit mam bo ar joa da glevet ie ar c'hantiko deus an æle, a da jouissan deus a c'hloar eternal ar barados.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

3. Z. Joseph, mirer fidel deus a lezen Doue, pa o c'heus azistet er seremoni deus a sirkonsizion Jesus, ordrenet dre al lezen ansien, o oelet e voad o redek e zant-joc'h o c'hine blesset beteg ar beo. Mes an hano a Jesus a rojoc'h dean er momet-ze a dousaas o klac'har ag a gargas o kalon

ajoäusdet. Dre ar glac'har ag ar joäusdet-ze, obtenet din an ners da vougant em c'halon ar goal inklinasiono gant pere e c'hon tourmantet, ag ar bonheur da gaet er momet ma varvin an hano a Jesus em c'halon ag em geno.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

4. Z. Joseph evurus, da behini e c'he bet revelet ar myster deus a Redamsion ar bed, mar boe evidoc'h eur sujet a c'hac'har ag a affiksion klevet an den zantel Simeon o c'hanons dre avans ar poagno o dije Jesus a Mari da anduri, en eum gaet a rejoc'h soudan karget a joa o klevet ar memes zant o c'hanons penos ar rezurreksion gloriüs ag ar zilvidigez eternal a vije evit kals a dud ar freus deus ar souffranso-ze. Dre ar glac'har ag ar joäusdet-ze, obtenet din ar c'hras da vean unan deus a re pere, dre verito Jesus-Krist, a dre intersession ar Voerc'hes Vari, o devo ar bonheur da resusitan evit ar gloar eternal.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

5. O Z. Joseph, pehini a zo en eum akouitet gant kement a fervor deus ar garg a oa

roet dec'h da diven a da broteji Jesus, pegement a boan ag a fatig o c'heus anduret evit e vagan ag e serviji, ispisial epad an amzer dimeus o c'hexil en Ejyp! Mes ie pebes sujet a levez evidoc'h bevan en e gichen, a goelet idolo an Ejypsianet diskaret dre e brezans. Dre ar glac'har ag ar joäusdet-ze, obtenet din, me o ped, mar teui e brezans em c'halon da chasseal pel dionti an ol idolo, da lavaret eo, pep karante disordren evit mado a plijadurezo ar bed, evit ma hillin en eum implian a grenn da serviji Jesus a Mari, a chom bepred evel doc'h unanet gante epad ma bue ag en heur ar maro.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

6. Æl an douar, Z. Joseph gloriüs, karget da ren ar Roue deus an envo, eur sujet bras a dristidigez a oe evidoc'h, o retorn deus an Ejyp, klevet e oa deut mab ar roue dife Herodes da vean roue en plas e dad, ag en eum voelet exposet deus e beurs da eur bersekusion neve; mes soudan e teuas eun æl do kargan a joa en eur aparissan dec'h, ag e c'hejoc'h neuse da ober o te-

meurans en o ti zantel a Nazareth. Dre ar glac'har ag ar joaüsdet-ze, obténet, me o ped, na vo ket ma c'halon troublet gant sponcho noasuz dam ine, mes ma jouisso er c'hontrel deus a beuc'h eur gonsians vad, a ma rentin gant joa ma ine dam C'hrouer en eur goulén azistans Jesus a Mari.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

7. Skoër a bep zantelez, Z. Joseph gloriüs, pebes kun evidoc'h pa digoeas dec'h kol Jesus, hep ma oa koulskoude dre o faut, ag e-pad an tri de ma oac'h ous en klask dre ruio Jerusalem! Mes pebes levez pa gev-joc'h anean en Templ o tispüt ous an doctoret! Dre ar glac'har ag ar joaüsdet-ze, obténet din, me o ped, bean preservet deus ar malheur da gol Jesus dre ar pec'het marvel; a ma tigoé din pellat eun neubeut diontan, groet ma er c'hlasin hep dale ken am bo kavet anean. Prokuret din ar c'hras-ze ispi-sial en heur ar maro, evit ma jouissin eternellamant anean ebars en env.

*Pater noster... Ave, Maria... Gloria Patri.*

ÿ Z. Joseph, pedet evidomp.

ÿ Evit ma veomp dign deus ar bromesseo Jesus-Krist.

*Pedomp.*

Plijet genec'h, o Z. Joseph evurus, kavet sonj ac'hanomp, a reit dimp ar zikour dimeus o proteksion dirag an Ini pehini a neus o c'hanvet e dad, a groet ie ma veomp deut mad dar Oerc'hes zantel o priet, Mam d'an Ini a vev ag a ren gant an Tad ag ar Speret-Santel e tro pad an eternite. Evelse beet groet.

NAOVET, PE NAO DEVEZ A DEVOSION  
EN HENOR Z. JOSEPH.

*Preparasion dan Naovet.*

Goude seiz vla fonus bras en bep sort trevat roet gant Doue da rouantelez an Ejyp, e c'hoarveas seiz vla al a difreusidigez ag a famin, annonset abeurs Doue gant ar patriarch ansien Joseph. Ar bobl, tourmantet gant an naon ag ar vizer, a grias gant desesper entrezeg ar roue Pharaon, o c'houlén e zikour, evit no lesje ket da vervel gant an defot a vara. Pharaon a respontas d'ar bobl :  
« Et da gaet Joseph, a groet kement a lava-

ro dec'h (1). » Dont a reomp ie o pete, o Z. Joseph glorius, evel ma heas goejal an Ejypsianet da gavet an ini a behini e touget an ano, evit o pedi don zikour. Doue e unan ag on c'halon ie a lavar dimp ar c'homzous a konsolant-ze : « Et da gaet Joseph, a groet kement a lavaro dec'h. »

Zantout a reomp penos e kevomp en o kichen ar remed d'on c'hlenvejo spirituel, ar gonsolasion en o poagno, ar zoulajamant en on mizerio, ar gourach en on zempladurez, ar sklerijen en on tenvalijen.

Zellet ouzimp stouet ous o treid, diners, clan, dibourve a bep tra.

Evel goejal an douar deus an Ejyp, bet on deus blavejo fonus en graso; a ma karmemp, on dije dastumet kals a vado spirituel, tensorio bras a verit ag a vertu. Allas! non deus bet na prudans na furnez; non deus ket profitet deus a c'hraso Doue; leset on deus da gol ar bara selestiel deus ar c'hras divin roet dimp evit maga on ineo. An ineo paour-ze a so breman difreus a disec'h. Tourmantet gant an dienez ag ar fa-

(1) Gen. 41, 55.

min spirituel, krial a reomp entrezeg en-noc'h, o supplian a reomp na lesfet ket anomp da berissan.

Oh! jileo a refet zur on mouez, a bean po true ouzimp, rag o choaset on deus evit on divenner ag on tad ker, o c'houi pehini a so bet etablisset gant Doue ar penn ag ar mirer deus e di en pehini en eum gav an ol densorio deus an env a deus an douar (1).

COMZO Z. JOSEPH.

Ma bugel, o karet a ran, c'houi a kement a laca o c'honfians ennon. Jileoet mad a vo o peden. Ne noc'h ket estranjourien evidon. Bean e zoc'h ma brendeur. Tostaet ouzin... Me eo Joseph .. No peet ket aon... Evit o silvidigez en deus an Autro Doue ma c'hasset arog dec'h; me a brokuro dec'h ar vagadurez oc'h eus eomp evit na varfet ket gant an defot (2). An tensorio deus ar graso divin a so digor. Kerc'het dionte ar pez oc'h eus eomp. Ar mado-ze hepken a gleet

(1) Ps. 105, 21.

(2) Gen. 45, 4, 5, 11.

da desirout. Petra dal da eun den bean diskennet deus a ligne ar roue David, bean er stad huelan a hel eun den da bretanti, ma ne ve ket e galon zantifiet dre ar c'hras divin? Enon e man o prassan mad, o ma pugel: ar peuc'h er bed-man, an evurusdet er bed al. Deut eta davedon, a me o kasso bete kichen Jesus. E hepken eo an hent, ar ouirione ag ar vue (1). Deut eta, rag resev a ragant madelez kement ini a brezantan dean. Me a servijo dec'h a gonduer epad o pelerinach oar an douar, evel ma meus groet d'ar mabik Jesus evit e breservi deus a grueldet Herodes. Bean oc'h eus ie adversourien gruel; red eo dec'h o zrec'hi, pe o stourmonte, pe o tec'hel arog de. An adversourienze a glask ober dec'h oas evit lazan o korf, pa fel de rei ar maro doc'h ine. Deut, a me a roio dec'h armo ous pere na alloint ket enebi. An armo-ze eo an ol vertuio, an humilite, an dousder, ar burete, an aboissans, an devosion, ar garante. An armo-ze a so kreoc'h evit re ar buissantan rouane, a dreist an ners deus a ol buissanso an douar

(1) Joan. 14, 6.

ag an ivern. Deut eta, ma bugel kez, a me rei dec'h kompren a karet lezen Doue, al lezen-ze pehini a ro furnez dar re vian (1), joausdet dar galon, sklerijen dan daoulagat (2). Sonjal a refomp a barfedet en gourhemeno an Autro, en e vue a skoër vad, en e ordrenanso presiusoc'h evit an aour ag ar perles, a dousoc'h evit ar mel ar puran (3). Deut eta, ma bugel.

### KENTAN DEVEZ.

MEDITATION OAR AR VEACH A RES Z. JOSEPH DA VETHLÉEM ELEC'H MA OE GANET JESUS.

*Joseph a ieas deus ar ger a C'halilée, hanvet Nazareth, da ger David, hanvet Bethléem, er Judée. (Luc, II, 4.)*

O ine touchet a garante Doue, laka da ratoz da gompren ar c'homzo leun a dousder a lavare Mari a Joseph an eil d'egile epad ar veach-ze. En eum antreteni a rent

(1) Ps. 18, 8.

(2) Id. 9.

(3) Id. 11.



deus a viserikord an Autro Doue, pehini a gasse voar an douar e Vab unik, evit rakouitan ar bed ol, a deus a garante Mab Doue, pehini a deurvee disken en draouienman a daëro da zatisfian dre e zouffranso a dre e varo evit pec'hejo an ol dud. Konsider ie an dristidigez a zantas Z. Joseph pa en eum voelas, en noz-ze en pehini e oe ganet Jesus, rebutet a bep lec'h gant Mari er ger a Vethléem, a kontraign den eum dennan en eur c'hraou. O pebes kalonat evitan pa voele e briet zantel o krenan gant an anoet ebars er c'havern gleb a diabri-ze! Mes kompren ie, o ma ine! mar gelles, ar gonsolasion en devoe, pa glevas Mari ous en gervel ag o lavaret dean : « Deut, Joseph, » deut da adori eun Doue groet bugel ag a » deurve dont er bed ebars er c'hraou-man; » admiret e genet, contemplet Roue ar bed » ol gourveet aman oar eun neubeut foënn; » zellet-an o krenan gant ar riou, e pehini » a anflam ar seraphinet gant an tan deus » ar garante; zellet-an o oelan, e pehini a » garg a joaüsdet an ol habitantet deus an » envo. »

Sonj ie, o ine kristen, er zantimancho a

garante ag a deneridigez a douchas kalon Z. Joseph, pa oelas gant e zaoulagat e unan Mab Doue e form eur bugel bian, pa glevas an æle o kanan kantiko en dro dan Doue neve ganet, a pa voelas ar c'hraou karget deus a eur sklerder burzudus. Neuse ous en eum deul oar e zaoulin, ag en eur skuil daero a deneridigez : « O ma Autro a ma » Doue, emean, o c'hadori a ran evel ma » mestr. Pebes gras a ret din da vean, goude » Mari, ar c'hentan en deve bet an heur » do koelet neve ganet, a da c'hout e c'he » o polante bean hanvet a bean kredet mab » din me. Permetet din eta rei dec'h bre- » man an ano dous-ze, a lavaret dec'h : Ma » Doue a ma Mab, en eum oëstlan a ran evit » biken do servij. Ma bue na vo ken din ma » unan, mes dec'h hepken, a na vo ken im- » pliet nemert d'o serviji. » Pebes levez, » c'hoas evit Z. Joseph pa oelas, en nos-ze » memes, ar bastoret kelennet gant an æl o » c'hariout da voelet o Zalver neve ganet, ag » eun neubeut deio goude, ar rouane deut » deus ar vro zav-eol evit adori ar Roue deus » an env, an Doue groet den evit zilvidigez e » grouadurien.

HISTOAR.

Ar sœur *Jeanne des Anges*, prioires an Ursulinezet deus ar ger a Lyon a oe skoët gant ar c'hlenvet a bleuresi. Bean e devoa eun derjen rust bras, a souffr a re poanio kruel meurbet. An ol remejo a vije roet dei na roent dei soulajamant ebet; ag bean e oa en eur stad ken diremet ma zeblante ne devoa ken nemert ar maro da c'hortos. Un de ma oa ken fal ken na roe merq ebet a vue, petra benag me devoa bepret e c'hanoudegez, e voelas Z. Joseph, e frotektor partikulier, o fiske deus an env gant eur feson a vadelez pehini a oa eur merk deus ar c'hras presius en devoa c'hoant da rei dei. E c'hamprik en eum gavas chanjet evel en eur barados bian. E kreis eun oabren steredennus ar glanvourez a voelas eun den iaouank pehini en devoa eur feson grasius meurbet, gant eur ouiskamant lugernus ag a dalc'he eur ganteul goar en e zorn. Anaveout a res e oa an den iaouank-ze ec'h ael mad. En e gichen e oa ar patriarch glo-

rius Z. Joseph gant eur vajeste admirabl, ag e muoc'h lugernus evit an eol. Ar zant a dolas oar ar soeures glanv eur zel leun a dousder, ag a gomzas onti evit e c'halia da gontinui da gaet evitan eun devosion ag eur gonfians vras, ag en eun tol e rentas anei pare deus e c'hlenvet. Diustu goude-ze e tisparissas ar vision, ag al leanes a neum gavas iac'h, a savas deus e goele ag en eum ouiskas. Er momet-ze e c'harias ar medesin evit e bizitan; mes pegement en eum gavas souezet, pa oelas o tont de rankontr an ini a sonje gantan a glee bean pe varo pe brest da vervel! Rentet a oe da Z. Joseph an aksiono a c'hras e oa gleet dean, a kement-ze a oe eur sujet da greski an devosion en e andret.

PEDEN.

O patriarch zantel, o pedi a ran, dre an dristidigez a behini a oe mantret o kalon pa oeljoc'h ar Verb divin ganet en eur c'hraou, er vrassan paourente, hep tan, hep lienach, o oelan abalamour dan anoet, da obteni evidon eur gouir glac'har deus ma fec'hejo pere a so bet kiriek da daero Jesus.

Mes o pedi a ran ie, dre ar gonsolasion a zantjoc'h kentan ma voeljoc'h ar mabik Jesus ken kaer, ken grasius, a dre ar garante a zantjoc'h neuse o redoubli en o kalon evit ar bugel-ze ken dign da vean karet, obtenet din ar c'hras den karet dam zro mui ous mui, evit ma hillin eun de e bos-sedi ebars er barados. Evelse beet groet.

### EIL DEVEZ

#### MEDITATION OAR AR VEACH EN EJYP.

*Æl an Autro a apparissas da Joseph en e gousk ag a lavaras dean: « Savet deus o koele, kemeret genec'h ar bugel ag e vam, ag en eum dennel en Ejyp. » (MATTH., II, 13.)*

Ar roue Herodes, o vean klevet gant an tri roue zantel deus a vro sav-eol penos e oa neye ganet Roue ar Judevien, a roas an urs barbar da lazan an ol vugale deus ar ger a Vethléem a deus ar vro divoar dro. Mes Doue, pehini a felle dean preservi e Vab deus ar maro en amzer-ze, a gassas eun ael

da avertissan Z. Joseph deus an danjeur da behini e oa exposet, a da rei dean an urs da dec'hel dan Ejyp gant ar bugel divin ag e vam. Konsider aman, ine kristen, an aboissans pront a Z. Joseph. Na stourmas en nep feson ous an urs-ze, oar digare na ouie nag an heur favorabl nag ar voyen da antrepren eur veach ken hir, na pelec'h e c'halje ober e zemeurans ebars er vro bel-ze en pehini na anevee den. Mes en eum brepari a reas hep dale den eum lakat en hent. Kerkent e c'hanonsas da Vari an urs roet dean abeurs Doue; ag e kreis an nos memes, evel ma tisk dimp an den leun a skiant Jerson, o vean groet eur pakat deus a oustillo e vicher a helle kas gantan, evit gallout gonnit gant e labour e vuegez ag ini e famil paour e keit a ma vijent en Ejyp, e partias gant e briet zantel ag ar mabik Jesus. En eum gaet a rejont evelse, hep den ebet evit o ren, o c'hober rout entrezeg en Ejyp, da c'hout eo, o kommans eur veach a ouspen cant leo dre hencho dies, dre veneio, dre deserjo elec'h na vije na hent na goenojen ebet. O pebes melkoni evit Z. Joseph, epad ar veac'h-ze, goelet e briet ker brevet gant

ar fatig, hi pehini na voa ket kustum da veaji, ag a douge c'hoas entre e divrec'h ar bugel divin deus a behini en eum gargent a bep eil ! Pebes nec'hamant gant aon na goejent entre daouarn soudardet Herodes, o tere'hel da vont en o rout gant pep sort amzer, hep abri ebet den eum breservi deus ar glao pe deus an eol ! A petra o devoa da dibri epad o beach ? Pe an neubeut bara o devoa kasset gante deus o bro, pe ar boet a vije roet de en aluson. A parie an nos, pelec'h e kemerent-hi o repos ? Allas ! a oejo en eun ti fal benag, a oejo dindan eur voeen, ag a oejo memes er mezo diabri. Joseph, evit gouir, en devoa eur zoumission barfet da volante an Tad eternal, pehini a c'houle e teuje e Vab unik da souffr poagno adaleg e yugaleach, a da satisfian evit pec'hejo ar bed : mes e galon dener a karan-tezus na helle ket en eum viret da vean touchet beteg ar beo o klevet Jesus o oelan dre an anoet ag ar poagno al a andure. Kompren c'hoas, o ma ine, pebes displijadur a oe evit Joseph chom seiz vla en Ejyp, ervro-ze en pehini nen devoa na kerent na mignonet a gement a halje kavet zoursi

anean, ar pez a ra da Z. Bernard lavaret penos e renke ar patriarch zantel labourat nos a de evit pourvei boet de briet a dar bugel divin pehini koulskoude a vag dre e brovidans an ol dud ag an ol loenet deus an douar.

---

#### HISTOAR.

Eur relijius deus a gouent Itron-Varia-Mont-Serrat, en Spagn, en devoa eun devotion vras da Z. Joseph ; ag ar pez a re ar sujet ar muan ordinal deus e veditasiono ag a brokure dean ar brassan konsolasion ag ar brassan fervor, a oa ar veach deus ar zant bras gant ar Oerc'hes ag ar mabik Jesus evit mont dan Ejyp. O vean sortiet eun de deus e gouent evit eun affer benag, e figoeas dean, en eur retorn d'ar ger, kol e rout er meneio bras deus ar vro-ze. An nos o vean deut, en eum gaet a re en dan-jeur deus e vue, abalamour dal loenet goe a dal laeron a bere e oa karget an deserro-ze. En eun ezomp ken bras e c'houlennas zikour an Autro Doue. Souden goude-

ze e c'harias gantan eun den ag a rene eun aneval oar gein pehini e oa aseet eur vroeg gant eur bugel bian entre e divrec'h. Goulen a reas digant an den-ze an hent da vont de gouent. « Ma keret heul anomp, a res- » pontas-an, pera benag ma c'he dies an » hent, a ma kommans an nos bean tenval, » me a diskoeo dec'h o rout, rag en ana- » veout mad a ran. » Mont a rejont eta as- sables, a kerzet a rejont epad eur pennad mad amzer, a derc'hel a rent da goseal, mes en eur feson ken zantel ma oa ar re- lijus ol deneret e galon, a na zante ken memes ar fatig deus e veach. Ariout a re- jont erfin tost dar gouent; a pa gomansas ar relijus anaveout e hent, an estranjou- rien en saludas ag a disparissas en eun tol. Neuse e teuas da sonjal penos an den-ze pe- hini na anavee ket na helle bean nemert Z. Joseph, pehini a oa deut gant Jesus a Mari de zikour en danjeur en pehini e oa en eum gaet. Ar c'homzo en devoa klevet gant ar veajerien selestiel-ze a chomas skrivet don en e galon betec an de divoean deus e vue.

PEDEN.

Ma divenner zantel, en hano ar soumis- sion ken pront a ken parfet-ze oc'h eus bet da volante Doue, obtenet din digant Jesus o mab ar c'hras da zujan hep murmur ebet dan urjo deus ar Brovidans divin oarnon. Obtenet din, epad ar veach a ra ma ine en- trezeg an eternite, ar c'hras da vean bepret en kompagnunez Jesus a Mari bete ma hua- nad divoean. Evelse beet groet.

TREDE DEVEZ.

MEDITATION OAR LABOURIO JESUS EN STAL  
Z. JOSEPH.

*Jesus, er stad-ze a sujidigez, a gemere a galon vad e lod ebars er poagno ag er fatig deus a vicher Z. Joseph. (Z. JUSTIN, Dialog.)*

Konsider, ma ine, gant souez ag admira- sion, Jesus ous en em rei ol en e di a Naza- reth da rentan pep sort servijo da Joseph, e dad mager, pehini a oa eun artizan simpl. Labourat a re gantan, ag en asistan a re en e ol ezomo, evel ma re ie de vam biniget.

Kementse a so diskleriet dimp en Aviel memes (1) en pehini e c'he lavaret en devoa ar vicher a galve. Piou a halfe lavaret na memes kompren ar pezh a zante Z. Joseph en e galon, pa oele o vanian an esken, ar rabot ag an oustillo al an daouarn divin-ze pere o deus krouet an eol ag al loar, pa oele ar c'hoez o redek divoar an tal selestiel-ze oar behini e lugern ar vajeste deus an natur divin, a pehini a so an objet deus a gontemplasion eternal an æle? Piou a gompreno ar zoursi a gemere Z. Joseph evit diminui ar poagno deus ar bugel admirabl-ze? Pegement a anoudegez vad a diskoe Jesus evit ar zoursi ken tener en devoa Z. Joseph evitan! Pesort sonjezono na gle ket ispiran dimp eun dra ken souezus, a ken kapabl da douch eun den ag a neve eur fe beo! Eun Doue aboissant! eun den simpl pehini, abalamour de galite a dad, a gompmand da eun Doue, ag a laka entretant e ol zoursi da skanvat ar poagno ag al labourio deus ar mab-ze pehini a zo gouir Doue! Diskomp dre an exempl-ze penos ar barfe-

(1) Marc, VI, 3.

det a gonsist oc'h ober en pep tra bolante zantel an Autro Doue. Mes allas! ag e c'he ar skoer-ze ar reglen deus on bue? O pegen disans eo refus en eum skoerian oarni! A koulskoude, pegement a dud, dre eun dallente estranj, a laka o fen ag o fantazi e plas ar reglen-ze? Kals memes a bretant ober bolante Doue, a na ouzont ket en pe-tra a gonsist ar volante adorabl-ze. A sonjet mad oc'h eus-u biskoas, ine kristen, en kementse? A klasket oc'h eus-u a galon vad anaveout ar pezh a c'houl Doue digenech evit o ponheur ag o silvidigez? Na neus koulskoude netra muoc'h æset da anaveout. Zellet ous Z. Joseph; zellet penos e teu da ober bolante Doue, ous en eum akouitan fidelamant deus a ol deverio e stad. Bolante an Tad selestiel a gonsist a dra zur evit pep den ous en eum akouitan a boent da boent deus an obligasiono demeus e stat. An nep e vank dan obligasiono-ze, a pa dremenfe e ol devejo ous treid an oterio zantel, a zo koupabl dirag Doue. E devosion a zo faus a hep dalvoudegez ebet: a disprizet eo gant eun Doue da behini na hellomp plijout nemert pa reomp e volante a non pas on ini.

### HISTOAR.

Bean a oa eun autro nobl ag en devoa eur gonfians vras e proteksion Z. Joseph. Pep bla e vire an de deus e ouel gant kals a devosion. An autro-ze en devoa tri mab. Unan ane a varvas de ouel ar zant. Er bla oarlerc'h e varvas eun al er memes de. An daou gol-ze a reas kement a impression oar an tad kez-ze ma sonjas tremen ar c'hentan bla goude hep ober ar gouel a Z. Joseph, gant aon na deuje e divoean bugel da ver-vel evel ar re al. Mes arog se e tigoas dean mont en beach. Eun de ma oa o kerzet leun a velkoni, o sonjal en e daou vugel maro, e tigoas dean goelet daou den yaouank krou- get ous eur voeen. Neuse ec'h aparissas eun æl dean ag a lavaras : « Goelet a res an daou den yaouank-ze? Ahan'ta, da daou vab, ma vijent chomet beo, o dije evel ar re-zeo achuet o bue ous ar c'hroug. Mes Z. Joseph, abalamour dan devosion a spoa evitan, en deus obtenet digant Doue ma varvjent en yaouank, evit distrei an dise-

nor-ze divoar ta famill, ag evit prokuri de an evurusdet deus ar barados. Ke eta bre- man da selebri ar gouel deus ar zant, evel ma c'hout kustum, a na spe aon ebet evit ar bugel a chom dit, rag bean e vo eskop ag e vue a vo hir. » An treo a arias evel ma oa bet annonet gant an æl.

### PEDEN.

Z. Joseph glorius, na meus ket, sivoas din, heuillet o roujou pere a diskoe din ken skler an hent deus ar berfeksion. Ana- yeout a ran ma dallente, a gout a ran pe- nos ar zoursen deus ma dizurzo eo ma bo- lante ma hunan pehini a meus heuillet, elec'h heuil bolante Doue pehini hepken a hel ren an den etrezeg ar guir evurusdet. Leun a gonfians ennoc'h, o patriarch truezus, o sikour eo a c'houlennan breman ; a pa en deus deurveet Mab an Tad eternal en eum zoumeti do polante oar an douar, obtenet din ar c'hras da ober a boent da boent ke- ment a blijo dam C'hrouer ordren din. Evelse beet groet.

**PEVARVET DEVEZ.**

MEDITASION OAR AR C'HOL DEUS A JESUS  
MANET EBARS EN TEMPL.

Ar mabik Jesus a chomas en Jerusalem hep gout  
de gerent. (LUC, II, 45.)

Goude seiz vla a exil tremenet en Ejyp,  
an æl a apparissas a neve da Z. Joseph, ag  
en avertissas da return de vro gant ar bu-  
gel ag e vam. Z. Bonaventur a zel ar veach-  
ze evel muoc'h poagnus da Vari a da Joseph  
evit an ini o devoa groet evit mont dan Ejyp;  
rag Jesus o vean neuse ari oar dro an oad  
a seiz vla, a oa re vras evit bean douget  
oar an divrec'h, a re iaouank evit ober ke-  
ment a rout oar e droad. Ar fatig deus an  
hent a oblije eta ar bugel charmant-ze da  
arreti alies, a da chom pennado amzer gour-  
veet oar an douar. Mes konsideret ispisial  
an dristidigez a hehini a oe karget o c'halon  
pa digoeas de kol anean, goude ar visit o  
devoa groet gantan dan templ a Jerusalem.

Ar brassan joa deus a Z. Joseph a oa da ve-  
van en darempret ken dous deus e Zalver  
grasius. Pebes glac'har eta, pa en eum oe-  
las privet deus ar blijadur-ze, hep gout ag  
e a oelje biken ken an Ini en devoa kollet,  
na petra a oa kiriek ma oa eet digante! Ag  
eno en deün a oa ar zujet deus e yrassan  
nec'hamant. Rac ar patriarch zantel, humbl  
evel ma oa, a sonje e oa manket marteze  
oar eur poent benag deus e zever, ar pez  
a vije bet kiriek da Jesus da gouitat e di,  
dre na geve ken anean dign deus e gomp-  
gnonez, na deus an honor en devoa bet bete  
neuse da evessat an tenzor presius a oa fiet  
ennan. A bean a ve poan ebet muoc'h san-  
sibl da eun galon karget a garante Doue,  
evit bean en doutans da vean displijet dean?  
Dre ze ie, epad an tri de ma oe Mari a Jo-  
seph o klask ar mabik Jesus, na heljont ka-  
vet repos ebet, a na rejont nemert gouelan  
gant ar c'hun da vean kollet an objet deus  
o c'harante; evel men disklerias ar Oerc'hes  
ec'hunan, pa en kavas ebars an Templ:  
« Ma Mab, emezi, perag oc'heus-u groet  
» dimp evelse? Chetu e oamp o tad a me o  
» klask anoc'h gant kals a anken. » *Fili, quid*



*fecisti nobis sic? Ecce pater tuus et ego dolentes querebamus te* (1).

Mes komprenomp deus eur c'hoste al ar joa deus a Joseph pa gavas Jesus entouez an doktoret, a pa glevas gantan penos, pa oa en eum dispartiet dionte, na voa ket dre ma vije dronk kontant ane, mes dre ar zel en devoa evit gloar e Dad selestiel.

#### HISTOAR.


Zantes Theresa e deus eprouvet e meur a okazion ar broteksion deus a Z. Joseph, evel me deus en diskleriet en e skrijo. Chetu aman unan deus an okaziono-ze e pehini a oe gleoures dean deus e bue ec'hunan a deus bue meur a hini deus e leaneset pere a oa ganti. O vean en beach evit mont da etablissan eur gouent neve, dindan an hano ag ar patronach deus a Z. Joseph, ar voiturier en eum dromplas a rout ag a antreas en eun hent dies bras. Ar c'hezek a gomansas nense kas ar voiturier entrezeg eur persipis. Theresa o oelet e merc'het ol

(1) Luc, II, 48.

spontet a lavaras de : « Merc'het kez, na » chomp dimp moyen ebet da neum breservi » deus ar maro. Red eo kavet rekours da » Z. Joseph on tad ker, a goulen e azistans. » E ober a rejont, ag er momet-ze e klevjont eur voez o tont deus fons ar persipis en pehini e oaint prest da goean ag a lavaras de : « Chomet, chomet ase! Mar ret eur c'hamet » c'hoas, e zoc'h kollet. » Dan urs-ze ar c'hezek a chomas en o flas, ag al leanezet a c'houlennas dre pe koste a gleent trei. Ar memes moez a verkas de eur rout al pehini a oa ken danjerus en apparans evel an ini e pehini e oaint. Zenti a rejont nag evit se, ag en eum gaet a rejont diustu emes a danjeur. Neuse ar voiturier ag ar gonduerien a ieas da glask an ini en devoa komzet onte, evit e drugarekat, mes na gevjont na den na rout den ebet. Mes zantes Theresa e devoa anaveet ar voez pehini e devoa kriet de en eun danjeur ken terrupl, a lavaret a reas : « Merc'het-kez, no deus ket eomp » on c'honduerien da gl'asq an ini en deus » on soveteet. On tad mad Z. Joseph eo en » deus rentet dimp ar servij bras-ze. »

PEDEN.

Ma patriarch zantel, gouelan a rec'h abal-  
lamour ma en eum oelec'h privet deus a  
brezans Jesus, mes bepret oc'h eus bet eur  
garante vras evitan, ag e, deus e goste, a  
garé ie anoc'h, pa en devoa o c'hoaset evit  
e dad mager ag ar gardien deus e vue. Me  
eo a glefe kentoc'h gouelan, pa e meus ken  
alies a oec'h, evit plijout dar grouadurien  
ag evit heuil ma fanchancho fal, dileset a  
kollet ma Doue, en despet dan ol c'hraso  
en deus roet din. Ah! me o ped dre ar me-  
rito deus ar glac'har a drenjas o kalon, pa  
oe kollet Jesus epad tri de, obtenet din ar  
c'hras da skuil daëro kontinuel oar an ou-  
trajo a meus groet dam Mestr divin; a dre  
ar joa a zantjoc'h pa gefjoc'h anean ebars  
en Templ, obtenet din, goude bean bet ar  
bonheur den resev em c'halon, ar c'hras  
da berseveri da viken en e garante. Evelse  
beet groet.



PEMVET DEVEZ.

MEDITATION OAR AR BONHEUR EN DEUS BET  
Z. JOSEPH DA JOUISSAN BETE FIN E VUE  
DEUS AR GOMPAGNONEZ BEMDEIEG A JESUS.

*Jesus a ieas gante ag en eum rentas en Nazareth,  
a zenti a re onte. (LUC, V. 21.)*

Jesus, goude bean bet kavet en Templ, a  
retornas gant Mari a Joseph dar ger a Na-  
zareth, ag e keit a ma chomas ar patriarch  
zantel-ze oar an douar, e chomas assambles  
gant an, o zenti ontan evel ous e dad. Kon-  
sideret aman ar vue zantela gondaas Joseph  
aboue an amzer-ze, gant Jesus a Mari. Evit  
ar famill biniget-ze, na oa affer al ebet ne-  
mert an ini da brokuri ar brassan gloar  
dan Autro Doue; na oa ken sonj, na ken  
c'hoant nemert da blijout da Zoue; na oa  
ken conversasion nemert dioar ben ar ga-  
rante en deus bet an Autro Doue evit an  
dud, ag ar garante a glé do zro an dud dan  
Autro Doue. Oh! pebes abundans a zaëro a  
rede deus daoulagat Mari a Joseph, pa en

eum antretenent en presans Jesus memes deus e bassion ag e varo kri a bere e oaint instruet dre ar skriturio zakr! Gant pebes teneridigez a galon a lavare an eil diguile penos, evel men devoa ar profet Isaias anonset, e vije eun de ar bugel adorabl-ze karget a boagno ag a humiliasiono, e teuje e adversourien da difesoni ar visach kaerze ken na vije ket anaveabl, e vije e gorfzantel dispennet a dollio skourje, beteg ar poent da vean anval ous korf eun den karget a lornez ag a c'houllo, e vije goude-ze kasset dar maro evel eun oan, hep digeri memes e c'heno evit klem, a penos er fin e vije staget ous eur c'hoat infam e kreis entre daou laer, ag e c'hachuje e vue oar ar groas, ebars en horruplan tourmancho. Komprenet, mar gellet, ar zantimancho a c'hlac'har ag a garante a save en kalon Z. Joseph dre ar sonj deus an treo-ze.

**HISTOAR.**

An tad de Barry a rapport an histoar edifiant deus eur pec'her konvertisset dre intersession Z. Joseph.

Eun den iaouank deus a Lyon en devoa kunduet epad e vlavejo kentan eur vue gristen ag edifiant bras. Kemeret en devoa memes ar resolusion da gouitat ar bed evit assuri e zilvidigez; mes e gerent o vean en eum opposet de dessein, nen devoe ket kalon aoualc'h evit heuil moez an Autro Doue pehini en galve. Souden goude, an darempred deus ar bed a diminuas e ferveur, a kouitat a reas neubent a neubent e exersiso a devosion. Al liberte a roe dean e gerent, ar chalmo deus a blijadurezo ar bed, an exemplo a oele dirag e zaoulagat, a reas dean anfin ankouat e ol deverio ag en eum livran dan ol disurzo deus eur vue libertin. Prest goude, evel eun eil bugel prodig, e kouitaas ti e dad ag en eum angajas evel soudard, ag ebars e stad-ze, elec'h meritout bean istimet, na veritas nemert tremen evit eun den debochet bras pehini nen devoa ken a vez deus a netra. Doue a bermete kement-ze evit e bunissan da vean manket da heuil e vokasion dre gonsiderasion evit e dud, ag evit bunissan e gerent da vean bet kontrol dar vokasion selestiel deus o bugel. Eur chagrin vras o devoa koulskoude

o oelet dindan esklavaj an diaoul ar bugel-ze o devoa refuset da Zoue, a skrivan a rent alies dean lisero trempet gant o daero, evit en alyan da chanj a vue, a da retorn da di e dad elec'h ma vije resevet gant kals a joa. Anfin, desolet bras o oelet na re o exortasiono effe ebet oar ar galon galedet-ze, e oent inspiret da neum adressi da Z. Joseph, a den suplian da gemer ar bugel paour-ze dindan e broteksion, a da ampech na deuje den eum gol evit biken. Z. Joseph a jileoas o feden ag a inspiras dan den iaouank-ze zantimancho ken bras a gun de vue disordren, ma chanjas diustu evel eun den al en e blas. Kouitat a reas an arme, retorn a reas da di e dud, o c'houlouen pardon deus ar chagrin en devoa groet de, ag e kommansas dioar neuse kundui e vue evel men devoa groet en e vlavejo quantan, a rei a reas sujet da lavaret dioar e ben ar pez a lavar an Aviel dioar ben ar bugel prodig : « Bean e oa maro, ag e c'he resussitet; bean e oa kollet, ag e c'he bet cavet (1). »

(1) Luc, XV, 52.

PEDEN.

Patriarch zantel, en hano an daero o c'heus skuillet o sonjal er souffranso a oa reservet do pugel ker Jesus, obtenet din ar c'hras da sonjal hep sess a gant karante en tourmancho ma Zalver divin; a dre ar flam a garante a allume en o kalon ar gonsiderasion-ze deus e bassion, ag ar c'honversasiono o poa gant Mari oar ar sujet-ze, groet ma teui eur fulen benag deus an tan-ze em ine me, pehini a so bet kiriek evit eul loden vras da souffranso Jesus, evit ma en karin ie dam zro, a na vin biken dispartiet diontan. Evelse beet groet.

**C'HOEC'HVET DEVEZ.**

MEDITATION OAR AR GARANTE EN DEUS BET  
Z. JOSEPH EVIT JESUS A MARI.

*Jesus a teas gante, ag a deuas da Nazareth,  
a zenti a re onte. (LUC, II, 51.)*

Konsideret da gentan ar garante deus a  
Z. Joseph evit e briet zantel. Mari a oa ar

gaeran deus an ol vroage a oa bet biskoas ag assambles an humplan, an doussan, ar buran, ag an aboïssantan. Nag an den nag an æl no devoa bet biskoas evit Doue eur garante par de c'hini. Meritout a re eta ol garante Joseph, pehini a istime ar vertu dreist pep tra. Goelet a re ie pegement e oa karet gant Mari, pehini zur a gere e friet dreist an ol grouadurien al. E c'honsideri a re evel an objet deus a ol garante an Tad eternal pehini en devoa i choaset evit bean gouir vam de Vab unik. Groet reflexion goude se pebes zantimancho a garante ag a anoudegez vad en devoa Joseph evit eur priet ken dign da vean karet.

Dan eil, konsideret ar garante en devoa Z. Joseph evit Jesus. Doue, en eur choas anean evit servijout a dad da Jesus, en devoa allumet en e galon eur garante a dad, ag a dad da eun evelep mab pehini a oa gouir Doue. Carante Joseph na oa ket eta eur garante naturel hepken evel hini an tado al, mes eur garante dreist natur, pa neo gouir e c'hanavee en personac'h Jesus e vab ag e Doue assambles. Dre ar revelation en devoa groet dean an æl, e ouie par-

fetamant penos ar bugel bian-ze, pehini a oa dirag e zaoulagat, a oa ar Verb divin pehini en devoa kemeret eur c'horf ag eun ine evit en eum ober den dre garante evit ar bed ol ag evitan en partikulier. Gout a re penos ar bugel-ze en devoa e choaset entouez an ol dud evit bean ar gardien deus e vue, a bean zellet evel e dad. Pebes flam a garante a glee eta leski kalon Z. Joseph, pa sonje er mysterio bras-ze, a pa oele e Vestr divin ous e serviji evel ma vije bet sujet dean, ag o zenti ontan en kement tra a gomande dean, hep ober james netra nemert dre an aboïssans en devoa evitan evel evit e dad!

Pebes teneridigez a zante en e galon, pa en douge entre e zivrec'h, pa en cherisse, a pa vije e unan cherisset gant ar bugel divin-ze, pa gleve deus e c'heno ar c'homzo a vue eternal pere a oa evel biro a garante oc'h antren en e galon, ag ispisial pa gonsidere ennan an exempl deus an admiraplan vertuio. Ar garante o deus ar brassan mignonet an eil evit iguile a deu alies da ienat dre an darempret kontinuel o deus assambles; rag sulvuy en eum darempredont, sul-

vuy a oël an eil sio iguile. Mes kementse na helle ket ariout gant Joseph, rag sulvuy e veve gant Jesus, sulvuy e c'hanavee e zantelez. Komprenet eta pegement e kare Jesus pa en deus bevet gantan, evel ma c'he rapportet ebars el levrio ansien, ar spas a bemp bla oarnugent.

#### HISTOAR.

Ar pez a vo lavaret aman a so bet c'hoarveet nen deus ket fors pel, er bla 1834, ebars en eur golech a jesuistet hanvet *Z. Joseph-du-Blamont*. Savet e oa bet enon a neveur chapel dediet da Z. Joseph. Ar seremoni deus an dedikas a oa bet fixet dan trivet zul goude Pask, en pehini a selebrer ar goel deus a Batronach Z. Joseph, ag evit en eum brepari dar solanite-ze, a oe kavet a propos e teuje an ol skolaerien da ober eun naovet en honor dar zant. An de kentan deus an naovet e tigoeas dar superieur goelet eur jardiner deus an amezeg, ag o c'hevessat oar e visaj merko a dristidigez, e c'houlennas digantan ar sujet deus e chagrin. « Bean

e meus daou vugel, eme ar jardiner, ag a so clanv aboue pel amzer; an ol remejo na reont netra; ar medesin a lavar na voint biken iac'h ma na chanjan ket a demeureans, a c'hoas na el ket assuri e teufent iac'h, a pa rafen kementse, abalamour ma c'he marteze ar c'hlenvet ari en ampoent da vean diremet. Mes pelec'h e c'hin-me? Aman na vank ket a vara dimp. Mes ma c'han el lec'h al, penos e c'hillin-me bevan ma mam, ma groeg a c'hoec'h bugel? » An tad superieur a gonsolas anean, ag en alias da gaet rekours dan Autro Doue, ar medesin bras, dre intersession Z. Joseph. Na ouie ket c'hoas penos meur a hini deus a venpro ar familize a douge an hano memes deus ar patriarch zantel. « E c'han eta, eme ar jardiner, da bropos dam zud ober assables genin eun naovet da Z. Joseph. Beet ar vadelez don rekommandi de broteksion. » O vean retornet dar ger e lakeas a goste an ol remejo ag e kommansas an naovet. An de kentan memes e timnuas an derjen ag ar c'hoenvn; an deio oar lerc'h an ol c'houllo a lekee ar vugale baour-ze da disec'han a disparesse neubout a neubout. Goude ze an derjen a dis-

parissas a grenn. Anfin an naovet devez, en pehini e tigoee goel ar patronach, e teuas dar golech gant e zaou vab iac'h mad, da c'houlen permission da asistan en de-ze en offiso divin evit trugarekat o madoberour selestiel. Neuse e lavaras an tad superieur de-an : « Kredi a ran, pa vo konfirmet an daou vugel-man e rofet de an hano a Joseph.—O ma zad, emean, dougen a reont o daou an hano-ze, ag o mam ie, a c'hoas eun al deus ma bugale. » Ar superieur, pedet gant ar jardiner, a skrivas oar eur feuillen vras a baper ar goellaen miraculus-ze deus e zaou vugel. Ar feuillen-ze a oe laket en eur stern evit bean miret er famill-ze evel eun testeni eternal deus a broteksion Z. Joseph oarni, a deus e c'hanoudégez vad evit ar faveur e devoa resevet digantan.

**PEDEN.**

Kals a joa e meus, o ma fatriarch zantel, deus ar bonheur a deus ar gloar a behini e jonisset; ag o supplian a ran dam resev en o servij zantel. Ah! ma digemeret, me o ped, en nombr o servijerien. Ma bolante eo o c'honorj, o karet ag o servijj evel ma mestr.

Ma c'hemeret eta dindan o proteksion, a ordrenet din kement a blijjo dec'h. Gout a ran penos kement tra a ordrenfet din a vo evit gloar Jesus ma redamptor. O Z. Joseph, pedet Jesus evidon; pedet anean da bardoni din ma fec'hejo, da distagan ma c'halon deus an ol dreo krouet a deus a c'hanon ma unan, a dreist pep tra da allumi ennon an tan deus e garante zantel, evit mambo ar bonheur den karet kals oar an douar a den karet eternellamant er barados. Evelse beet groet.

**SEIZVET DEVEZ.**

**MEDITATION OAR MARO Z. JOSEPH.**

*Maro ar zent a so presius dirag Doue. (Ps. 113, 13.)*

Konsideret Z. Joseph ari en fin e vue, goude bean rentet eur servij fidel da Jesus a da Vari. Mervel a eure en e di zantel a Nazareth; ag eur vanden æle a oa en dro dean. En kichen e oele paour en eum gave Jesus, roue an æle, ag e briet zantel ar Oerc'hes

Vari. En eur gompagnunez ken dous a ken honorabl e sortias deus ar vue miserabl-man gant eur peuc'h delisius ag ol selestiel. Ar brezans deus eun evelep priet a deus Redamptor ar bed, pehini, pa oa gouir Vab Doue, en devoa deurveet bean hanvet e vab e, a rentas a dra zur e varo dous a presius meurbet. A penos a vije c'hoëro maro eun den pehini a tremene deus ar bed-man dar bed al entre divrec'h an Ini en deus diskleriet penos e oa e unan ar resurreksion ag ar vue? *Ego sum resurrexio et vita* (1). Pio a c'halfe lavaret na memes kompren an deliso, ar c'honsolasiono, ar zantimancho a garante ag a zoumission da volante Doue a inspire da galon Z. Joseph ar c'homzo a vue a adresse dean a bep eil Jesus a Mari er momejo divoean deus e vue? Gallout a rer eta gant reson kredi ar pez a lavar zant Franses de Sales, penos e varvas Z. Joseph dre an ners deus ar garante bur a Zoue.

Evelse e varvas ar zant bras-ze gant kals a beuc'h ag a dousder, hep spont nag anken

(1) Joan., XI, 25.

ebet, rag e vue a oa bet ol zantel. Mes, alas! pegen disanval eo maro eur pec'her! Koulskoude an nep a vo en heur-ze protejet gant Z. Joseph en eum gavo neuze ankourajet bras. Ar zant-ze, ous pehini e c'he bet aboïssant eun Doue memes, en devo zur aoualc'h a c'hallout evit kommandi dan drouk sperejo, evit ober de kemer an tec'h, ag evit preservi e servijerien deus o zentasiono. Evurus an ine en devo er momet divoean-ze Z. Joseph evit e ziven! Rac, pa c'he bet asistet oar e varo gant Jesus a Mari, pa en deus preservet ar mabik Jesus deus ar maro, o kas anean en Ejyp, bean en deus resevet ar privilech da vean patron ar maro mad, a da delivran e servijerien, en heur ar miaro, dimeus an danjeur da goean er maro eternel.

---

#### HISTOAR.

Eur marc'hadour devot deus ar ger a Valans, e rouantelez Spagn, na vanke kammet da ober bep bla eun exersis benag a devosion en henor dar famill zantel kom-



poset deus an tri fersonach-ze, Jesus, Mari a Joseph. An devosion-ze a gonsiste o resev da brejan gantan ous e dol, de oel Ne-delek, eur goas koz, eur vroeg ag eur bugel bihan. O sonjal ebars er c'homzo-man deus on Zalver : « Kement mad a po groet dan disteran deus ma breuder a vo evel groet din ma unan (1) ; » pa roe da dibri dan tri faour-ze, e zelle ane evel ma vijent bet Jesus, Mari a Joseph en o fersonach. Ar marc'hadour karantezus-ze, o vean deut da vervel, a apparissas eun neubeut deio goude da serten tud devot pere a bede evitan, ag a lavaras de e oa deut Jesus, Mari a Joseph den bisitan en heur deus e varo, a da goms ontan evelhen : « Pa e teus » epad da vue resevet anomp on zri ebars » es ti, dont a reomp ie on zri hirie evit ta » zigemer en on ini, » a penos diustu goude e varo o devoa digemeret e ine ag e gasset dar pret eternal deus ar barados. O marc'hadour evurus da vean groet eun tol konvers ken profitabl, a da vean rentet Jesus, Mari a Joseph e c'hleourien !

(1) Matth., XXV, 40.

**PEDEN.**

O ma frotecteur ker, pa o c'heus bet an eur vad, pehini a so dreist an ol vonheurio, da vervel entre divrec'h Jesus a Mari; plijet genec'h dont dam zikour er momet terubl-ze e pehini e tispartio ma ine dious ma c'horf evit antren en eternite ; ag obtenet evidon ar c'hras da vervel evel doc'h entre divrec'h Jesus a Mari en eur bronons a c'heno, mar gallan, mes ispisial a galon an tri ano zantel : Jesus, Mari, Joseph. Evelse beet groet.

**EISVET DEVEZ.**

**MEDITATION OAR SUJET GLOAR Z. JOSEPH.**

*Kourach, servijer mad a fidel, a pa oc'h bet fidel en treo bian, antret er joa dimeus oc'h Autro. (MATTH., XXV, 21.)*

Zul vrassoc'h a ve bet zantelez ar zent epad o bue oar an douar, sul vrassoc'h a ve ar gloar a ro Doue de ebars en env. Evit kompren pegenthras eo bet zantelez Z. Jo-

seph, a dre ze an hueldet a c'hloar akordet dean en env, nen deus nemert ober reflek-sion oar ar meulodi a ro dean an Aviel pa lavar penos e oa eun den just (1). Eun den just er Skritur zakr a sinifi eun den en deus an ol vertuio; rag an nep a vanq dean eur vertu hepken na verit ket bean hanvet just. Or, mar en deus ar Speret-Zantel hanvet Joseph eun den just en amzer ma oe choaset evit bean priet d'ar Oerc'hes Vari, komprenet, mar gellet, pegement a greskas en e galon ar garante divin ag an ol vertuio al assambles dre an darempred ag ar sosiete en devoe gant e briet zantel, ar skoer barfet-ze deus an ol vertuio. Mar boe suffis eur gomz hepken deus a Vari evit zantifian Z. Yan-Badezour, ag evit kargan e c'hininderv zantes Elizabeth deus a vertu ar Speret-Zantel (2), pebes zanteles na glee ket produi en ine Z. Joseph ar c'honversasiono familier en devoa bemde gant Mari? Ag en tuont da ze, pebes tensor a vertuio ag a verito na dastumas an ket c'hoas o vevan epad keit amzer e kompa-

(1) Matth., I, 19. — (2) Luc, I, 41.

gnunez Jesus-Krist, ar zantelez memes, pa oa karget den serviji, de vagan a den azistan en e ol ezomo tampoel? Mar promet Doue eur recompans eternal dan nep en devo roet en e hano eur voerennat dour ien hepken da eur paour, sonjet pebes gloar en deus preparet da Z. Joseph evit bean en preservet dious a grueldet Herodes, pourveet dean boet a gouiskamant, douget anean ken alies entre e zivrec'h, a veillet oar nean epad meur a vla gant kement a zoursi. Gleout a reomp kredi hep mar ebet penos bue Z. Joseph, tremenet evelse e presans a dindan daoulagat Jesus a Mari, na oa nemert eur beden kontinuel leun a akto a fe, a gonfians, a garante, a zoumission ag a offrans. Ma kle eta ar rekompans bean brassoc'h dre ma ve brassoc'h ar merito ag ar vertuio deus an den, sonjet pegen bras a gle bean gloar Z. Joseph er barados. Abalamour da ze e teu Z. Augustin da gomparaji ar zent al gant ar steret, a Z. Joseph gant an eol. An tad savant Suarez a zel evel eun dra resonabl kredi penos, goude ar Oerc'hes, merito a gloar Z. Joseph a se dreist merito a

gloar an ol zent, ar pezh a ra dan den venerabl Bernardin de Baste lavaret penos, ebars en env, Z. Joseph a gommand en eur feson benag da Jesus e unan, pa en ped da rei graso dar re en eum rekommand dean gant konfians.

#### HISTOAR.

Eun dijentil deus ar ger a Venis en devoa kemeret an akustumans da lavaret bemde eur beden dirag eun imaj dimeus a Z. Joseph. A hent al e kundue eur vue disordren, a nen devoa zoursi ebet deus an obligasiono ar muan grevus dimeus ar religion. Digoeout a reas dean koñan klan, ag en em gavas en eun danjer bras ken evit e ine ken evit e gorf. Evurusamant evitan, en amzer ma zeblante na oa esperans ebet evitan, Z. Joseph a denas den zikour. Ar c'hlanvour a oelas oc'h antren en e gampr eur personnaj hanval parfetamant ous an imaj dirag pehini e lavare bemde eur beden. Er momet-ze, evel pa ari ar skleur deus an eol en eur plas tenval, e tispal-

rissas an denvalijen spirituel pehini en ampeche da voëlet ar stad trist deus e gonsians. Goelet a reas skleramant an ol bec'hejo en devoa groet kazi hep remors, ag e galon a oe rannet gant ar brassan zantimancho a c'hlabar ag a gontrision. Kovessat a reas hep dale e ol dizurzo en eur skuil eur mor a daero. Mes a c'hras ar muan precius a reas dean e brotektor selestiel a oe da vervel er momet ma achue e govesour da bronons oar nean ar c'homzo deus an absolven; a gallout a heller kredi en deus Z. Joseph kaset e unan ous treid ar barner souveran an ine penitant-ze, evit goulenn oarnean ar viserikord a Zoue.

#### PEDEN.

O patriarch zantel, pa zoc'h breman er barados karget a evurusdet, aseet oar eun tron huel e kichen Jesus an objet dimeus o karante, plijet genec'h kavel true ouzin. Ma goelet a ret e kreis eun niver bras a inimiet, da laret eo, a drouk sperejo, ag a banchancho fal pere a ra din eur brezel kontinuel, evit ober din kol gras Doue. Ah! o pedi a

ran, dre ar faveur o c'heus bet da jouissan oar an douar deus a gompagnunez Jesus a Mari, obtenet din ar c'hras da chom bepret unisset gant Doue bete fin ma bue, da dre c'hi an ol efforjo a ra an ivern evit ma c'hol, a da vervel en karante Jesus a Mari, evit mam bo eun de ar bonheur da jouissan genec'h deus o c'hompagnunez en rouantelez an envo. Evelse beet groet.

### NAOVET DEVEZ.

MEDITATION OAR AR GALLOWT DIMEUS A Z. JOSEPH.

*Kourach. servijer mad a fidel, a pa oc'h bet fidel en treo bian, antreet er joa dimeus oc'h Aulro. (MATTH., XXV, 21.)*

Konsideret ar buissans vras roet da Z. Joseph ag en env a oar an douar. E c'hallout dirag an Doue ol c'halloudek a so bras meur-bet. En demeurans selestiel e c'he glorifiet dre ma c'he bet dign da vean choaset evit bean ar pen deus ar famill zakr a zantel. E eo an den a so bet oar an douar an nes-

san da Jesus a da Vari. O vean bet ar c'hompagnon fidel deus o labourio ag o souffranso, penos e c'halfe non pas bean an nissan de er barados? Pebes evurusdet, pebés gallowt, pebés gloar, pebés majeste a so breman dastumet oar nean! Memoret an henorio leun a respet a rentas bugale Jakob do breur ar patriarch ansien Joseph. Evelse an ol gristenien, breudeur ie da Z. Joseph, priet ar Oerc'hes, a gle en henori oar an douar, o kemer skoër oar Jesus, Mari ag an ol zent, pere a rent dean pep sort henorio er barados.

Na neus doutans ebet, eme Z. Bernardin a Sieen, na deu on Zalver Jesus-Krist da gaet evitan ebars en env ar respet a vugel ag ar reverans gant pere e rentas henor dean oar an douar, evet ma kle eur bugel henori e dad; mes kredomp kentoc'h e rent dean breman henorio c'hoas brassoc'h. A kementse en deus groet da dud brudet bras evit o skiant ag o vertu assuri penos ebars en env goulenno Z. Joseph a so evit Jesus-Krist evel eun urs: *Dum pater oratur, vult imperium reputatur*. Nen de ket supplian a ra, mes ordren; nen de ket

pedi, mes kommandi : *Non impetrat, sed imperat ; non orat, sed ordinat.*

Pebes graso eta na hellomp ni ket obteni dre e intersession ? Na neus gras ebet na hellomp esperi, eme zantes Theresa, pehini a assur e devoa groet ec'hunan an experians deus a gementse, ag alian a ra an ol dud da ober ar memes approu deus a c'hallout Z. Joseph. « Ia, eme ar zantes vras-ze, pedi a ran dre garante Doue an nep nam c'hredo ket, den eum adressi dar zant bras-ze, ag e voelo e unan ag e ne ket gouir ar pez a lavar. » Pesort zantimancho o c'heus-u eta, ine fidel, o kontempli ar gallout deus ar zant-ze pehini oc'heus choaset evit o tad ag o sturier ? Pebes bonheur evidoc'h markendalc'het ebars en devosion dous a konsolant-ze ! Gout a ret pegen bras eo e c'hallout ebars en env. Eun desir ardant o c'heus sur da vervel en stad vad. Ar c'hras presius-ze a so entre daouarn Z. Joseph, o mestr a tad o Toue. C'hoant o c'heus da vean zallvet. Ac'hanta, Z. Joseph a so hanvet gant an Ilis an esperans assur deus on bue ag ar skoasel deus ar bed. *Nostræ certa spes vite, columenque mundi.* C'hoant o c'heus da an-

tren er barados : zoutet e man an alc'hoeo entre daouarn Z. Joseph. Jesus, eme an den venerabl Bernardin de Baste, eo ar mestr absolu deus a alc'hoeo an env, a roet en deus unan ane da Vari e vam, ag iguile da Z. Joseph e dad.

---

#### HISTOAR.

Ar sœur Mari-Theresa Nicoli, leanes deus ar gouent *Ilron - Varia ar Beden* en Itali, a anduras epad dek vla klenvejo terrubl. An drouk a gommansas dre eun tol goad rust meurbet, pehini koulskoude a dremenas dre fors remejo. Neubeut amzer goudeze e koëas en drouk zant, ag ec'h isili, reut evel koat, a golle pep santimant epad meur a heur. Neuse e teuas ar paralyzi oar e ol vempro, a en e c'horf antier e souffre ankenio estranj. E c'halon o lampat en e c'hreis assambles gant eun derjen pernisius a rente anei evel eun den en e angoni. Erfin ar c'hiq deus e gar deo o vean en em stardet, ar c'har-ze a deuas kals berroc'h evit eben. Serten an ol souffranso-ze ken

bras a ken padus a oa kapabl da skouizan eur basiantet ordinal; ag en tuont da ze ar remejo krenv a c'hoëro a vije roet dar glanvourez-ze gant ar vedesinet a skouizas anei epad meur a via. Ariout a reas erfin an amzer merket gant Doue evit lakat fin dar stad truezus-ze deus e servijerez fidel. Klevet a oe ebars ar gouent ar c'helo deus eun den klan iac'het dre virakl er ger a Venis dre intersession Z. Joseph. An neventi ze a roas dar sœur Mari-Theresa an esperans da obteni dre broteksion ar zant ar pezn devoa ket gallet kavet dre voyen an ol remejo. En eum resolti a reas da ober en e heor an exersis devot deus ar seiz merc'her assambles gant hinienzo deus e c'hoarezet. Ar merc'her kentan, pehini a gouee ar c'hoec'h oarnugent a vis mai deus ar bla 1710, e devoe c'hoas eur bar ferrubl deus e c'hlenvet. Kol a reas assambles ar goms ag an anaoudegez, ag e chommas evel maro epad eur c'hard heur. Pa difallas, e c'hoarezet e c'hankourajas da c'houlén gant muy ous muy a fervor assistans Z. Joseph. E ober a eure ag e c'houlennas taer neuden deus an habit gant pehini e c'he gouisket

imaj ar zant en ilis Venis. O vean lonket ane, e zeblantas dei zantout eun dorn invisibl o chach oar e gar deo ag o rentan dei e ment naturel. Goude-ze e zantas e ners o retorn dei, ag o vean savet hep zikour ebet, e kommansas kerzet en eur drugarekat Doue a Z. Joseph. En eum gaet a reas delivret en eun tol deus ec'h ol infirmiteo ag ec'h ol souffranso. Koulskoude e gar a re dei c'hoas souffr eur boan benag. Lavaret a rejeur dei kemer eur vas evit kerzet esetoc'h, da c'hortos ma vije bolante Z. Joseph rentan dei eur iec'het parfet. Neuse, leun a gonfians en pouar ar zant pehini en devoa groet eur mirackl ken bras en e faveur, e reas voen da ober bep bla an exersis deus ar seiz merc'her, a dre ar vœu-ze e veritas ar bla oarlerc'h resev ar c'hras a c'houlénne. An divoëan deus a seiz merc'her ar bla-ze e devoe eur bar evel me devoa bet ar bla diarog, hep kol koulskoude nag ar goms nag ec'h anaoudegez, ag ec'h allas er stad-ze goulén assistans Z. Joseph. Zantout a reas c'hoas neuse eun dorn invisibl pehini a rente an ners de gar; a dioar neuse ec'h allas sevel a kerzet ec'hunan

ken æset evel ma ne dije bet biskoas drouk ebet, evit ar brassan gloar a Zoue ag a Z. Joseph, ag evit konsolasion e servijerien devot.

PEDEN.

O ma frotektor zantel, goulen a ran humblamant oc'h asistans, ispisial evit ar momet divoean a terrubl-ze deus ma bue deus a behini a depanto ma stad evit eun eternite. O pedi a ran deus a greis ma c'halon, deut dam zikour en heur ar maro. Obtenet din ar c'hras da vervel entre o tivrec'h; ma fresantet oc'h unan dar barner souveren. Deut, o zant bras, dam sklerijenni oar ar gouirioneo eternal; disket din meditan oar ar pevar fin divoean deus a bep den. Na neus evidon nemert eun dra necesser, ag an dra-ze eo mervel en stad vad. En gout a ran; hones eo ma c'hreden, a dioar vreman ma ol zoursi a vo meritout eveldoc'h ar bonheur-ze pehini nen deus ket e bar. Groet ma teuin dre eur vue zantel da veritout kavet eur maro zantel, evit ma hellin mont davedoc'h er barados epad an eternite. Evel se beet groet.

PEDEN AL.

O Z. Joseph glorijs, penos e c'halfen me mankout da fiout ennoc'h ma ine, c'houi en pehini en deus an Tad eternal fiet beteg e Vab unik? O pedi a ran da vean ma frotektor, a dindan o tioneskel e fel din bevan a mervel, rag gout a ran penos o kallout a so par do madelez. Evelse beet groet.

---

OFFIS BIAN Z. JOSEPH.

DAR MATINEZO.

- ÿ Ma Doue, deut dam zikour.
- ñ Autro, ma zikouret hep dale.
- ÿ Gloar dan Tad, a dar Mab, a dar Speret-Santel.
- ñ Evel ma c'he bet a viskoas, ma c'he en amzer presant, a ma vo da virviken. Evelse beet groet.
- ÿ Z. Joseph glorijs, beet on protektor epad on bue.
- ñ Ag ispisial en heur ar maro.

HYMN.

Joseph, mab David, diskennet deus eul ligne royal, bet o c'heus an enor da vean hanvet tad don Zalver Jesus-Krist, a priet dar Oerc'hes Vari, gant pehini o c'heus bet eun union spirituel; a goude bean bet mirer fidel dan eil a d'egile e zoc'h bet antreet ebars er barados.

ANTIENN.

Me o zalud, o Z. Joseph, henor an ol batriarchet, pourveer an llis zantel a Zoue, evit pehini o c'heus konservet Jesus ar gouir vara a vue, ar gouinis deus an ineo choaset gant Doue.

✠ O Joseph, zant bras meurbet, pedet evidomp.

✠ Evit ma veomp dign deus a bromeseo Jesus-Krist.

OREZON.

O ma Doue, supplian a reomp o madelez da otrei dimp, dre intersession Z. Joseph, eur vue zantel ag eur maro mad, o c'hantrenteni bepret en on c'halon eun euz bras evit ar pec'het. Ar c'hras-ze a c'houlennomp

dre verito o Mab Jesus-Krist on Autro, pehini a vev ag a ren genec'h a gant ar Speret-Santel epad an ol eternite. Evelse beet groet.

DAR LAUDES.

✠ Mā Doue, deut dam zikour.

✠ Autro, ma zikouret hep dale.

✠ Gloar dan Tad, a dar Mab, a dar Speret-Santel.

✠ Evel ma c'he bet a viskoas, ma c'he en amzer presant, a ma vo da viryiken. Evelse beet groet.

✠ Z. Joseph glorius, beet on protektor epad on bue.

✠ Ag ispisial en heur ar maro.

HYMN.

O Z. Joseph, zant leun a c'hallout, ma oe bras oc'h afflikcion ag o c'hanken pa nem gevjoc'h en doutans ag e oa gleet dec'h dispartian deus o priet chast, pe viret anei en o ti, bean a oe evidoc'h eur sujet bras a joa pa deuas deus an env eun zel abeurg Doue da goms ouzoc'h epad o kousk, a da lemel an nec'hamant-ze deus o kalon.



*Antienn. Me o zalud, o Z. Joseph.  
(Ag ar rest evel ar Matinezio betek ar fin.)*

DAR PRIM.

† Ma Doue, deut d'am zikour.  
*(Ag ar rest evel er Matinezio betek an Hymn.)*

HYMN.

Eur veach poagnus o c'heus groet, o Z. Joseph, o vont da Vethléem, evit bean douget oar ar rejistro publik. Genec'h e oa ar Oerc'hes, o priet zantel, pehini a douge Zilver ar bed en e c'hintraillo zakr. Rac choaset en devoa Jesus ar ger-ze evit genel enon, ag enon e c'hoarveas genec'h an heur vad da vriatan ar mabik Jesus.

*Antienn. Me o zalud, o Z. Joseph, etc.*

DAN TIERS.

† Ma Doue, deut dam zikour, etc.

HYMN.

O Z. Joseph gloriüs, observet o c'heus poent evit poent lezen an Aulro Doue. Dre aboissans dal lezen-ze oc'h eus oc'h unan presantet Jesus o mab divin evit ar seremoni

poagnus deus ar sirkonsision. O pebes kalonat evidoc'h pa oeljoc'h an Doue bugel-ze o skuil e oad evit ar veach kentan! Mes ie, pebes konsolasion evidoc'h pa rojoc'h dean en de-se an hano dous a Jesus.

*Antienn. Me o zalud, o Z. Joseph, etc.*

DAR SEXT.

† Ma Doue, deut dam zikour, etc.

HYMN.

Admirabl a oe oc'h aboissans, o Z. Joseph, pa deuas eun ael da gomz onzoc'h epad o kousk, evit ordren dec'h tec'hel deus o pro a mont dan Ejyp, evit preservi Jesus deus a fulor Herodes, pehini a re de grueldet koëan oar ar vugale vian; rag ken buan goude, o vean avertisset o priet ker deus ar revelasion-ze, en eum lekejoc'h en hent o taougant ar bugel divin evit mont dan Ejyp.

*Antienn. Me o zalud, o Z. Joseph, etc.*

DAN NONN.

† Ma Doue, deut dam zikour, etc.

HYMN.

Goude maro oc'h adversourien, herve an

avertissamant roet dec'h deus an env, e teujoc'h deus an Ejyp, a digas a rejoc'h genec'h dar Galilée o priet ag e bugel divin, a kundui a rejoc'h gante er ger a Nazareth eur vue humbl a zantel.

*Antienn.* Me o zalud, o Z. Joseph, etc.

DAR GOUSPERO.

ÿ Ma Doue, deut dam zikour, etc.

HYMN.

Eur glac'har bras a oe a dra zur evidoc'h, o c'houi an teneran deus an ol dado, pa dispartias diouzoc'h, dan oad a daouzek vla, Jesus an objet deus oc'h ol garante, ar sklerijen deus o taoulagat; mes ken bras al a oe o joa pa gefjoc'h anean en Templ, e kreis an doktoret. Hep mar ebet, dioar neuse e virjoc'h gant ar brassan zoursi ar bugel-ze pehini a oa roue an æle.

*Antienn.* Me o zalud, o Z. Joseph, etc.

DAR C'HOMPLIDO.

ÿ O Doue on Zalver, on c'honvertisset.

ÿ A distroet o koler dioarnomp.

ÿ Ma Doue, deut dam zikour, etc.

HYMN.

O Z. Joseph, leun a vadelez, bet oc'h eus ar brassan bonheur a bel kalon an den da desirout er bed-man. Asistet oc'h bet er momet divoean deus o pue gant Jesus a Mari, pere o deus o sikouret da vont da gaet o tad Abraham ebars e limbo, da c'hortos mont da gaet an Tad eternal ebars en env, goude bean kunduet eur vue ken zantel oar an douar.

*Antienn.* Me o salud, etc.

REKOMMANDASION.

Resitet a meus, o Z. Joseph, an offis bianze en oc'h enor gant ar brassan devosion a oa possubl din. Plijet genec'h ma zikour dre o pedenno, evit ma hillin bevan eternellamant assambles genec'h ebars er gloar deus ar barados. Evelse beet groet.

AR PEMP PSALM A HELLER RESITAN EN HENOR  
DA Z. JOSEPH.

*Antienn.* Joseph, priet da Vari pehini e deus ganet Jesus hanvet ar C'hrist.

PSALM 99.

1. Ol nasiono deus an douar, meulet Doue gant joausdet; servijet an gant levenez.

2. En eum bresantet dirazan en e dempl gant transporjo a joa.

3. Gouveet e c'heo an Autro, ar guir Doue. E eo en deus on c'hrouet, a na nomp ket en eum c'hrouet on unan.

4. C'houi pere a so e bobl, ag an denvet da bere e ro boet, antreet en e di o veuli anean; antreet en e dempl o kanan kantiko en e henor; rentet dean aksiono a c'hras.

5. Meulet e hano, rag an Autro a so leun a dousder, e vizerikord a so eternal, ag e fidelite de bromeseo en eum diskoë oar an tado a oar o bugale.

Gloar dan Tad, a dar Mab, a dar Speret-Santel.

Evel ma c'he bet a viskoas, ma c'he c'hoas en amzer present, a ma vo da virviken. Evelse beet groet.

*Antienn.* Joseph, priet da Vari, etc.

*Antienn.* Joseph oa deus a ligne David, ag ar Oerc'hes a oa hanvet Mari.

PSALM 46.

1. Ol nasiono, roet merko publik a gontantamant, diskoeet o joa en eur ganan kantiko a c'hloar da Zoue.

2. Rag an Autro a so huel meurbet ag a gle bean doujet. E eo ar roue bras deus ar bed ol.

3. Soumetet en deus dimp an ol boblio, a laket en deus an ol nasiono dindan on zreit.

4. On choaset en deus evit e heritach : a kementse a ra gloar Jakob pehini a so bet an objet deus e gomplezans.

5. Doue a zo pignet dan env e kreis ar c'hri a joausdet, an Autro a so pignet gant ar zon dimeus an drompill.

6. Selebret gloar on Doue, kanet en e henor; selebret gloar on Roue, kanet en e henor.

7. Rag Doue eo roue ar bed ol, kanet gant furnez evit e henori.

8. Doue a reno oar an nasiono, Doue a so azeet oar e dron zantel.

9. Ar brinset deus ar poblio a so en eum unanet gant Doue Abraham, ag ar brin-

set-ze, evel an doueo galloudus deus an douar, a so bet huellet beteg eur renk dreist ordinal.

Gloar dan Tad, etc.

Antienn. Joseph a oa deus a lignè David, etc.

Antienn. Joseph, priet Mari, o vean eun den just, na c'houle ket e dishenori.

PSALM 128.

1. Ra lavaro breman Israël : Ma enebourien o deus aliès groot din ar bresel adaleg ma yaouankis.

2. Adaleg ma yaouankis o deus ma enebourien groot din ar bresel ; mes no deus ket gallet ma zrec'hi.

3. Ar bec'herien o deus skoët loar ma c'heim eveloar eun anneau, kendalc'het o deus en o fallagriez.

4. An Antro a so just : torret en deus penno ar bec'herien ; ma vo etâ karget a deus chassoni ous ar ger a Sion.

5. Ra zeuint da vean evel ar iet a gresk oar an toenno, pere a deu da dizec'han araug ma vent tennet.

6. Pere na hellont kargan na dorn an ini a droc'h ane, na krubuil an ini a indram ane.

7. Ag ar re a ve o tremen na deront ket dar re o dastum : Ma vo benos Doue oar-noc'h ; benos a roomp dec'h en hano an Antro Doue.

Gloar dan Tad, a dar Map, etc.

Antienn. Joseph, priet Mari, etc.

3. Antienn. Joseph, mab David, no peet ket aon rag kemer Mari evit o priet.

PSALM 80.

1. Menlet gant kry a levez Doue on divenner ; ma vo Doue Jakob an objet dimeus o kantiko.

2. Kanet assambles gant ar zon dimeus an taboulin, a dimeus an agreaplan instrumanchou muzik.

3. Sonet an drompill dimeus al loar neve, ebars en de bras man a oel solemnel.

4. Rag bean e c'he eul lezen en Israël ; ag eun urs abeurs roue Jakob.

5. Doue en deus instituet an de solemnel-ze en memoar deus ar faveurio en deus groot da Joseph, pa sortias deus an Ejyp,

elec'h men devoa klevet eur iez na intende ket.

6. Lemel a reas ar bec'hiou dioar e chouk, a delivran a reas e zaouarn deus ar panerado pri a renke dougen.

7. Kriet o c'heus entrezeg ennon, *eme Doue*, ag o telivret a meus : o jileoet a meus ; rag me oa kuset ebars er bar tempest *pehini en deus distrujet oc'h adversourien* : me eo a meus oc'h amprouet e kichen an dour a gontralies.

8. Jileo, ma fobl, me a disklerio dit ma bolante : O Israël, mam jileoes, na vo ket evidout a Doue neve, a na adori ket doueo estrenn.

9. Rac me eo an Autro ta Zoue, pehini en deus ta dennet deus an Ejyp : digor ta c'heno, a me a roio dit kement a c'houlenni.

10. Mes ma fobl nen deus ket jileoet ma moez, ag Israël nen deus groet van ebet ac'hanon.

11. A me dam zro a meus o abandonnet dan desirio deus o c'halon, a kerset a raint herve o fantazi.

12. Ma en dije ma fobl jileoet ma moez, ma en dije Israël heuillet ma bolante.

13. E mije gallet hep poan ebet humilian o adversourien, ag e mije astennet ma dorn oar ar re o fersekute.

14. Adversourien an Autro o deus toret ar promesseo o devoa groet dean : an amzer deus o funision ne devo fin ebet.

15. A koulskoude Doue en deus o maget gant ar gouinis ar puran, a deus ar min en deus tennet mel da derri o naon.

Gloar dan Tad, etc.

*Antienn.* Joseph, mab David, etc.

*Antienn.* Joseph, o vean divunet, a reas evel men devoa an tel ordrenet dean.

PSALM 86.

1. Ar ger a *Jerusalem* a so fondamantel oar ar meneio zantel : Doue a gar dorjo Sion muoc'h evit ol dinello Jakob.

2. Kaëran burzudo a so kontel dioar o pen, o ker a Zoue !

3. Sonj ambo, *eme Doue*, deus an Ejyp a deus a Vabilon pere a anaveo anon.

4. Chetu an estranjourien, ag an dud deus ar ger a Dyr a zo en eum gavet enon.

5. Ag e na vo ket lavaret da Sion : Eun den, ia eun den a so ganet enni, ag an Ol

C'halloudek en deus e unan azeet ar fonda-  
mancho deus ar ger.

6. An Autro e unan en disklerio, pa rei  
ar resansamant deus ar poblio a deus ar  
brinset an eum gavo er ger zantel-ze.

7. Neuse, o ker Sion, ta ol habitantet a  
vo evel tud transportet a laouénidigez.

Gloar dan Tad, a dar Mab, etc.

Antienn. Joseph, o vean divunet, etc.

ÿ An Autro en deus en etablisset penn oar  
e diegez.

ñ A gouarneur oar e ol vado.

*Pedomp.*

O Doue, pehini dre eur brovidans pehini  
a dremen skiant an den, oc'h eus choaset  
Z. Joseph evurus eyit bean priet d'ho Mam  
zantel, groet, ni o ped, ma verifomp kavet  
evit avokat ebars en env an ini a honoromp  
evel on protektor oar an douar. Reit dimp  
ar c'hras-ze, o c'houi pehini a veo ag a ren  
gant Doue an Tad ag ar Speret-Santel epad  
an ol eternite. Evelse beet groet.

*HYMN.*

1. O c'houi, christenien, pere o c'heus  
enn desir ardant da resev ar graso deus an

env, a pere o c'heus aon rag bean privet  
deus ar graso-ze : en eum adresset da Z. Jo-  
seph a goulennet humblamant e assistans.

2. Kerkent a ma ve prononset an hano  
zantel-ze, Doue a deut oar ar bed eur zel a  
drugare, zikour a ra ar re just da gerzet en  
hent deus an ol vertuio, a rei a ra dar  
bec'herien graso a c'hlae'har deus ar pe-  
c'hejo o deus kometet.

3. An nep a bed Z. Joseph gant devosion  
a c'hel esperi ar rekompans ar gaeran : go-  
nit a ra ar viktoar oar an adversour pehini  
a deu den ataki en e heur divoean.

4. Joseph a gouita ar vue mortel man  
entre divrec'h Jesus a Mari. Ar maro a so  
evitan evel eur c'houk dous a dinec'h, a  
dre ar maro presius-ze e teu da vean eur  
skoer da gement a desir kavet eur maro  
zantel.

5. Biskoas den nen deus bet muoc'h a  
c'hallout evit ar zant bras-ze, pa o deus an  
æle goelet eun Doue memes ous en eum  
zoumeti de urjo, ag o zenti ous e volante.

6. Biskoas den ne nê bet zantel oc'h evi-  
tan, pa c'he bet choazet da vean priet dar  
buran deus ar goerc'hez, mirer dan Doue

deus an env pehini a dremene dirag an dud evit e vab.

7. Gloar dec'h, Treindet evurus ag adorabl, Tad, Mab a Speret-Santel, a gloar ie dan hano zantel a Joseph.

*Antienn.* Z. Joseph a so eur zouten hag eur protektor da gement a bronons devotamant e hano en e affliksion.

ÿ Biniget da vezo an hano a Z. Joseph.

ñ Breman a da virviken.

*Pedomp.*

O Doue admirabl en o c'hol zent! falveet e bet dec'h en eum diskoe c'hoas admirabl ploc'h en Z. Joseph, pa o c'heus en karget da distribui do servijerien an donezono spirituel : reit dimp ar c'hras da gaet ar chans da antren er pors deus ar zilvidigez dre zikour ar pedenno ag ar merito deus ar zant en hano pehini e pedomp anoc'h gant konfians, dre Jesus-Krist on Zalver. Evelse beet groet.

*Antienn.* Chetu ar servijer fidel a prudent karget gant Doue deus a zoursi e famill.

ÿ Pedet evidomp, Z. Joseph evurus.

ñ Evit ma veomp rentet dign deus a bro-messeo Jesus-Krist.

*Pedomp.*

O Doue, deus a behini ar vadelez ag ar furnez a so infinit, a pehini, en eur huelat Z. Joseph beteg an dignite a briet dar Oerc'hes Vari, oc'h eus roet dean an droëjo ag an autorite a dad oar o Mab unik, groet dimp imitan ar respet, ar soumission ag an deneridigez o deus bet Jesus hag e Vam zantel evit ar zant bras-ze ag e honori don zro gant eun deneridigez a vugale, evit mon bo, dre e intercession, ar c'hras do karet a do serviji en speret ag en gouirione ebars er bed man, a mon bo ar bonheur do possedi eternellamant ebars er bed al. Evelse beet groet.

PEDENNO

DA JESUS, DA VARI A DA JOSEPH.

O Jesus, on Zalver adorabl, pehini oc'h eus deurveet, dre garante evidomp, bean ganet gant eur Vam goerc'hes, groet mon

bo eun devosion vras da honori ar mysterio  
dous dimeus o pugaleach; groet ma veomp  
spirituellamant anval ous bugale vian, a  
ma c'helfomp imitan an humilite, ar bu-  
rete, an innosans ag ar vertuio al a bere  
oc'h eus roet dimp an exempl, o Bugel  
divin, er stad-ze a sempladurez ag a humi-  
liasion.

O Jesus, ganet gant ar Oerc'hes, gloar  
dec'h assambles gant an Tad ag ar Speret-  
Santel etro pad an eternite. Evelse beet  
groet.

Pegen evurus oc'h, o Mari, a pegen dign  
da vean henoret, pac'h eo digenec'h en  
deus ar bed resevet an eol a justis, Jesus  
on Zalver ag on Doue ! Ah ! dre ar zoursi  
oc'h eus kemeret anean pa oa c'hoas kroua-  
dur bian, disket dimp e honori oar an douar  
evel moc'h eus groet oc'h unan, evit ma  
veritfomp kavet lod en e c'hloar er barados.

Diskoëet e zoc'h on Mam, a presantet on  
pedenno dan Ini a zo bet ganet genec'h, ag  
en deus deurveet bean o pugel c'houi.

O saludi a ran, priet chast a pur da Vari !  
o saludi a ran, mirer fidel deus e virjinite !  
o saludi a ran, pen evurus deus ar famil-  
zantel ! C'houi oc'h eus maget dre ar c'hoz  
deus o tal ar Verb inkarnet ; c'houi oc'h  
eus an preservet deus a fulor Herodes :  
c'houi oc'h eus servijet dean a brotektor, a  
rener ag a dad en Bethléem, en Ejyp ag en  
Nazareth. Dre ar zoursi oc'h eus bet anean  
evel deus o mab, obtenet dimp ar c'hras-  
den serviji fidelamant epad on bue : on zi-  
kouret da gaet eur maro mad, evit mon be-  
goude se ar bonheur da vont da jouissan  
eternellamant anean genec'h ebars en env.  
O saludi a ran, priet Mam Doue ; o saludi a  
ran, tad ma Jesus, Joseph dign a bep ad-  
mirasion ag a bep karante. Evelse beet  
groet.

PEDEN A PROTESTASION EVIT OBTENI EUR  
MARO MAD.

Jesus-Krist on Zalver, gouir Doue a gouir  
den, ma C'hrouer a ma Redamptor, goelet  
a ran e c'hon exposet da vil danjeur epad  
ar vye miserabl man ; a na anavean ket an



de en pehini e renkin pean dar maro ar gle a behini nen deus den exant. Abalamour da ze, adaleg breman ag evit biken, e presans ar Oerc'hes glorius Vari, Z. Joseph, Z. Franses-Xavier, an ol zent ag an ol æle, e tisklerian :

1<sup>o</sup> Penos ma bolante eo bevan a mervel evel eur bugel aboissant dan Ilis zantel, katholik, apostolik a romen, o kredi kement a lavar din an Ilis zantel-ze; rag c'houi, o Jesus, pehini a so ar ouirione souveren, o c'heus revelet dei an ol ouirioneo-ze.

2<sup>o</sup> Ansav a ran penos, dre ma fec'hejo, e meus kant a kant goech meritet an ivern, a na veritan ket bean pardonet, o vean ken alies a oech preferet ma zantimant fal do polante zantel, a kometet en o prezans, o ma Doue, aksiono na mije ket kredet ober dirag an disteran den. Esper a meus koulskoude e po ar vadelez dam pardoni a dam preservi deus an disesper en heur ar maro. Renons a ran dre avans dan ol dentasiono a disfians a halfe c'hoarveout genin en heur divoean abeurs an adversour deus ma zilvidigez, a dan ol zantimancho a bresompion

a halfe sevel em c'halon, o sonjal bean groet eur mad benag epad ma bue.

3<sup>o</sup> Disklerian a ran penos em eus c'hoant do karet a greis ma c'halon, da lakat ma joa en oc'h evurusdet, o ma Doue, muoc'h evit em evurusdet ma unan; a da chom fidel da viken do serviji evel ar brassan ag ar guellan deus an ol vestro. Desirout a ran ma veet adoret a karet gant an ol grouadurien, a c'hoant a mije da gaet ma unan kalono an ol dud evit o karet muy ous muy. Eur joa vras e meus abalamour d'ar garante o deus ar zent evidoc'h ebars en env, a dan ini o c'heus evidoc'h o c'hunan, o Doue a vadelez infinit, a dign dre ze deus eur garante infinit. Kementse a ra din kavet eun displijadur vras, o sonjal en ol bec'hejo a meus bet ar malheur da gometi; a desirout a rajen e teuje ma c'halon den eum rannan gant ar glac'har, ken alies goech a ma teu sonj din da vean kement o c'houtrajet, elec'h o karet evel ma oa gleet din. Protesti a ran penos na c'houlun ken oc'h ofansi, ag o pedi a ran da lemel ma bue digeuin, kentoc'h evit permeti e teufen ken da bec'hi en oc'h enep.

4° Disklerian a ran e fel din o trugarekat gant an ol zantimancha a anoudegez vad dimeüs ma c'halon deus ar garante o c'heus bet evidon, pegen neubeut benag a veriten anei, deus an ol vad o c'heus groet din, deus an ol boagno o c'heus anduret evidon, deus ar vizerikord infinit gant pehini o c'heus bete vremen suportet ma c'hrimo a ma ingratiri, pa no c'heus ket ma strinket en ivern, evel ma hellec'h ober, mes ma c'heus kontoc'h ma espergnet hepret, hep skouizan kamet da reutan din ar mad evit an drouk.

5° Disklerian a ran penos e meus ar volante da resev oar ar maro ma zakramant a binijen. E kas a ma ven dilavar, e kovesaan breman, evit ar momet divoean-ze, an ol bec'hejo a meus groet dre sonj, dre goms, dre œuvr a dre omission; a mar digoefe din neuse bean privet deus an absolven, o supplian a ran, o Jesus leun a vizerikord, dre ar goad presius o c'heus skulilet evit ma zilvidigez, akordet din er momet terrubl-ze ar c'hras da gaet ar gouir gontrision harfet deus ma ol bec'hejo, a nam lezet ket da vervel er stad a bec'het.

6° Disklerian a ran e meus ie eun desir bras da resev en heur ar maro ar goamunion zantel, evit ma zouten a ma c'hreat er veach perillus dimeus ar bed al; a ma na allan ket resev en effet ar zakramant adorabl, e tisklerian dre avans e meus c'hoant da ober neuse ar goamunion spirituel, dre an desir ag an intansion vad deus ma c'halon.

7° Disklerian a ran c'hoas e fel din, ebars er gombat am bo da souten a enep dam adversour en amzer deus ma angoni, resev ar zakramant zantel deus an nouen; ag o supplian a ran, o Doue ma Zalver, da akordi din an onksion interieur deus o miserikord infinit, o toat oc'h unan dam c'hreat a enep dan efforjo deus an ivern er momet-ze a behini a depant an eternite; ag o pardoni din an ol bec'hejo a meus groet dre ar goelet, ar c'hlevet, ar c'houez, ar blas, ar gomz, an usaj deus ma daouarn a deus ma zreit, a dre ma ol skiancho exterior ag interieur.

8° Disklerian a protesti a ran e pardonan a greis ma c'halon da gement o deus ma offanset, evel ma tesiran bean ma unan par-

donet genec'h, me pehini a meus kement a ken alies oc'h offanset, a goulen a ran humblamant pardon digant kement ini a nevebet eur sujet benag da vean drouk kontant ac'hanon.

9° Disklerian a ran penos en eum soumetan dar maro, en pe feson benag e plijo genec'h, o ma Doue, en digas din. Ia, en eum soumeti a ran dre avans da gement a c'hoarveo genin da lakat fin dam bue, evit ma servijo din da satisfian do justis evit ma fec'hejo. Ar peza a c'houlan hepken eo ma vo salvet ma ine paour, a ma sortio hep dale, mar be possubl, deus a dan ar purgator.

10° Er fin disklerian a protesti a ran, ma teufe biken, en heur ar maro, an ners deus ar souffranso pe an inspirasion deus an drouk speret da ober din lavaret pe ober eun dra benag kontrol dar protestasiono-ze, en dianzavan breman evel eun dra kontrol dam bolante divoean. Lakat a ran an ol protestasiono-ze dindan proteksion ar Oerc'hes glorijs Vari, avokades a refuj ar bec'herien, evit ma plijo ganti, assamblesgant Z. Joseph a Z. Franses-Xavier, patro-

net an dud prest da vervel, diven a digemer ma ine en e divoean tremen. Abalamour da ze e lavaran a c'heno ag a galon ar c'homzoman a fel din lavaret bemde beteg ar maro: Jesus, Mari, Joseph, ma asistet oar ma angoni. Jesus, Mari, Joseph, resevet ma ine, en rekommandi a ran entre o taouarn. Evelse beet groet.

#### PEDENNO AN ILIS

EVIT AN DUD PREST DA VERVEL.

*Proficiscere...* — En eum denn deus ar bed man, ine christen, en hano Doue an Tad ol c'halloudek, pehini en deus ta grouet; en hano Jesus Mab an Doue beo, pehini a so bet marvet evidout; en hano ar Speret-Santel, pehini a so en eum roet dit; en hano an Ael ag an Arc'hæle, en hano an Tronio ag an Dominasiono, en hano ar Prinsipoteo ag ar Puissanso, en hano ar Cherubinet ag ar Seraphinet, en hano ar Batriarchet ag ar Brofetet, en hano an Ebestel ag an Avielle-rien zantel, en hano ar Verzerien ag ar Govesoret zantel, en hano ar Venec'h ag an

Hermitet zantel, en hano ar Goerc'heset zantel ag an ol Zent a Zentezet an Autro Doue. Da vezo roet dit hirie eur plas er vro dimeus ar peuc'h, ag eun demeurans er ger zantel a Sion. Dre ar memes Jesus-Krist on Autro. Evelse beet groet.

ORESON. — *Deus misericors.*

O Done leun a drugare ag a vadelez, pehini, dre o mizerikord infinit, a bardon o fec'hejo dar gouir benitantet, a pehini, dre ar pardon-ze, a effas an ol souilladurio deus o c'hrimo tremenet, plijet genec'h zellet a drue ous o servijer N..... (*pe o servijeres N. . .*) (*aman a ve lavaret hano badeiant ar c'hlanvour pe ar glanvourez*), a jileoet ar beden a ra dec'h a greis e galon (*pe e c'hailon*) da bardoni dean (*pe dei*) e ol bec'hejo. Reparet ennan (*pe enni*), o Tad leuna dousder, kement a so bet goallet pe dre ar frajilite deus an den oar an douar, pe dre an dromplerez deus an drouk speret; a groet ma vo unisset adare gant korf oc'h Ilis evel unan deus o mempro rakouitet gand goad on Zalver. O peet true, o Done, deus e huano; o peet true deus e daero; a pa nen

deus (*pe ne deus*) ken konfians nemert en o mizerikord, otreet dean (*pe dei*) ar zakramant deus o rekonsiliasion. Evelse beet groet.

Ma breur ker (*pe ma c'hoar ger*), o rekmandi a ran dan Doue ol c'halloudek, o lakat a ran entre daouarn an Ini en deus o krouet, evit ma c'helfet, goude bean rentet dre o maro ar gle en deus peb den da bean, retorn do Krouer, pehini en deus groet a c'hanoc'h gant ar pry deus an douar. Ra zeui eur vanden lugernus a Æle da rannkontr oc'h ine, pa sortio deus o korf, assambles gant ar c'houseil dimeus an Ebestel, pere o deus resevet ar pouar da varn ar bed. Ra zeui ar Goerc'hez zantel assambles genec'h gant kantiko a joaüsdet, ag ar Batriarchet, do priatan e kreis ar repos evurus. Plijet gant Jesus diskoe dec'h eur visach dous a joaüs, a rei dec'h da viken eur plas e touez ar re a so en e gichen. Plijet dean o preservi dimeus an euz deus an denvalijen, dimeus a liskidigez ar flammo, dimeus a rigor an tourmancho. Da bellaio diouzoc'h an adversour terrubl Satan gant e ol gonsortet, da greno en o prezans, ous o koëlet

e kompagnunez an aele, a da dec'ho pront ebars er prison effroyabl deus an noz eternal. Ra zeui Doue da sevel deus e dron, ag e encbourien a iel en derout. Ra zeui kement a neus kassoni evitan da dec'hel arog e fas, a da disparessi evel moget. Evel ma font ar c'hoar dirag an fan, ra zeui ive evelse ar bec'herien da vean rentet da netra dirag Doue. Ra zeui er c'hontrel ar re vad da brejan gant levezes vras e prezans Doue. Da vezo eta un ol armeo deus an ivern karget a vez ag a gonfusion; a no devo ket ministret Satan an hardiegez da hars ouzoc'h en o rout.

Ra zeui Jesus-Krist krusifiet evidoc'h do telivran deus an tourmant.

Ra zeui Jesus-Krist maro evidoc'h do telivran deus ar maro eternal.

Ra zeui Jesus-Krist, Mab an Doue beo, da lakat o temeurans ebars er vro evurus dimeus e varados; a plijet gant ar gouir Bastor-ze o c'hansav evit unan deus e denvet, o purifian deus o c'hol bec'hejo, ag o lakat en e goste deo assambles gant e ol zent. Plijet gantan rei dec'h ar c'hras da voelet o Zalver fas ous fas, ag o miret da

virviken en e gichen; a ma po ar bonheur da oelet gant o taoulagat ar ouirione skler a disolo, a da gontempli a da bossedi an dousder divin en kompagnunez an ineo evurus etro pad an eternite. Evelse beet groet.

PEDEN.

Resevet, o Doue, o servijer (*pe* o servijeres) er plas a zilvidigez a gleomp ol da desirout, dre eun effet deus o trugare. *ñ* Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer (*pe* o servijeres) deus a ol danjeurio an ivern, a deus ar poagno ag an affiksiono a halfe e droublan (*pe* e zroublan). *ñ* Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer (*pe* o servijeres), evel ma o c'heus preservet Enoch ag Eli deus ar maro da behini e c'he sujet an ol dud. *ñ* Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma oc'h eus delivret Noë deus an diluch universel. *ñ* Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma oc'h eus delivret Abraham deus a vro ar bayanet. *ñ* Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma

oc'h eus delivret Job deus e ol affliksono.  
R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret Izaak prest da vean zakri-  
fiet gant e dad. R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret Loth deus an tan a deve  
ar ger a Sodom. R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer evel ma  
oc'h eus delivret Moïses deus a daouarn  
Pharaon, roue an Ejyp. R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret Daniel deus a gavarn al  
leonet. R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret an tri den iaouank deus a  
fornes Babylon, a deus daouarn eur roue  
dife. R̄ Evelse beet groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret Suzanna deus an ac'husa-  
sion faus groet en ec'h enep. R̄ Evelse beet  
groet.

Delivret, o Doue, ine o servijer, evel ma  
oc'h eus delivret David deus a daouarn Saül  
a deus a armo Goliath. R̄ Evelse beet groet.  
Delivret, o Doue, o servijer, evel ma o

c'heus delivret Z. Per a Z. Paul deus ar  
prisonnio. R̄ Evelse beet groet.

Ag evel ma o c'heus delivret ar oerc'hes  
evurus Thekla, o merzeres, deus a dri zour-  
mant horrupl, plijet genec'h delivran ie  
ine ar servijer man (*pe* ar servijeres man)  
dec'h, ag ober dean (*pe* dei) jouissan ge-  
nec'h deus ar mado selestiel. R̄ Evelse beet  
groet.

ORESON. — *Commendamus tibi.*

O Doue, rekommandi a reomp dec'h ine  
o servijer N... (*lavaret an hano badeiant*) ag  
o pedi a reomp, Jesus-Krist on Autro, Zal-  
ver ar bed, da lakat en touez ar Batriarchet  
zantel eun ine evit pehini ez oc'h diskennet  
oar an douar dre an effet deus o madelez.  
Anaveet o krouadur, Autro Doue; rag ne  
ne ket doueo al o deus an krouet, mes  
c'houi o c'hunan, pehini hepken eo ar  
gouir Doue beo, pa ne neus doue al ebet ne-  
merdoc'h, a ne neus ket a œuvro da vean  
komparajet gant o re. Rejouisset, o Doue,  
e ine dre o presans, a no peet sonj ebet  
deus e bec'hejo tremenet, na deus ar fol-  
jenteo en deus kometet sioas, dre an ners

ag an ardor deus ar panchancho direglet. Rag ma c'he gouir en deus bet ar malheur doe'h offansi, nen deus ket koulskoude renonset dar fe en Doue an Tad, ag ar Mab, ag ar Speret-Santel; mes miret en deus ar greden-ze, ag ar zel a Zoue a so bet ennan, ag adoret en deus fidelamant an Doue krouer a bep tra.

PEDEN. — *Delicta juventutis.*

O Doue, ankoëet ar pec'hejo deus e faouankis, ag an errolio gant pere e c'he bet tromplet; mes, herve o miserikord infinit, o peet sonj anean (*pe anei*) er gloar dimeus o sklerder. Da vezo an env digor evitan (*pe eviti*) ag an æle ous en eum rejouissan gantan (*pe ganti*). O Doue, resevet o servijer en o rouantelez. Groet ma vo resevet gant an arch'æl Z. Mikel, pehini en deus meritet bean laket en pen an arme selestiel. Ra zeui an æle zantel a Zone de gerhat a de gondui ebars er ger zantel a Jerusalem. Da vezo resevet gant an abostol Z. Per, da behini e c'he roet alc'hoeo rouantelez an envo. Da vezo zikouret gant an abostol Z. Paul, pehini en deus meritet

bean eun instrument a choas entre daouarn an Antro Doue. Ra zeui Z. Yan, an abostol choaset gant Doue, da behini e c'he bet revelet ar sekrejo selestiel, da intersedi evitan. Ma vo zikouret gant pedenno an ol ebestel zantel pere o deus bet digant Doue ar pouar da amari a da disamari. Ra zeui da intersedi evitan an ol zent ag an ol ineo karet gant Doue, pere o deus gouzanvet evit e hano tourmancho er bed man, evit ma hallo, goude ma vo toret ar chadenno pere a dalc'h e ine en e gorf, ariout dar gloar deus a rouantelez selestiel, dre c'hras on Zalver Jesus-Krist, pehini a veo ag a ren gant an Tad ag ar Speret-Santel epad an ol eternite. Evelse beet groet.

#### PEDENNO

DA LAVARET ER MOMET MA VE MARO-AR  
C'HLANVOUR.

RESPONT. — *Subvenite.*

ñ Deut aman, zent a Zoue, diredet, æle an Antro. Digemeret e ine, en presantet dirag an Doue ol c'halloudek.

ÿ Beet digemeret gant Jesus-Krist pehini en deus o kalvet a beet kasset gant an aele entre divrec'h Abraham. Digemeret e ine.

ÿ Reit dean (*pe dei*), Autro, ar repos eternal, a groet ma jouisso deus ar sklerijen hep fin. En presentet dirag an Doue ol c'halloudek.

ÿ Autro Doue, o peet true.

ÿ Jesus-Krist, o peet true.

ÿ Autro Doue, o peet true. On Tad (*a voez isel*) pehini a so en env... (*betec ar c'homzo man*):

ÿ A na bermetet ket e koeffemp en den-tasion.

ÿ Mes on delivret a bep drouk.

ÿ O Doue, roet dean (*pe dei*) ar repos eternal.

ÿ A groet ma jouisso deus ar sklerijen hep fin.

ÿ Deus a dor an ivern,

ÿ O Doue, pellet e ine.

ÿ Da repos en peuc'h.

ÿ Evelse beet groet.

ÿ Autro Doue, jilroet ma feden.

ÿ A groet ma ario ma goulen beteg en-noc'h.

*Pedomp.*

Rekommandi a reomp dec'h, Autro Doue, ine o servijer N... (*pe o servijerez N...*) (*lavaret an hano badeiant*) evit ma vevo evidoc'h, o vean maro evit ar bed man; a dre eun effet deus o madelez leun a drue, pardonet dean (*pe dei*) ar fauto en pere e c'he bet koeet dre ar frajilite a heul ar vue deus an douar. Kementse a c'houlennomp dre verito Jesus-Krist on Autro. Evelse beet groet.

HISTOARIO

TENNET DEUS A VUE Z. JOSEPH.

Eun den zantel pehini en deus skrivet bue Z. Joseph a lavar penos en deiz oarlerc'h an euret chast a zantel selebret entre Joseph a Mari en templ a Jerusalem, an daou briet parfet-ze, pere o devoa groet veu a oerc'h-det, en eum rentas er ger a Nazareth, en pehini e voa bet ar Voerc'hes ganet a zavet beteg e frezantasion en Templ dan oad a dri bla. E zad zant Joasin ag e mam zantes Anna a oa maro aboue an amzer-ze, mes lezet



o devoa do merc'h peadra gant an ti en pehini e oa bet ganet. Arog mervel o devoa karget eur vroeg ansien, kares da zantes Anna, da zerc'hel an ti-ze e stad vad, ken a deuje o merc'h biniget da gemer posesion anean. An ti, pehini a oa situet eur pennat hent deus a greis ker, a oa harpet ous eur roc'hel, a bean e voa eur jardin stag ontan. Izel a oa, a nen devoa ket a estaj. Komposet e oa a ziou gampr, unan arog ag eben adren. Bean e oa ie eur gamprik kleuzet er roc'hel, a pehini a zervije a stal da Z. Joseph evit e labourio, ag ie a gigin, evel ma kreder. Eno e oa deut ar Voerc'hes er bed, ag e devoa bet e c'hentelio kentan digant e mam dous a zantel; eno o devoa Z. Joasin a zantes Anna bevet pel amzer ag o devoa achuet o bue.

Mari ne devoa ket goelet aboue an oad a dri bla al lec'hio-ze ken karet ganti, a bean e devoa neuze voar dro c'hoesek pe seitek vla. A goël deus an ti-ze en pehini e devoa tremenet e blavejo kentan a douchas e c'hallon, a dont a reas an dour voar e daoulagat. Z. Joseph, gant eur galon ken parfet a ken karantezus evel men devoa, a remerkas an

daëro-ze ag a lakeas e vrassan zoursi de c'honsoli. Lavaret a reas eta dezi gant eun dousder vras : « Mari, ma c'hour ger, na hel den, me en anzav, derc'hel evidoc'h plas ar patriarc'h venerabl-ze nag ar vroeg karantezus-ze en devoa Doue roet dec'h evit tad a mam. Mez plijet ec'he bet dean gervel ane davetan. A c'hanta, Mari gez, a nen de ket Doue sufis dec'h? En gout a ran, noc'h eus ken eomp nemert deus Doue. Gouir eo penos en deus deurveet teul e zaoulagat oarnon-me, e servijer dister, ag en deuz ma choazet evit dousat o klac'har. O pedi a ran eta dam c'hredi; ma brassan zoursi a vo den eum rentan dign deus o kompagnunez. Na refuzet ket ma zervijo. Me a garje bremen bean eur prins bras evit o kargan a c'hloar ag a gontantamant, ma c'hoantaje o kalon eun dra benag oar an douar; hogen o kalon a ma hini ie o deus hueloc'h zantimancho. Ma zikouret eta da garet Doue muy ous muy, a me a labourio evidoc'h... Plijet genec'h eta ma zellet evel eur breur leun a garante, prest da gemer lodien oc'h ol boagno... Beet awan evel ma oac'h en templ an Auro Doue, hep nec'ha-

mant ebet... Na c'houlan ket e teufe netra da droubli o repos ag o c'hunion gant Doue... Kemeret posesion deus an ti man deus a behini e zoc'h ar vestres ag an itron. » Neuse e tigoras Joseph ar gampr preparet evit Mari. Mez pegen souezet a oe neuze ar Voerc'hes! Zeblanti a re dezi huvreal. En eur antren er gampr-ze e oelas enon an ol dreo pere a oa bet en e zervij pa oa en templ a Jerusalem, e c'horatorik, e levrio, e zabouret bian, e noadeio, betek eul labour brodeür e devoa komanset enon, ag an ol dreo-ze disposet gant ar memes urs evel ma oaint er gampr-vian deus an Templ en pehini e devoa groet e demeurens. Joseph en devoa klevet gant ar brofetes Anna, pehini a oa bet karget da ren Mari epad an amzer e devoa tremenet en Templ, penos e oa enon e c'hol doare, ag en devoa groet prepari pep tra evit e c'honsolasion. Ar Voerc'hes o oelet kement-ze a neum lakeas adare da oelan, mes an dro man dre eur zantimant a joa ag a anoudegez vad evit Doue ag evit e friet, a na hallas lavaret netra ken nemert ar c'homzoman : « O Joseph, den mad! » Joseph, kontant bras o voelet e oa deut da vad ar pez en

devoa groet evit konsolasion ar Oerc'hes, a respontas hepken : « Nosvez vad dec'h, Mari, a dizec'het o taëro; » ag en eum dennas en e gampr e unan.

O pegen gouir eo penos ar c'halono leua a garante Doue eo ar re o deus ar brassan gallout evit konsoli an dud afflijet!

Mari a dremenas an nosvez gentan o pedi Doue, ag o c'hober reflexion oar an obligasiono neve a digoe dezi. Da c'houlou deiz e c'heas ebars er gampr komun dezi a da Z. Joseph, ag enon en eum lakeas oar e daoulin dirag e friet, evit e drukarekat deus ar vadelez en devoa bet eviti. « O zellet a ran, emezi, evel ma mestr a ma outro, ag epad ma bue e vezin evidoc'h eur zervijerez fidel. Aboue pel amzer na meus netra din ma unan. Ober a refet ar pez a blijo dec'h gant an neubent a vado a zo deut din deus a beurs ma c'herent. Prest on da zenti ouzoc'h e kement a ordrenfet din : komzet, o ma outro, bean e zon en o servij. » Z. Joseph o voelet ar Voerc'hes ous e droïd a zantast e galon touchet, ag en eum humilias

ennan e unan. Leun a respet eviti e reas dezi zevel, en eur assuri dezi penos e vras-san dezir a oa da labourat eviti, o zellet anezi evel e c'hoar pehini zoken e devoa muoc'h a droajo evitan ebars en ti, pa voa deus e c'hoste an ol vado o devoa, ag e nen devoa digaset nemert e volante vad. « Zalocras, a respontas Mari, c'houi eo an ozac'h a dre-ze ar mestr aman. Doue en deus ma roet dec'h, a bean a vin zoumetet dec'h e pep tra evel eur zervijerez fidel dre garante Doue. Koulskoude, pa o c'heus c'hoant da anaveout ma intansion, anzav a rin ouzoc'h penos e c'he bet plijet din a viskoas ar baourente pehini, o tistagan on c'halon deus an douar, a ra dimp e zevel entrezeg an env elec'h ma man on gouir den-zor. Mar kevet mad eta, pa on deus muoc'h a vado evit non deus ezomp, erefomp taer loden aneze: unan a vo evit ar bevien on breudeur; eun al a vo roet en offrans evit an Templ zantel, ag an daervet a zeryijo evit on bevans. » Z. Joseph pehini a oa ie distag deus a vado ar bed, ag en devoa eun istim vras evit ar baourente, a gonsantas a greis kalon heuil an avis mad-ze. Hogen, o vean

prenet gant darn deus an daervet loden-ze ar binvio en devoa ezomp evit e vicher, ar peur rest a oe ie roet en aluzen dar bevien.

Goude ze e rejont eur reglen a vue dre behini e leze Joseph gant Mari eul loden vras deus e c'hamzer evit e c'horezon ag evit e c'hexersiso a relijion, pere koulskoude na gleent ket e c'hampech da gemer zoursi deus an tiegez a deus ar menach, a kargan a reas ar voereb koz a oa en o c'hichen da vont da ober ar c'homissiono a vije eomp emez ar ger. Mari, dre anoudegez vad evit kement a vadelez, en eum dolas adare oar e daoulin, en eur lavaret: « Al loden vianan a labour oc'heus roet din, lakat a rin ma brassan zoursi evit en eum akouitan deus anezi; ag evit tennan oarnon evit-se graso Doue, o pedi a ran da rei din o penediksion. » Joseph, o voelet stouet ous e dreid an ael-ze a zantelez, a zouzas a dren gant ar souez, ag a deuas ru evel an tan: « Nan, biken, emezan, ne non ket dign a gement-ze. — Zalocras, eme Mari, ze a zo gleet dec'h, rag dere'hel a ret evidon plas an Auro Doue. Joseph, o ma auro, eun displijadur vras a refet din, ma refuzet din

ar mennat-ze. Biniget ac'hanon evit ma vin biniget gant Doue. » Joseph na hallas ket rezistan ous eur vouez ken dous a ken humbl; ag en eur zével entrezeg an env e zaoulagat glebiet gant an daëro ag e zaouarn : « Plijet gant Doue Abraham ag Isaac, emezan, skuil oar e zervijer humbl ag e zervijerez fidel an ol vennozio prometet don tado ansien. — Amen, » eme Mari, ag o vean zavet divoar e daoulin gant eul levenez ag eur vodesti vras, e pokas da zaouarn Joseph.

Aboue tri pe pevar mis e vewe an daou priet chast a zantel er pratik deus an huelan vertuio, ag en union ar barfetan, pa deuas an arc'hæl Gabriel abeurs Doue da anons da Vari ar mister deus an Inkarnasion dre behini eun Doue Zalver a deuje da gemer en e c'hintraillo zacr eur c'horf ag eun ine, evit en eum ober den; a dre ar c'homzo-man : *Fiat mihi secundum verbum tuum*, da laret eo : Da vezo groet din evel mo c'heus lavaret, dre bere e rôe e c'honsantamant, en eun gavas da vean huelet beteg an dignite a Vam Doue. Kement ze e oa

c'hoarveet hep gout doare da Z. Joseph. Prest goude e c'heas Mari da vizitan a da zikour zantes Elizabeth e c'hininderv, pehini, dre eun inspirasion divin, a anaveas diustu ar mister akomplisset enni ag e zaludas evel Mam eun Doue. Retorn a eure tri mis goude d'ar ger a Nazareth, a Z. Joseph na ouie c'hoas netra. O vean remerket neuze ar stad deus e briet zantel, e teuas dean eun anken ar brassan. E visaj pehini a vije atao joaüs, pa vije en e c'hompagnunez, a deuas da vean karget a dristidigez. Na debras kazi netra de lein, ag en eum dennas diustu a goste da bedi Doue; mes, allas! na geve ken en e orezon ar peuc'h delisius da behini e oa kustren arog. E voereb goz, pehini e devoa zantet ie abret e oa deut Mari da vean mam, e devoe hast da ober voar gement-ze e c'hompliment da Joseph, ar pez a greskas mui ous mui e boan. « Ma Doue, ma Doue, a lavare ar paour kez afflijet, petra rin-me? Na livirin netra assur, rag na c'houlan ket e c'hol ag e dizenori... A hent al ma c'honsians na bermet ket din anzav e c'hon tad da eur bugel pehini ne ket din... Ma Doue, ma Doue, deut dam zi-

kour... Mari ken zantel, ken pur! A koulskoude na hallan kavet doutans ebet e c'he dent da vean mam! Ma Doue, ma Doue, levet din petra e meus da ober.» Goude bean pel amzer pedet a huanadet, e lavaras ennan e unan: « Evit gloar Doue ag honor Mari e c'han den eum zakrifian ma unan... Arc'hoas ar beure e kouitain ar vro... Mes penos en eum dispartian deus ar priet keze pehini a garan muoc'h evidon ma unan?.. Ma Doue, ma Doue, leket kentoc'h fin dam bue... Allas! en goelet a ran, chom aman pelloc'h ne ne ken possubl din. Mont a rin pel a c'hann. Lavaret a vo e c'hon eur priet fal, eun tad dinatur, mes neus fors. En eun darvoud ken trist, na voelan ket e c'halfen ober autramant. Mont a rin, mont a rin kouit. »

Trec'het dre an dristidigez ag an anken pehini a badas meur a heur, Z. Joseph a vanas kousket oar ar sonj-ze da gouitat ar vro. Dont a reas dean eun unvre penos e voa o vale dre eun hent na anavee ket, ag e c'harie en eur forest vrase pehini e kollas e rout e kreis an denvalijen. O vean kerzet pel amzer hep gout pelec'h e ie, souden e

oelas eur sklerijen. Mont a reas entrezeg enni. Mes, o kaeran chaujamant! en eum gavet a ra e kichen eur pales kaer meurbet. Eur pach gouisket kaer ag en devoa diou eskel a deu da lavaret dezan: « Ma den mad, kollet oc'heus o hent; antreet aman, ar mestr deus ar pales-man en deus c'hoant do koelet. » Joseph, evel mezevennet deus al lugern ag an aour dimeus e diou eskel, a heuil anezan; ag antren a ra en eur zal ken lugernus ken na so netra da gomparaji gant an eklat deus ar sklerijen-ze, ag ispisial deus a vizach ar Roue a voa enon azeet oar eun tron. En dro dar Roue e voel eun niver bras a bachet al hanval ous an ini en devoa e gunduet, a pere a re eur musik ravissant. Ar Roue o vean groet eur zin, ar muzik a sessas, a neuze e c'haparissas eur vroeg, deus a behini na hallas ket Joseph goelet ar figur, gant an eklat lugernus a zortie dionti. Neuze e klevas eur vouez pehini a deue deus an tron ag a lavaras: « Homan eo ma merc'h ar muian karet. » Ar Roue o vean neuze taulet e vantel entre ar vroeg-ze a Joseph, o miracl! o burzud evurus! Joseph a anaveas Mari e b.iet ker; ag

an ol æle en eur vouez a grias taer goec'h :  
« Mari, Mari, Mari! Gloar da Zoue ol c'hal-  
loudek! Gloar da Vari! » An æle agommans  
adare o musik, a Joseph beuet ebars joa  
a gri de dro : Mari! Mes an effort a ra evit  
mont de c'havet a ra dean divuni en eun  
tol. « O ma Doue, emean, pelec'h e c'hon  
me aman? — En o ti oc'hunan, a respont  
gant eur vouez dous an arc'hæl Gabriel, a  
chom a refet aman. Breman, Joseph, miret  
a refet Mari o priet; ar bugel a doug eo  
Mab Doue, a rei a refet dezan an hano a  
Jesus, rac sovetad a rei ar bed deus ar pe-  
c'het. — O madelez divin! a grias Joseph;  
misericord eun Doue! o pegen dous eo dan  
den fiout ennoc'h en e ol affiksiono, a gou-  
len an azistans deus o hano zantel! »

Ari e voa tost an amzer ma klee ar Re-  
damptor anonset gant ar brofetet apparis-  
san d'ar bed, pa deuas eun ordrenans abeurs  
an impalaër Sezar, evit ober a resansamant  
deus e ol ronantelez. Kementse a oblijas  
Z. Joseph a Mari da vont da Vethléem, kear  
David, evit bean douget oar ar rejistro pu-

blik, rag o daou e tiskennent deus ar roue  
David. Al lezen-ze a deuas en kreis an  
gouanv, ag an hent a oa hir a diez dar  
c'houlz-ze deus ar bla. Mari e dije gallet  
lezel Joseph da vont e unan, ag en eun  
dispansi deus ar veach-ze pehini a vije ken  
poagnus eviti, dre ma oa arri tost e zermen  
da lakat e bugel er bed. Mes na zante die-  
zamant ebet deus ar froez divin a oa enni.  
Dougen a re an Ini en deus, gant eur gir  
hepken, tennet deus a netra an env ag an  
douar, a pehini a c'houvern ar bed ol hep  
poan ebet. Gout a ouie a c'hent al, oël evit  
an doktoret deus al lezen, penos Bethléem  
a oa ar gear en pehini e klee ar Messi genel,  
ag e komprenas e oa bolante Doue e c'haje  
di gant e friet. Disklerian a reas kement se  
da Joseph, pehini na sonjas ken nemert da  
bepari pep tra evit ar veach. E vean ma  
c'hellent bean pel hep return dar ger, aba-  
lamour dar gouiliout divin a nije lec'h en  
Bethléem, Joseph a gargas moëreb goz Mari  
da gemer soign entretant deus o zi a Naza-  
reth a deus o affero al. Amprest a reas di-  
ganti eun azenes evit dougen e friet zantel,  
a kas a rejont ie gante eun ijen bian evit

pean an tribut d'an impalaër Sezar. Pa c'harijont en Bethléem an ol hostiliri a oa leun a estranjourien; ag dre ma oaint evel tud paour dibourve a arc'hant, na oent digemeret nep lec'h, a renkout a rejont mont da lojan e kichen kear, en eur c'hraou dister a diabri, en pehini en eum denne ar bevien pere no devoa man evit pean o lojeis, ag ar vesserien loenet, pa vijent surprenet gant bario arneu.

Eun displijadur vras a oa evit Joseph sonjal nen devoa nemert eul lec'h ken vil da lojan ar Roue deus an env ag e Vam. Hogen na badas ket pel e vorc'het. Mari, pehini e devoa muoc'h a sklerijen oar gement a c'hoarvee, a oar a brofesio dre bere oa anonset a diagent an treo-ze, a galme e ol anken en eur lavaret dean: « Bezet e peuc'h, Joseph; aman e vefomp mad aoualc'h, paeo gouir e c'he bolante Doue. Ag en na vo ket Doue aman genimp? Petra on deus ezomp ken? Red eo e teufe da ouir ar pez en deus lavaret ar profet Habakuk, pehini en deus goelet ar Messi entre daou aneval. On azenes ag on ijen a so aman..... Demp eta hep kemer chagrin. » Neuze e c'hantre-

jont er c'hraou, hep ober van ebet na deus an teil a c'houzille an douar, na deus an doën goloet gant labour ar c'henvnit, na deus ar mogerio karget a spoë gloeb, na deus al lukarn hep goër, na deus an nor disklos dre behini e teue an avel en ti. Ari e oa an abardaë noz, a no devoa ket a c'houlou. Mes Doue a oa gante, eun Doue rentet da netra. A gallout a rent sonjal en tra al ebet? « Aman e veomp evad, eme Mari en eur c'hoerzin. Chetu aman eur plas evit lakat ar bugel; chetu aman plous evit on loënet. Navank netra dimp a drugare Doue. » Evelse e kouze Mari evit konsoli Joseph. O vean antreet er c'hraou, Joseph a glaskas ar c'horn ar muan net, ag en dressas goellan ma c'hallas. Lavaret a reas da Vari kemer eun neubeut repos goude ar veach boagnus e devoa groet, ag e sortias evit an affero en devoa da ober. Mari, pehini a ouie dre eun inspirasion deus an env e oa ari an heur evurus en pehini e lakaje er bed an Ini a oa esperans an ol nasiono, a ieas voar e daoulin e kichen ar plous a oa bet preparret dezi da repozi. En e c'horezon en eum gavas evel beuet en eur mor a deliso seles-

tiel. E kreis ar ravissamant-ze a speret e c'haparissas dezi an Eol a justis, pehini a zortias dionti hep ober ofans ebet de goerc'hdet. Anflammet neuse gant an tan deus ar garante, e kemeras ar bugel divin entre e divrec'h, en stardan ag en toman a reas voar e c'halon, ag e vagan a reas gant e laes a oerc'hes. Joseph, o vean antreet er momet-ze, a gomprenas e oa akomplisset ar myster deus eun Doue bugel neve ganet. En eum deul a reas e dal oar an douar ag e chomas er stad-ze eur pennat mad a amzer, ken a deuas Mari den enkouraji dre an dousder deus e c'homzo : « Chetu aman, emezi, an Ini a zo gortoet gant an ol boblio : ma Doue, ma mab, ma Jesus... Deut, Joseph, deut den adori. » Neuse e tiskoeas ar bugel da Joseph, pehini na helle ket en eum viret da oelan ag a bokas e zorn dean. Daou loen hepken, an azenes ag an ijen a oa deut gante, a oe test deus a gement se. Mes souden goude ar vessaerien loenet, kennet gant eun æl, a diredas evit en adori.

Ar rouane deus a Sav-heol, o vean partiet deus a Vethléem da retorn d'ho bro,

goude bean adoret ar mabik Jesus a grøet dean o frezancho, eun æl abeurs Doue a apparissas da Z. Joseph epad e gousk ag a lavaras dean : « Savet, kemeret ar bugel ag e vam, a tec'het dan Ejyp ; a chomet enon ken a livirin dec'h ; rak Herodes a glasko ar bugel evit en lahan. » On zant ker na stourmas ket ous an urs-ze deus an env, pegen dies benag ma vije dean ober eur veach ken hir, a mont da eur vro en pehini na anavee den. Bean e c'heo bolante Doue ; aoualc'h eo evitan. Sevel a ra e kreis an noz, disklerian a ra an urs deus an env da Vari, pehini a brepar diustu ar pez a oa eomp evit ar bugel. Joseph a laka ar bass oar an azenes, ober a ra eur pakat deus an neubeut dillat en devoa, a deus ar binvio a bere en dije eomp evit e vicher er vro estranjour en pehini e c'he da ober e zemenrans. Kemer a ra ie eur bourvizion benag a voët da dibri epad ar veach-ze a dri pe bevar ugent leo, a partial a reont o zri gant kals a hast. Na vije ket bet ezomp a dek dewez evit ober ar veach-ze, ma vijent bet diambarras a c'hent al ; hogen ar soign a oa da gemer deus eur bugel pehini nen



devoa ket c'hoas daou vis, an ewez a renkent kemer evit en eum viret ous fulor Herodes ag evit en eum goach deus e zoudardet, an dienez a beptra, a rente goel c'horrek o beach. Na gerzent ket dre an hencho bras, mes dre oënojenno distro. Petra benag ma fient voar ar Brovidans pehini a veille voarne, implian a rent ar brassan prudans evit na deujent ket den eum deul o hunan ebars en danjeur. Elizabeth, kininderv Mari, a mam Z. Yan-Badezour, o vean gouveet ar stad dibourve en pehini e oaint, a gassas eur mevel pehini a arias gante en draouien Ebron, en pelec'h ar patriareh ansien Joseph, mab Jakob, en devoa tremenet e iaouankis, ag a roas de eun neubeut arc'hant a boët evit o zoulaji ebars en o beach. Neuze e lavaras Mari da Joseph : « Ar Brovidans divin a gemer bepret zour-si ac'hanomp. » Allas ! eun devez ar pourviziono-ze, ag ar re a oa dent gante deus a Vethléem, a vankas deze a gren, a no devoa moyen ebet da gavet reo al. Kerzet o devoa gant kals a fatig, a na hellent ken mont pelloc'h. Bean e oaint e kreis eun desert en pehini na oa nemert trez a mein,

hep goëen ebet, hep ieot evit al loën, hep bara evite. Ouspen da ze e teuas eun awel bras, eun tourmant horrupl, savet marteze dre valis an ini en devoa inspiret da Herodes ar sonj da lazant Zalver ar bed en e gawel. Ar grizill, ar glaw, ar c'huruno a deuas en eun tol oar ar famil zantel dan abardaë noz, elec'h na oa nag abri na dislaw ebet. Kalon Joseph a oa prest da rannan gant an anken. Lakat a reas e vantel dirag Jesus a Mari evit o diwal ous an awel ; mes ar bario glaw ag awel a rentas inutil an abri dister-ze, ag e ber amzer e teujout da vean glebiet ol, o krenan gant an anouet. Eno e vijent marvet, penavert an dorn ol c'halloudek a Zoue pehini a deuas d'ho zicour. Mari a bede Doue, ag a c'holoë ar bugel gant e divrec'h a gant e c'habijo paour. Joseph a bede ie, a daëro c'hoevr a rede deus e zaoulagat, o voelet eur vaje-este ken huel sujet da vizerio ken bras. Mari er c'houraje ag a lavare : « Bolante Doue eo... Doue a zo bepret genimp... Doue on goël... Ma Doue, o polante bezet groët... C'hoas muoc'h mar geo o bolante... Mes espergnet o Mab. »

Doùe a jileoas ar pedenno fervant-ze. Lakat a reas fin da fulor an arneu; an awel a neum galmas, ar c'huruno a bellaas, ag en eun tol, e kreis an noz, e c'haparissas eur sklerder bras en pehini eun niver bras a æle a nije ag a gane da Jesus kantiko a adoration. Æle al a breparas dar veajerien zanteleun dol karget abep sort meujo diskennet deus an env. Mari a c'halvas Joseph ag en pedas en kalite a ben tiegez da vinigan ar pret. Goude bean reparat o ners dre ar boët miraculus-ze, e kontinujont o rout ag ariout a rejont en Ejyp, evel men devoa an æl rekommandet da Joseph.

Heuillomp breman ar famill zantel ebars en Ejyp. Enon na vankas dezi na poan na dienez, ispisial er c'hommansamant, pa na oaïnt anaveet gant den er vro-ze. Hogen, Jesus, pehini a zeblante bean kasset a digasset evel eur bugel bian, a sklerijenne interieuramant Mari e vam, a Joseph e dad mager; a pa oa Joseph ar pourveer deus a famill, Doue a roe dean gras evit bean digemeret mad gant ar re a bere en devoa ezomp. Ka-

vet a eure eun ti propr a modest evit lojan, a labour ewitan ag ewit Mari, pehini a falveas dezi ie labourat evel ma e devoa kustum. Evel ma oa bian o dispign a kontinu o labour, en eum gavet a rejont en etat da zoulaji eun niver bras a dud ezomek. Hogen na oa ket aoualc'h deze labourat gant o daouarn. Re a garante o devoa evit an Doue bugel a oa gante evit goëlet hep kals a dristidigez ag a drue eur bobl vras zebeliet en denvalijen dimeus an idolatri, ag an drouk speret o ren evel mestr souveren er vro-ze deus an Ejyp, ken pinvik, ken froezus, ken favorizet gant Doue. En gouirione, an dud kez-ze a adore evel doue an heol ag ar staret al, a beteg ar loenet vilan evel ar zerpantet ag ar c'hrokodilet, ag en eum dic'hrade beteg dewi ezens en honor dar plant a dal legumach deus o farco. Eur zel ardant a birvi tik a anflamas kalono Mari a Joseph o voelet kement-se, a pa gevent eun okasion favorabl e komzent goëllan ma hellent evit dougen ar sklerijen ebars en ineo dallet-ze. Evit dont a ben a gement-se e pedent Doue gant fervor, ag en eum diskoënt dous a serviabl en andret an ol. Dre ze ie an dud a

darempredent o jileoe gant plijadur, ag hinihenno aneze a renonse do superstisiono. Joseph en dije a galon vad impliet e ol vue evit ober dar bayanet anaveout ar gour Doue; a deus an abardaë e vije eur joa ag eur levenez vras gantan, pa nije gallet epad an de sklerijenni eun niver bras a bayanet; mes diskoë a re eur vizach trist pa vije bet rebutet e avijo mad ag e gentelio. Neuse Mari ag en eum lakaë da bedi dirag Jesus, da c'houlen ma en dije true ous an ineo dallet-ze. Evelse e kommansent adalec neuse an œuvr deus a bropagasion ar fe. Er fesonze e vevas ar famill zantel en Ejyp epad meur a vla, cuzet, paour, mes hep morc'het ebet, o tiskoe bepret pep sort skoërio mad da gement a vije en dro deze. Erfio, Herodes o vean deut da vervel, eun æl abeurs Doue a roas urs da Joseph da return de vro gant Jesus ag e vam, a da vont da Nazareth evit ober enon e zemeurans.

An ol veajo en devoa groet Joseph, an ol boagno a speret a oa c'hoarveet gantan o devoa dinerzet e gorf. Hogen, o vean ari

en e vro, an ezomp en devoa da lakat adare e affero en o stad ansien a da bourveï da vuezegez Jesus a Mari a roas dean kement a gourach ma neum lakeas hep dale da labourat gant ardor, ar pez na vire ket ontan da gundui eur vue interieur ag unanet gant Doue dre an orezon gontinuel. O c'hariout en e di en devoa kavet pep tra renjet mad ag en urs dre a zoursi deus a voëreb Mari. Ar gerent ag an amezeïen a deuas da vizitan ar famill zantel. Ol e oaïnt en admiration o voëlet ar genet dispar deus ar mabik Jesus. Na hellent ket distagan o daoulagat divoarnean, a pep hini en devoa c'hoant da lavaret dean eur gomz benag a garante; hogen zantout a rent evitan eur respet pehini a vire oute na vijent re familier gantan. Pa deuent goude-ze da zellet ous Mari, ag ous kemen tra a voelent en ti biniget-ze, e zeblante deze en eum gavet en templ zantel a Jerusalem. Kement-se a re da galon Joseph bean karget a levenez, ag e zaoulagat a vije alies glebiet gant daëro a joa. Kement den a deue en e di a lavare dean : « O Joseph, c'houi a so evurus ! pebes bugel, pebes groeg o c'heus

aze ! Pebes tensorio ! » Red eo en anzav ; poan en devoa Joseph evit en eum viret da disoiñ ar sekret oar sujet ar Bugel divin ; ag ezomp en devoa da neum dennan a goste evit kuzet ar zantimancho a oa en e galon. Kement a joa en devoa da vewan en kompagnunez Jesus a Mari ma en eum ankaoue beteg oar an dibri ag an evan, a pa vije ari kouls ar pret e vije ret lavaret dean kemer boët. Bean en devoa koulskoude ar garg da rei da bep hiñ e borsion : rag evelse e oa bolante Jesus a Mari. Ar boët a debent a oa ar freus deus e labour dre behini e c'honée ar pez a oa ezomp evit zouten bue eun Doue.

O pebes tan a garante a anflamme e galon, pa voele ar mabik Jesus o kousket pe en e ouele bian, pe oar varlen e van ; a pa douge anean oar e vrec'h, pa zante anean o kregi en e varo gant e zaouarnigo, evit c'hoari evel eur bugel, ag o lakat e zivrec'h en dro de c'houk evit pokat dean, pa gleve anean ous en gervel e dad ! .. A goude ze, pa oa ari brassoc'h, pessort zantimancho en devoa on zant, pa oele anean ous treid Mari, o zikour anezi da dibuni pe da ober

eur maneur al benag, pe pa dostaë ous e vank amunzer da glask dean e binvio, da dastum ar skolpet, a da zenti ous an disterran zin deus e volante !

Pa oe ari Jesus en oad en pehini e ve disket eur vicher dan dud yaouank, en eum lakat a reas da labourat gant Z. Joseph. Rag evit en eum izelat beteg an ol vizerio deus eur vue a boan, e c'he bet falveet dean lakat an daouarn-ze pere a zouten ar bed ol da labourat gant binvio eun artizan koat, ar rabot, an esken, ar gizel. Ar goël deus a gement-ze a oa evit Joseph ar sujet deus eur souëz kontinuel, ag a re dean labourat hep zantout ar skouider deus e boan.

Labourat gant Jesus a Mari, labourat evit Jesus a Mari, pebes zikour evit labourat a galon vad ! pebes remed ous an dic'hout deus e labour dan nep er gra evel Z. Joseph !

Z. Joseph, fidel evel ma oa dan ol boëncho deus al lezen ansien, na vanke kamet da vont da vianan eur veach er bla da Jeruzalem evit selebri a Pask, brassan goël deus a bobl an Autro Doue. Evit ar goëi-ze e c'harie dar ger zantel bandenno bras a dud

deus a ol garterio ar bed. En unan deus ar goëlio-ze e teuas Z. Joseph gant ar mabik Jesus, oajet neuze a zaouzek vla, termen merket gant al lezen dar vugale evit akomplissan an dever-ze. Mari, evit gouir, na oa ket red dezi ober ar veach-ze; hogen, dre na helle ket bevan pel deus e Mab divin, e falveas dezi ie akompagni Joseph. Goude bean groet o devosiono ag o offranso ebars en templ an Autro Doue, ar famill zantel en eum lakeas en hent evit retorn da Nazareth, Joseph gant ar oerset, a Mari gant ar groage; rag ar belerinet a veaje evelse en diou vanden; mes ar vugale a ie gant an eil rum pe gant igile evel ma o dije c'hoant. Pa deujont emez a Jerusalem, Mari a gredas e oa Jesus gant Joseph; a Joseph a gredas ie e oa ar bugel gant e vam. Ar greden-ze a reas no devoa nec'hamant ebet. Dan abardaë ar belerinet en eum dastume en serten stasiono evit kemer boët. O vean ari er stasion gentan, Mari a glaskas Joseph evit gout doare ar mabik Jesus. Joseph deus e goste a c'houlenas ie diganti kelo deus ar bugel. Pebes glahar evite, pa deujont da anaveout penos ne voa ket deut Jesus na gant an eil na gant

igile! Epad an noz e klaskjont anean etouez o amizeien ag o c'herent gant kals a anken, Mari evel eur vam leun a deneridigez evit e mab, Joseph evel tad mager a mirer dar mabik Jesus. Joseph, ispisial, a re dean e unan rebecho bras evel ma vije bet manket en e dever. E humilite a re dean sonjal e oa e bec'hejo kirieg dar Bugel divin da vean en eum dispartiet diontan. En tuont da ze goëlet a re Mari en affliksion ar vrassan deus ar c'hol e devoa groet deus e mab pehini a oa an objet deus e c'hol garante. Pa na gevent ket anean ebars er kompagnunez, e retornjont da Jeruzalem evit en klask. Epad tri de e redjont dre ruio ar ger vras-ze hep klevet kelo ebet. Erfin, o vean skouis a karget a dezolasion, e c'hantrejont en Templ evit pedi Doue. Mes, o momet evurus! goelet a reont o mab en eur gampr deus an Templ, elec'h ma neum dastume an doktoret deus al lezen. Aseet enon en o c'hreis, e re ar zujet deus admirasion an ol dre ar skiant ag al lokans divin demeus e responcho. Mari, hep zellet ous eur gompagnunez ken henorabl, a ieas diustu da gavet e mab ag a lavaras dean : « O ma mab, perag o c'heus-u

groet kement-se dimp ? O tad a me, leun a anken, e oamp ous o klask. Joseph ravisset o voelet levenez Mari, ag o klevet ar meulodi a roe an ol da Jesus, a ankoëas e fatig ag e zaëro, ag e rétornas da Nazareth. Evit soulaji Jesus a Mari epad ar veach-ze pehini a bade daou devez, en eum lakeas en despet de humilite entre o daou, o rei e vrec'h deo da Vari, ag e vrec'h al dar mabik Jesus, ag evelse na zaute ket ar skouisder deus an hent.

Jesus, pehini a oa deut oar an donar evit diski dar bed ar bris deus ar groas a dre e gonzo a dre e exempl, a gare re e dad mager evit e lezel hep kroajo, ag ober dean koll an tenzorio a verito kuzet enne. Alies en devoa Joseph gouzanvet poagno a gorf ag a speret, a Jesus, evit kreski e verit ag e rekompan, a lame digantan ar c'honso-lasiono selestiel-ze pere a doussa ar bras-san ankenio. Er fin c'hoarveout a reas gant an den just ar c'hlenvet a glee achui e be-lerinach er bed man. Ar c'hlenvet-ze a badas eur pennat mad a amzer. Hogen, dre ma tene e gorf da zemplat, e ine a oëllaë

ag a deue kaëroc'h ous kaëroc'h. Bet en devoa eun donezou admirabl a basiantet. En kreis e vrassan souffranso, eur zel hep-ken oar Jesus a Mari a roe dean eur gou-rach dreist naturel. Evit gouir biskous klan-vour nen devoa bet eun evelep kompagnu-nez evit e brederian. Nen devoa ezomp ebet da c'houlou eun dra benag. Mari a chome dalc'h mad en pen e ouele; a pa vije o rou-ten e ben evit rei dean da evan e lavare dean eur gir benag evit e ankouraji, ar pez a re dean ankouat kasi e ol zoufra so. Mar na vije ket Mari prezant, Jesus a deue da zere'hel e flas, ag a rente d'ar patriarch venerabl an ol servijo a bere en deus ezomp eur c'hlanvour. A oëjo, en e zav e kichen ar gouele, e kemere daouarn Joseph entre e re, a oëjo e zavé dean e ben ag eu harpe oar e beutrin zakr, ar pez a re dean kement a vad ma vije bet evurtis da c'houzanv e glenvel epad kant vla evit kavet eun evelep eur vad. A oëjo ie Jesus a re dean répozi oar e zivrec'h; kempen a re barnean pa-lenn e ouele, diluia a re e varo ag e vleo, goualc'hi a re e zaouarn ag e vizach, a po-kat a re dean evel ma ra eur bugel mad da

eun tad prest da vervel. Joseph a reseve an ol verko-ze a garante Jesus evitan hep lavaret gir ; hogen an daëro deus e zaoulagat a diskoëe an anoudegez vad dimeus e galon. Mari, pa arie, a gontemple oar e daoulin ag en eur oëlan evurusdet Joseph a karante Jesus.

Er fin, pa oe ari an heur divoëan, Jesus a avertissas e Vam, ag o daou e teujont ous troad ar gouele. Neuse Mari, gant an daëro en e daoulagat, a gant eur vouez dous a tener, a lavaras dean : « Joseph, ma mignon, ma c'hompagnon a ma friet, o trugarekat a ran deus an ol zervijo o c'heus rentet din a dam Mab divin. En pedi a ra da vean e unan o rekompans. Ma fardonet, ma c'hon bet manket da eur poent benag deus ma deverio en oc'h andret. » Joseph, o voëlet an humilite-ze deus e briet zantel, en eum lakeas da hñanadi a da ouëlan. Jesus neuse a dostaas ontan, ag o kemer e ben entre e zaouarn, e roas dean eur pok oar e dal ; ag o vean harpet anean oar e beutrin, e reas antren en e galon eur zantimant ken dous a joa ag a garante, ma tanvaë dre

avans an evurusdet deus ar barados. Neuse e lavaras Jesus dean : « Ma zad ker, o trugarekat a ran deus o soursi evidon, deus o c'hol labourio a deus o karante. Kourach, servijer fidel, souden en eum gefomp c'hoas assambles. » Jesus, o c'hout en devoa Joseph c'hoant da lavaret c'hoas eun dra benag, mes penos, o vean ken tost dar maro, e vanke dean e ners evit gallout parlant, a grenvaas anean evit eur momet, a neuse e c'hallas ar c'hlanvour lavaret gant kals a huandado : « Ma Jesus mad, ma Mari dous, bezet binniget... Pardonet din ma zempladurez, ma neubeut a skiant, ma ol fauto... Esperans e meus en o mizerikord... Jesus, Mari, leun a vadelez... » Neuze, o rei e zaouarn da Jesus a da Vari, o zellet onte ag en eur zaludi aneze, e tremenas dousik, pa oa e vuzello c'hoas o finval evit lavaret : Ma Jesus... ma Mari... E ine zantifiet dre ar c'hoës divin a Jesus ag ar zalud divoëan a Vari, a oe douget gant an æle ebars el limbo, elec'h ma oe eur zujet dreist ordinal a levenez evit an ineo zantel a oa enon o c'hortos an heur deus o redamsion. — O Jesus, o Mari, ma asistet en heur divoëan deus ma bue.

## HISTOARIO

AG A DISKOE GALLOUT Z. JOSEPH.

1. Leopold, impalaër deus an Allemagn, nen devoa bugel ebet da heritan de gurunen, ag ar famill imperial a vije disparisset dioar ar bed. Kementse a oa evitan ag evit e ol famill eur sujet bras a dristidigez. En e afflikcion en devoe rekours da Z. Joseph, ag evit obteni dre e intersession ar c'hras da gaet eur mab, e tisklerias dirag an ol en devoa choaset anean da vean ar protektor partikulier deus e famill. Ober a reas sevel en e honor eun imach bras meurbet en arc'hant fetis. Erfin ordren a reas ober epad eiz de diustu prosessiono en eiz ilis e pere a oe groet ken alies a zérmon en e veulodi. Z. Joseph a jileoas ar pedenno fervant deus ar famill devot-ze, ag a diskoeas pegen galoudus eo e intersession; rag nao mis goude ze an impalaères a c'hanas ar bugel ken desirèt. Na ouffe den ebet lavaret gant pebes levenez a pebes anoudegez vad a oe

klevet ar c'helo-ze dre an Autrich ag an ol Allemagn. An impalaër transportet gant ar joa, evit trugarekat Z. Joseph deus ar fa-veur-ze, a reas rei e hano dar prins neveganet, petra benag na oa bet biskous roet an hano-ze dar brinset deus e famill. Evit rei de vadoberour glorius eur testeni neve deus e anoudegez vad, e reas vœu da sevel eur portret dean var unan deus ar plasenno publik deus ar ger a Vienn. Mervel a eure, evit gouir, arog bean akomplisset ar vœu-ze. Mo Joseph, e vab ag e heritour oar an tron, a exekutas anean. An imaj-ze a oe savet an de memes deus a oel Z. Joseph, an naontek a vis meurs 1709, ag asistan a reas e unan, gant ol dud e bales ag an ol bobl a Vienn, dar seremoni gaër.

2. Ar sœur venerabl Mari-Katherin a Z. Augustin, pelini a oa bet zellet en Frans ével mam ar bevien, a oe kuset dan hospital ar Vizerikord er ger a Gêbék en Amerik, evit serviji enon kalite a sœur hospitalieres. An devosion vras e devoa evit Priet chast ar Oerc'hes Vari a reas dei ajouti an



hano a Josephin de c'hanoïo al. En de deus a oel Assansion on Zalver e tigoeas dei kavet eur vizion honorabl bras evit on zanter. Goelet a reas eur brosession solemnel kompozet deus a eun niver bras a zent, ag en o zouez Jesus-Krist ar Roue a c'hloar, o sevel en triomph entrezeg an env. Pa oa leun a admirasion o zellet eun dra ken kaër, e oëlas Z. Joseph o kerzet en pen ar re al evel karget da regli ar brosession. Pa oent ol antreet en env, ec'h eas Jesus-Krist, gouir Doue a gouir den, da azean oar an tron prepalet dean en tu deo dan Tad eternel. Neuse Mari-Josephin a glevas e fatron zantel oc'h adressi da Zoue an Tad ar c'homzoman : « Chetu aman an tensor o poa fiet » ennon oar an douar. E rentan a randec'h » hirie non pas en doubl hepken, mes kresket deus an niver infinit a ineo deus a » bere en deus peet ar ranson. — Servijer » fidel, a respontas an Tad eternel, pa oc'h » bet oar an douar ar penn deus ar famill » zantel, e fel din rei dec'h ar memes pouar » ebars en env, evit ma po er famill deus » ma Mab an titr a outro elec'h an titr a » servijer. » Jesus-Krist de dro a disklerias

e raje bepret ar pezh a blichje dan ini a oa bet e dad mager. Neuse Mari-Josephin, ous en eum adressi de fatron gloriüs : « O zanter » bras, emei, goulennet euidon digant an » Doue a c'hloar ar c'hras da viret bepret e » garante em c'halon. Ne ket possubl e re » fusfe dec'h ar c'hras-ze. » E feden a oe jileoet, mes gant ar gondision ma e dije deus e c'hoste sonj deus ar bromesse e devoa groet da Zoue den eum zoumeti e peptra de volante zantel. Goude ze e oe diskoet dei ar plas a oa destinet dei evit ren en env gant Jesus, Mari a Joseph.

3. Zantes Theresa e devoa resevet, dre eun inspirasion abeurs Doue, an urs da fontan eur gouent a garmeliteset en Avila, ag ar bromesse e vije asistet evit se gant Doue memes, abalamour dar servij parfet a vije rentet dean er gouent-ze. Doue ec'h avertissas ie da rei dar gouent kentan-ze deus ar reform an hano a Z. Joseph, ag a disklerias dei e lakaje ous an nor daou c'hardien fidel a vijilant : en eun tu Mari e vam, ag en tu al Joseph, priet Mari.

Ar fondatrice zantel a gomansas diustu al labourio; mes souden en eum gavas ne c'het bras, dre ne devoa ket a arc'hant evit pean an arisanet. Na oele moyen ebet da dont emez deus an ambarras-ze. Neuse Z. Joseph a apparissas dei ag en eum ofras da servijout dei a gaousion a memes a denso-rier, en eur brometi dei na vanqje ket a arc'hant, ag oc'h alian anei da gontinui be-pret al labourio. Ar zantes ne devoa ket eur goënek memes. H. uil a reas nag evit se avis e froter zantel, pehini deus e goste a oe fidel de bromesse; rag fournissan a reas dei sommo en bras a arc'hant, a dre voyenno ken dic'hortos ma chome souezet meurbet kement a oa test deus a gementse.

4. An tad de Barry a gont eun dra ari gant eur plac'h gant pehini en devoa e unan e glevet, ag a so mad meurbet da ankoura-ji an ineo abof pere, goude bean groet eur faut grevus benag, a so troublet gant ar vez da kovessat o fec'het. Ar plac'h-ze e devoa groet eur pec'het enorm a enep da eur vœu e devoa groet da Zoue, a ne devoa ket a

gourach aoualc'h evit trec'hi ar vez fal pe-hini e c'hampeche da anzav e faut er govi-sion. Chom a reas eur pennad amzer ebars er stad-ze a bec'het; mes ar remorcho deus e c'honsians, pere a heuil ordinal ar pec'het, na roent dei peuc'h ebet. Goelet a re kouls-koude na vije fin ebet de zourmant, ma na deuje ket da disolo ar gouli deus e c'hine dar medesin spirituel. Dont a reas dei an inspirasion da c'houlen ma teuje Z. Joseph da zouten e sempladurez, ag e bedi a reas de delivran deus ar vez miserabl ze pehini e devoa e zrec'het bete neuse. Resitan a reas en intansion-ze epad nao devez an hymn ag an oresson deus a Z. Joseph. An maovet-ze o vean achu, en eum zantas en eun tol leun a ners ag a gourach, ag, o trechi oar an ol boan e devoa bet bete neuse evit kovessat, mont a reas ragdal den eum deul ous treid e c'hovesour, ag ec'h ansavas outan ec'h ol bec'hejo. Dioar neuse e zellas Z. Joseph evel e brassan madoberour; e bedi a eure da gaet bepret zoursi deus ec'h ine; a kemer a eure an habitud da dougen ordinal eun imaj deus ar zant, memes epad an nos, evit en eum breservi deus an uvrec fal. Z. Joseph

deus e goste, evel ma e deus ar plac'h en diskleriet a c'houdevez, a rekompansas dre faveurio extraordinale devosion ag e fidelite.

5. Ebars ar rouantelez Napl a so eur mene huel hanvet ar Vesuv, pehini a so kleus; a deus e greis a sav a amzer da amzer a oëjo ludu ken teo ma ve tenvalet an de evel gant ar c'houmoul, ag a ve goloet ar vro tro var dro gantan, ag a oëjo moget a flam spontus, a goude ze dreist bord an toul bras a so oar lein ar mene, e ve goelet o sevel, evel al lez oar an tan, matierio ag a red a bep koste evel houarn teuzet ag a doug dre ol oar dro ar ravach ag ar maro. Er bla 1631, e sortias deus ar mene-ze eur gantite ken bras deus ar matier fontet-ze, hanvet *lave* en gallek, ma zeblante eur ster a dan o redek ag a c'holoas an ol vro dioar dro, a muoc'h c'hoas eur c'hartier hanvet *Tour ar Grek*. Eno a oa o chom eur vroeg hanvet Kamill, pehini e devoa kals a devosion da Z. Joseph; a bean e devoa ganti eun nis bihan, oajet a bemp bla, hanvet Joseph. Kemer a reas ar bugel-ze entre e di-

vrec'h evit tec'hel arog ar rivier tan-ze; mes ariout a reas gant eur roc'hel vras pehini a ie pel ebarz er mor, ag en eum gact a eure en danjeur pe da vean devet ma chomje enon, pe da vean beuet ma c'haje pelloc'h. En eur darvoud ken terrubl, e devoe rekours de frotektor zantel. « O zant bras, emei, rekommandi a ran dec'h o Josephik bian, ag o kargan a ran de sovetat. » Neuse o vean luket ar bugel oar ar roc'hel, e reas eul lamp entrezeg ar mor. Elec'h koëan en dour, evel ma klee ober naturel-lamant, e koëas oar an trez, hep kavet drouk ebet. Hi a oa neuse e mez a danjeur; mes eur boan vras a speret e devoa o sonjal e oa bet devet ar bugel; ag en e chagrin e rede duman a duont, o hirvoudi oar e mateur. Mes kerkent e klevas ar bugel ous e gervel dre e c'hano ag e oelas anean o tont entrezeg enni. « O bugel kez, emei, en eur vriatan anean, piou en deus gallet ta breservi deus al ladu a glee ta vougan pe deus an tan a glee ta devi? — Z. Joseph, eme ar bugel, da behini e poa ma rekommandet. E eo en deus kemeret ma dorn a ma digaset betog aman. »

Neuse Kamill, leun a anoudegez vad, a stouas d'an daoulin, evit trugarekat e froktektor karantezus deus an daou virakl en devoa groet o preservi e nis bian deus an tan, ag ous e delivran e c'hunan deus an dour.

6. En kouent Zantes-Elisabeth en Lyon, eul leanes hanvet Mac'harit a goeas divoar eur lec'h huel en eur feson ken maleurus ma chomas hep anoudegez, a ma teue ar goad deus e geno, deus e fri a deus e diou-skouarn. Koulskoude al léanézet a lakaas o oll zoursi dé fréderian, a na varvaz ket; hogen chom a reas hep ners ebet, a gant poanio ken bras e ne fen, ma oe imposubl dei gpad meur a vis, e lakat oar ar pluek. E speret memes en eum geve ken zempl, na helle e derc'hel parfet oar netra. Ar vedesinet a disklerias na oa remed ebet eviti, ma na vije ket groet dei an operasion deus an *trepán*, pehini a gonsist o toullan krogen ar pen. Ar glanvourez baour, d'ar c'helo-ze, e fromas e c'hol isili. Neuse ar vam briolez e devoe rekours da eur remed doussoc'h a suroc'h assambles. Rei a reas

avis dan ol leaneset da ober eun naovet a gommuniono en honor da Z. Joseph. An naovet-ze a oe komanset; mes ar souffranso na diminuent ket beteg an de divoean, ag hinienzo deus ar soeurezet a bropose deja goulén zikour Z. Anthelm e plas Z. Joseph. Mes unan ane, pehini e devoa eur garante spesial evit Z. Joseph, na eoulas ket permeti e vije groet dean ar sort dismegansze. E bedi a eure gant ar brassan fervor a oa possubl dei da rei e hunan ar iec'hét dar glanvourez; represanti a reas dean penos e honor memes a divenne outan lesel gant eur zant al ar gloar deus ar mirakl a oa reketet digantan. Z. Joseph a jileoas anfin eur beden ken fervant; rag en eun tol, pa na oa den o sonjal, ar glanvourez en eum gavas iac'h. Leun a joa e lampas deus e goele, en eum ouiskan a eure, ag e kommansas redek dre an ti en eur grial : « Mirakl, mirakl ! Z. Joseph en deus ma rentet pare ! » Adaleg an de-ze e c'hallas asistant er c'hœur a heuil an oll exersiso deus ar gouent, hep zantout netra deus e souffranso tremenet; a Z. Joseph a gontinuas goude se de c'hargan a faveurio presius.

7. An tad Jerom, kabusin a missioner apostolik deus ar ger a Bistoa en Itali, en devoa bet urs digant ar Pab da vont da Venis evit ambarki enon gant eur c'hompagnon, a mont da enezen Kandi. An daou dad relijius, o vean groet eur pennat hent, a gollas o rout e kreñs an noz. Diroutet a grenn a brevet gant ar fatig, en eum dol a rejont oar o daoulin evit supplian Jesus, Mari a Joseph da zont do zikour. Eur beden ken fervant a oe souden jileoët, rac an tad Jerom a oa unan deus a vrassan servijerien Z. Joseph. An daou relijius a oelas neuse da eur pennad hent dionte eur sklerijen hanval ous ini eul lampr. Kerzet a rejont entrezeg enni, ag ariout a rejont e ber amzer beteg eun ti bian e pehini e kev-jont eun den ari oar an noad, eur vroeg ag eur bugel iaouank, pere o digemerag gant kals a garante. An de oarlerc'h an daou tad, o vean divun, en eum gavas en eur prat, a kaer o devoe zellet en dro de, na oeljont ken an ti o devoa lojet ennan. Neuse no devoe doutans ebet penos an tri fersonach o devoa i digemeret gant kement a vadelez a oa Jesus, Mari a Joseph o unan,

da bere o devoa bet rekours en o ezomp, a rentan a rejont de mil aksion a c'hras evit eur favor ken presius.

8. Eur c'habiten spagnol, hanvet Kiroga, brudet bras evit e vaillantiz ag e viktoario, en devoa eun devosion vras evit Z. Joseph. En ol vrezellio en devoe da zouten a enep sovajet an inizi Mariann, en devoa bepret rekours de broteksion, a kammet ar broteksion-ze na vankas dean. En eprouvi a eure ispisial en unan deus an inizi-ze en pehini en devoe alies an okazion da gombati a enep dar varbaret; rag pera benag men devoa eun niver kals bianoc'h a soudardet evit e inimiet, bepret e c'honee ar viktoar oarne, ag en deün ini ebet deus e soudardet na oe blesset er c'hombajo. Don Kiroga a raparte bepret da Z. Joseph an enor deus e oll viktoario; a goelet a reie skleramant penos e brotektor selestiel a veille gant ar brassan zoursi oar an arme bian a gommande. Eur veach e teuas eun niver bras meurbet a varbaret den attaki; leuskel a rent oar e arme biro ampoesonet

ken stang a grizill : pœe o dijs e distruget  
a gram penavert im tenas Z. Joseph, gubœt  
de zikour, den divas. Ar zauf o apparissas  
chans en er, ag an arme kristen en gochus  
o terri ar hiro mortel-ze ag o teul une qua  
treid ar soudardet.



### KANTIK SANT JOSER.

Sur son Sancte Marc. : pe. Noël, Et mad. :  
pe. C'est le mois de Mars.

DISKAN.

Sant Joseph, pried Marc,  
Eul mager da Jesus,  
St fœil d'oump hoc'h enori,  
Pateoun karanteous?

Miser chouset gant Doue  
E he Vap ha d'ar Verc'hez,  
Bet hoc'h euz en ho pœt  
Anken ha levnez.

Evit digemer Jesus  
E hoc'h euz na tan, na ti,  
Ho katon an ceurus  
O teul d'hen adori.

Ea gluck Herodes Jesus  
E'hen lokât d'ar marc,  
Gant pebez seiz horzaduz  
Ken kaset da hell-bro!

Pebez poan ! epad tri deiz  
Jesus a so kollet ;  
Goude, pebez levez !  
Jesus hoc'h euz kavet.

Ho labour en deuz maget  
Ho Krouer, Map Doue ;  
En he labour Mestr ar bed  
Ouz-hoc'h-hu a sentè.

Var an douar trubuillet,  
C'hui brema en envou  
A zo gallouduz meurbed,  
Roit d'in ma goulennou.

Jesus a bleg d'ho peden,  
Hag he Vam, ho pried ;  
Eur c'hraç am euz da c'houlèn,  
Eur c'hraç d'in goulennet.

Pa vin galvet gant Doue,  
*Patroun ar maro mad,*  
Deut, gant eun dourn a drue,  
Serrit ma daoulagad.

Tost deoc'h ha tost da Vari,  
È kichen trôn Jesus,  
Ra z'in en env d'ho meuli,  
Ma fatroun evurus !

---

ENN HENOR DA ZANT JOSEPH.

Var dôn : *Bénissons à jamais, etc.*

DISKAN : Kánomp oll meulodi  
Da Joseph, pried Mari ! (*bis.*)

Piou a c'hello ho meuli,  
Sant Joseph euruz,  
Tad mager da Jezuz,  
A pried d'ar Verc'hez Vari ? — DISKAN.

Ann hini a oe spontet,  
Pa zeuaz enn he zi  
Eunn El d'he zaludi,  
Ho kemeraz da bried. — DISKAN.

Var ho tivrec'h benniget  
Oc'h euz douget Jezuz ;  
Var ho kalon joauz  
Ped guêch en deuz han kousket ! — DISKAN.

Roue ann oll rouaned  
Ouz-hoc'h-hu a zente ;  
Ha guir Vab ho Toue  
Gan-hoc'h a zo bet maget. — DISKAN.

Ann Doue oll-gallouduz,  
Enn ho tiik kuzet,  
En deuz ho sikouret  
Enn ho labouriou poaniuz. — DISKAN.

Bet oc'h euz enn ho pue,  
Siouaz ! kalz a boaniou :  
Mes pa skuillec'h daerou,  
Dorn Jezuz ho dizec'he. — DISKAN.

Ha pa zeujoc'h da guitât  
Eur bed ankeniuz,  
Gant Mari ha Jezuz  
Oe serret ho taoulagad. — DISKAN.

Dreist ar zend hag ann eled,  
'Tré Mari ha Jezuz,  
Var eunn trôn lugernuz  
C'houi a zo breman savet. — DISKAN.

Troit eta ho sellou  
Ouz-omp ho pugale,  
Ha bete trôn Doue  
Plijet kas hor pedennou. — DISKAN.

O zant braz, evid-on-me  
Eur c'hras a c'houlennan :  
Deut em heur divezan  
Da zigemer ma ene. — DISKAN.

O ma zad karantezuz,  
Grit ma teui ho pugel  
Evel-d-hoc'h da vervel  
Etre Mari ha Jezuz. — DISKAN.

Joseph, Mari ha Jezuz,  
Bezit gan-en bepret :  
Ra varvinn 'n eur laret  
Hoc'h hanoiou dudiu. — DISKAN.

Goude-ze enn ho kichen  
Enn envou azezet,  
Gand ar zend, ann eled,  
Me ho meulo da viken.

DISKAN : Kancmp oll meulodi  
Da Joseph, pried Mari ! (bis.)

AUG. CHATTON.

» Ken a-lies guech ha ma kâner ar c'hantik enn  
» enor da zant Joseph hag ann hini enn enor da  
» zantez Anna, e c'honezer eunn induljans a *daou-*  
» *ugent deiz*. Ann Otrou Eskop a Zant-Briek eo en  
» deuz bet ar vadelez da rei an induljans-se. »





KANTIK EN HENOR DA Z. JOSEPH.

Oar don : *Zantes Mari.*

O priet zakr da Vari, tad mager da Jesus,  
Dan nep o ped a galon, patron karantezus;  
Daou dra, outro Z. Joseph, a desiran meurbet,  
Digant Jesus a Mari evidon obtenet.

Ma teuin epad ma bue eveldoc'h do c'haret,  
En o divrec'h da vervel, evel moc'h tremenet,  
Eur vue ag eur maro anval ous o re c'honi,  
Evidon me goulennet ous Jesus a Mari.

Pet gouech oc'h eus Mab Doue en o tivrec'h douget !  
A pet gouech oar o kallon oc'heus-u an stardet !  
Ar joa a zantec'h neuse, ag ar gouir garante  
Digant ma Zalver Jesus goulet evidon-me.

Em maro a c'houlennan ar pezh oc'h eus santet  
O vervel entre Jesus ag e Vam biniget,  
Ar memes fe, esperans, ar memes karante  
Evit Jesus a Mari, rouanes an æle.

KANTIK EN ENOR DEUS AR FAMILL  
SANTEL :

*Jesus, Mari, Joseph, Anna a Joachim.*

Kerent va Salver, dimeus ho kloar,  
Tolet deomp eur zel a druez ;  
C'hui oc'h eus kerzet var an douar  
Arog dimp en dristidigez.

Kerent va Salver, etc.

Jesus, c'hui so hor guella mignon,  
Hon tad, hor breur, hor guir zikour ;  
C'hui so hor Mestr, hor Salver guirion,  
Hor sklerijen, hon oll rekour.

Kerent va Salver, etc.

Santez Mari, guir Vam da Jesus,  
O mellezour a burete !  
En ho kalon e man peb vertus,  
C'hui so rouanez an Ælez.

Kerent va Salver, etc.

C'hui so bet tad mager d'hor C'hrouer,  
Sant Joseph, ken humbl a ker mad ;

*Eccè ancilla Domini,  
Fiat mihi secundum verbum tuum.*

2. Ra vezo meulet ho pugel,  
Jesus, freus deus ho korf santel ;  
Kanomp gant an æle, o pia !  
He c'hloar, he garante. *Ave, Maria, etc.*

*Et Verbum caro factum est ;  
Et habitavit in nobis.*

3. Jileoet breman hon peden,  
Hac hon zikouret da dremen,  
Goude hon oll boanio, o pia !  
D'an env, a so ho bro. *Ave, Maria, etc.*

ÿ. Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix ;

ñ. Ut digni efficiamur promissionibus  
Christi.

*Oremus.* — Gratiam tuam, quæsumus,  
Domine, mentibus nostris infunde, ut qui,  
angelo nuntiante, Christi Filii tui incarna-  
tionem cognovimus, per passionem ejus et  
crucem ad resurrectionis gloriam perduca-  
mur ; Per eundem Christum Dominum  
nostrum. Amen.

AR REGINA CŒLI

*En plaç an Angelus en amzer santel a Basq.*

*Voar ann tòn gallek: Vous qui vivez dans les travaux.*

*Diskan : Alleluia, o pebes joa  
D'ac'h-hu, mam a garante !  
D'imp-ni ive, alleluia,  
Pebez laouenidigez  
E voelet goude hon prena  
Adarre leun a vue !*

1. En em gonsolet evit mad,  
Bouanes deus an enyo ;  
Sec'het pelloc'h ho taoulagat,  
Stanket breman ho taëro ;  
Chetu resussitet ho Map  
Leun a c'hloar, a driompho.

*Diskan : Alleluia, o pebes joa, etc.*

2. Goerc'hes Vari, beet joaüs,  
Ho pet konsolasion ;  
Resussitet eo Jesus,  
Herve he brediksion ;  
Dirazan, mam drugarezus,  
Reit d'imp ho proteksion.

*Diskan : Alleluia, o pebes joa, etc.*

4. Ma Doue, o resussitan  
Ho map Jesus hon Autro,  
O c'heus karget ar bed a joa ;  
Gret d'imp, dre he verito  
Ha re an Itron Varia,  
Mont oll da c'hloar an envo.

*Diskan* : Alleluia, o pebes joa, etc.

---

MARIA MATER GRATIÆ.

*Voar ann tòn gallek* : Charmante Gabrielle.

1. Mari, Goerc'hes galloudus,  
Mam dous ha mam dener,  
C'houi so bepret truezus  
En andret ar pec'her ;  
Konfontet adversourien  
Hon ineo,  
Dreist pep tra dent d'hon souten  
Var hon maro.

2. Henor d'ac'h, Salver ar bed,  
Gloar d'ac'h ha meulodi,  
C'houi pehini so ganet  
Gant ar Voerc'hes Vari ;  
Gloar d'an Tad, gloar d'ac'h ive,

Speret santel ;  
D'an tri ferson en Doue  
Gloar eternal.

---

KANTIK AN ÆL SANTEL.

C'hui zo va mignon fidel,  
Æl mad, leun a zouster,  
Rag adalek va c'havel  
Ouc'h choumet em c'hever.

*Diskan* : Me c'houlenn, va Æl santel,  
Pa deuiio va maro,  
Var o lerc'h, mignon fidel,  
Nijal dan env, va bro.

Bouzar ec'hon bet d'ho moues,  
Ha va c'halon ingrat,  
En despet d'ho karantez,  
En deus kouitet ar mad.

Me c'houlenn, etc.

Satan a meus jileoet,  
A gant e guzull fall  
E zon koueet er pec'het,  
Evel pa vijen dall.

Me c'houlenn, etc.

C'hui oc'h eus din inspiret  
Da derri va chaden,  
Ha da zonet er retret  
D'ha ober pinijen.

Me c'houlén, etc.

Inspiret oc'h eus d'in-me  
Eur guir goutrision,  
Laket oc'h eus em ene  
Esperans va fardon.

Me c'houlén, etc.

Gant gras santel va Doue,  
Eur joausdet guirion  
So diskennet em ene  
Dre ho proteksion.

Me c'houlén, etc.

O vont emez an ty-man  
Va c'halon so rannet ;  
Mes ennoc'h en em fian  
C'hui vo ganin bepret.

Me c'houlén, etc.

---

DA GANA GOUDE EUR RETRET.

*Ton Kelven.*

Or breudeur ker, kristenien,  
Er retrejou zantel  
Oc'h eus kavet guir voyen  
Da chom bepret fidel  
Da lesenou o Toue  
Dre c'hrassou krenv meurbet,  
Ha gass zur oc'h ene  
Da bales an Drindet

Rag ze eta da Zoue  
Rentet bepret grassou,  
Paz e guelc'het oc'h ene  
Dre ar zakramancho ;  
Pedet bepret a galon  
Eun Doue zo ker mad,  
Hac o kour devosion  
A rei dec'h oll fin vad.

Pedet bemde ar Verc'hes,  
Rouanes eus an Ee,  
Ma vo dec'h avokades  
Ha hed oc'h oll vue ;

O heulian e vertuïou,  
C'houi a redo bepret  
En hent demeus an evou,  
Hag oll c'houi vo zalvet.





